

**Y. MIOSSEC**

**O FOETA BRO**

**ER HANADA**

**(1978)**

**STUDI N°19**

**Miz Even/Juin 1981**

Section de Celtique  
Faculté des Lettres de Brest  
Université de Bretagne Occidentale •

**Y. MIOSSEC**

**O FOETA BRO**

**ER HANADA**

**(1978)**

**STUDI N°19**

**Miz Even/Juin 1981**

Section de Celtique  
Faculté des Lettres de Brest  
Université de Bretagne Occidentale

A nos lecteurs

Le récit que nous avons le plaisir de vous présenter dans ce volume est l'œuvre de Yves MIOSSIC, professeur de Lettres honoraire, qui nous a déjà proposé dans un numéro précédent, la relation d'un voyage dans les parcs nationaux des Etats-Unis en 1976. Voyageur passionné, il nous relate ici ses impressions sur l'immense Canada, qu'il a visité en automobile au cours de l'été 1978 avec des amis.

Le texte est riche à bien des égards, et tout d'abord, par son contenu : l'auteur est un observateur remarquable, qui sait retenir et raconter avec précision tout ce qui peut sembler nouveau et frappant aux yeux d'un Breton se rendant dans ce pays. Il nous décrit les lieux qu'il traverse, nous parle de leur histoire et nous fait partager ses rencontres et ses conversations. Nous apprenons à quoi ressemblent les maisons, comment vivent les Canadiens et aussi ce qu'ils mangent, ce qu'ils pensent de notre pays.

La langue utilisée est celle d'un homme cultivé dont, soulignons-le, le breton est la langue maternelle. On pense en le lisant à la langue classique de Feiz ha Breiz qu'écrivait Gabriel Morvan (voir Studi n° 11), basée sur l'usage authentique d'une région dont le parler a servi de modèle au breton littéraire. Basé sur la langue de Guiclan, son breton est facilement accessible à tous.

Du point de vue pédagogique, on ne saurait trop y insister, la lecture de ce texte est à recommander aux élèves des cours de breton, et les maîtres pourront s'en servir en vue de la préparation à l'épreuve du baccalauréat.

Nous tenons à remercier madame Odile Richard, secrétaire de la section de Celtique et du Centre de Recherche Bretonne et Celtique, qui a assuré la dactylographie avec sa gentillesse et sa compétence habituelles et monsieur Gilles Couix, dessinateur à l'U.B.O., qui a accepté de réaliser les illustrations.

Les directeurs de la collection,

Jean Le Du. Yves Le Berre.

Le 1974 est une année de grands changements pour le monde. Les événements de l'année dernière, les guerres, les révolutions, les crises, les tensions, les espoirs, les rêves, les luttes, les victoires, les défaites, les espoirs, les rêves, les luttes, les victoires, les défaites, les espoirs, les rêves, les luttes, les victoires, les défaites...

En cette année à nos lecteurs, et tout d'abord, nous tenons à leur dire un immense merci pour leur confiance et leur fidélité. C'est un plaisir immense de leur parler et de leur offrir ce journal. Nous sommes convaincus que ce journal leur apportera une aide précieuse dans leur vie quotidienne.

En outre, nous tenons à leur offrir un service de qualité. Nous sommes convaincus que ce journal leur apportera une aide précieuse dans leur vie quotidienne. Nous sommes convaincus que ce journal leur apportera une aide précieuse dans leur vie quotidienne.


Enfin, nous tenons à leur offrir un service de qualité. Nous sommes convaincus que ce journal leur apportera une aide précieuse dans leur vie quotidienne.

Enfin, nous tenons à leur offrir un service de qualité. Nous sommes convaincus que ce journal leur apportera une aide précieuse dans leur vie quotidienne.

Enfin, nous tenons à leur offrir un service de qualité. Nous sommes convaincus que ce journal leur apportera une aide précieuse dans leur vie quotidienne.




LE CANADA



KARTENN AR HANADA

An anoiou war ar gartenn


- 1 - Fort Erié
- 2 - Niagara
- 3 - Toronto
- 4 - Kingston
- 5 - Prescott
- 6 - OTTAWA
- 7 - Montréal
- 8 - 3 Rivières
- 9 - La Tuque
- 10 - La Pèrade
- 11 - QUEBEC
- 12 - Chicoutimi
- 13 - Roberval
- 14 - St Simeon
- 15 - Tadoussac
- 16 - Rivière du Loup
- 17 - Ste Flavie
- 18 - Gaspé
- 19 - Percé
- 20 - Matapédia




KARTENN AR VEAJ ER ZAV-HEOL

An anoiou war ar gartenn

- 1 - Calgary
- 2 - Banff
- 3 - Sunwapta Pass
- 4 - Jasper
- 5 - Tête Jaune Cache
- 6 - Kamloop
- 7 - Lytton
- 8 - Hope
- 9 - Vancouver
- 10 - Tsawassen
- 11 - Victoria
- 12 - Penticton
- 13 - Revelstoke
- 14 - Rogers Pass
- 15 - Windermere
- 16 - Fort Mac Leod



DETAILED MAP OF THE REGION



KARTENN AR VEAJ ER HUZ-HEOL

1) Kenta pennad

Da foeta bro er Hanada

Daou vloaz zo dija em-oa greet eur veaj hir en Amerik, e tu Kuz-Heol ar Stadou-Unanet. Eet e oan di gand daou vignon euz Lyon, Louis, am-oa greet anaoudegez qantañ epad ar brezel diweza, pa oam on-daou prizonidi en Almagn, hag e hwreg, Marie-Louise. Eur veaj gaer hag em-eus skrivet, eur pennad-ze, en eun tamm levr bihan, eul lodenn euz ar pez am-oa gwelet oh ober anezi.

Abaoc ar veaj-ze, on-eus santet on-zri, beb bloaz, an oad o poueza eun tammig muioh war on diskoaz. Med, henn gouzoud a rit mad, ar paou-kêz den, war an tamm-douar-mañ, kaer e-neus kosaad, ne deu ket tamm ebed da furaad. Dreist-oll pa gouez warnañ ar c'hoant da vond da foeta bro. Ouz ar c'hoant-ze, n'eus den ebed gouest da herzel, da vihanna pa vez krog mad ennañ.

Ni, Louis ha me, a wel anezañ o kregi ennom aliez awalh. Marteze ez eo bet broudet ennom gand ar pemp bloaz on-oa bet ranket, eiz vloaz ha tregont-ze, tremen en desped deom a-dreñv an orjal dreineg, heb gelloud biskoaz mond da ober eur paz er-mêz. Eur seurt tra a zo gouest, sur, goude, da lakaad meur a hini da ober evel ar Boudedeo.

"Perag, a lavar Louis din en eul lizer da viz here 1977, ne 'z afem ket eur wech all, er bloavez a zeu, da ober eun dro d'an Amerik ? Yah ha divorfil awalh om c'hoaz. Traou kaer a chom ganeom eno aleiz da weled ha da zeski. Deom-ta adarre e roud. Med en taol-mañ, deom kentoh d'ar Hanada. Ne gav ket dit e talv ar boan mond beteg eno ivez ? Mond a hellfem d'ar memez poent-bloaz, araog ma vo re domm an amzer."

Anzav a rankan n'eo ket tost din kas Louis da sutal pa glask evel-se tenta ahanon eun dro all.

Ar hontrol eo.

En em lakaad a ran dioustu, a-zevri, da studia kement levr am-eus war ar Hanada hag ar gartennou a houlennan digand ambassadeur ar vro-ze e Pariz digas din.

Evel en om beaj all, om-bo adarre eur miz-hanter da ober on zro.

Med eur miz-hanter a base buan. Ne vez ket kalz a amzer da goll, setu e vez red renka mad toud an traou araog mond e roud.

Eur pennad mad a lakom da studia on beaj, ouspenn tri miz. Med da hanter miz meurzh 1978 ez eo reizet toud an traou ganeom dre ar munud. Gweled a raim goude ez int bet reizet mad, rag, evel en taol all, n'on-bo ket da houzañv war an hent nag an disterra darvoud na zoken e neb leh an disterra dale.

Ar veaj a vo greet adarre gand ar harr-nij ha gand an oto:ar harr-nij, da vond euz Pariz da Vontreal ha, goude, euz Montreal da Calgary, e rann-vro an Alberta.

Rag on menoz zo chom daou zevez warn-ugent en tu-mañ d'ar vro, e tu ar Zav-Heol, tu ar mor Atlantik, e rann-vro an Ontario hag e rann-vro Quebec, ha goude, tri devez warn-ugent, en tu all, e tu ar Huz-Heol, tu ar mor (Pasifik), e rann-vro an Alberta hag e rann-vro ar Holombi Britanik.

An oto. Unan a fermim, da genta e Montreal hag eben goude, e Calgary.

Toud, karr-nij, oto hag an oteliou er hêriou braz, e Montreal, e Toronto, e Ottawa, e Calgary hag e Vancouver, e lakom o derhel euz Brest. Pa em gavim n'on-bo da ober nemed mond didrabas gand an hent. An oteliou all, pe gentoh ar moteliou, e kavim anezo heb poan ebed, dre ma'z aim, er bourkou bihan, kalz gwelloc'h marhad (beza ma 'z int ken kaer) ha kalz tranqilloh eged re gêr.

Ne hellin ket komz euz toud an traou am-eus gwelet er Hanada. Ne deuo kaoz ganen nemed euz ar re o-deus skoet ar muia va daoulagad ha va spered.

## 2) Eil pennad

### Eur vro vraz

Room da genta eun taol-lagad d'ar vro a-bez. An dra genta a sko daoulagad ha spered eur Breizad, pa en em gav er Hanada, eo brazder ar vro. War ar poent-ze, evitañ hag evid n'eus forzh pe European, ar Hanada, evel ar Stadoù-Unanet, zo eur bed all. Poan e-nez atao o lakaad en e benn pegen braz int.

N'ho-peus nemed zoñjal. E tu ar Zav-Heol, euz Montreal, e rann-vro Quebec, beteg ar mor Atlantik, en tu all da enezenn "an Douar Hevez" ha da rann-vro an "Nouvelle Ecosse", ez eus dija 1600 kilometr, kalz pelloc'h eged euz Brest beteg Marseille. Goude, war-zu ar Huz-Heol, etre Montreal ha Calgary, e rann-vro an Alberta, ez eus 3882 kilometr. Med, euz Calgary beteg Vancouver, war bord ar mor Pasifik, e rann-vro ar Holombi Britanik, ez eus c'hoaz 1187 kilometr.

Setu, euz Halifax, ker-benn ar "Nouvelle Ecosse", beteg Vancouver, er Holombi Britanik, ez eus 6206 kilometr, da lavared eo kalz pelloc'h eged euz Pariz da Vontreal. Ken ledan eo ar vro ma laka an trêñ tri devez ha teir nozvez evid mond euz an eil tu d'egile ha ma weler an eur o cheñch peder gwech e-pad ar veaj. Pa vez eiz eur diouz ar mintin e Halifax, ne vez c'hoaz nemed peder eur e Vancouver. Er Hanada, pa vezer o veaji, e ranker beza atao war evez war ar poent-ze. Ahend-all e heller beza estonet meur a wech, pe zoken paket fall.

Ma 'z it d'ar restorant da glask ho lein da greisteiz, pa vezit o vond war-zu ar Huz-Heol, lakom euz rann-vro an Alberta da hini ar Holombi Britanik, e hellit klevet an ostizez o respond deoh: "Med, aotrou, re abred emao. N'eo c'hoaz nemed unneg eur. Eun eur e rankoh gortoz". Goulskoude, pa zellit ouz o montr eur wech all, ez oh estonet o weled e verk mad kreisteiz. Ne deu ket deoh dioustu soñjal ho-peus ankounac'haet emao eun eur araog an heol hag ez eo dleet deoh lakaad nadoziou ho montr da zond eun eur war o hiz. Er hontrou, ma 'z it war-zu ar Zav-Heol e hell en em gavoud gwasoh ganeoh. Ma en em gavit da eun eur euz ho montr, e hellit klevet: "Med, aotrou, re ziwezad eo bremañ. Echu eo ganeom da zervicha lein. Div eur eo dija". Hag ho-po eun hanter-devez all da hortoz evid kaoud eun dra bennag da zebri, gand ho kov o tigas da zoñj deoh n'ho-peus ket kollet anezañ en eur heskina ahanoh heb ehan. En taol-mañ ho-peus ankounac'haet rei eun dro d'an nadoziou evid o lakaad eun eur araog. Rag, pa 'z it war-zu ar Zav-Heol, lakom euz ar Holombi Britanik d'an Alberta, an heol a hounid warnoh.

Med, rankoud gortoz koan evid debri, pa ne vez bet lein ebed, n'eo ket eur wall dra. Eun hanter-devez yun ne ra biskoaz droug da zen ebed. Ar hontrou eo. Derhel a ra digor ar galon ha deski a ra kaoud eun tamm pasianted.

Kalz gwasoh a hell en em gavoud. Lakom emaoñ, d'ar gwener, da ziv eur goude lein, hervez ho Montr, o kuitaad ar Holombi Britanik evid mond en Alberta. Ma n'eus gweneg ebed ken en ho yalh, abalamour ma 'z eo bet re vrokuz ho kwreg gand he moneiz e Vancouver, ez eo mall ganeoh en em gavoud e Calgary evid mond d'ar bank da houlenn arhant. Med eno ez eus eur zouezenn fall o hortoz ahanoh. Mond a rit da dougna o fri ouz an nor. Serr eo. Serret eo bet da deir eur just, evel partoud er Hanada. Eun eur re ziwedad oh en em gavet. Gand ho Montr n'eo nemed div eur c'hoaz, eur ar Holombi Britanik. Med e Calgary, ez eo teir eur dija.

Ma oa ho soñj kemered ar harr-nij d'an eur-ze evid distrei da Bariz, e rit kazeg en aero-porz. Ar harr-nij ne vo ket chomet d'ho hortoz. Eet eo kuit pell-ze dija. Red e vo deoh gedal an devez war-lerh hag ho-po neuze amzer awalh da zeski mad e ranker, er Hanada, derhel mad er spered ne heller ket eno, evel e Bro-Hall, kaoud partoud ar memez eur d'ar memez poent.

Ar Hanada zo brasoh eged an Europ a-bez, kontet zoken e-barz ar Rusi. An Europ zo dindanni 10 milion 236 mil kilometr kare. Dindan ar Hanada ez eus 11 milion 478 mil.

Red eo en em lakaad an dra-mañ er spered : ar vihanna euz ar peder rann-vro ez om bet enno, an Alberta, a zo brasoh eged ar Frañs ; dindanni ez eus 660 mil kilometr kare, pa n'ez eus dindan ar Frañs a-bez nemed 550 mil. Goude e teu ar Holombi Britanik gand 950 mil kilometr kare, an Ontario, gand 1 milion 068 mil (tost da ziou wech ar Frañs) ha rann-vro Quebec, gand 1 milion 540 mil (tost da deir gwech ar Frañs).

An dra-ze, a gav din, a ro éz da gompren perag, en eur miz-hanter, n'on-eus ket gwelad nemed peder rann-vro war an daouzeg a zo er Hanada.

### 3) Trede pennad

#### Ar steriou braz

En eur vro ken braz, e kaver ivez kalz a draou braz kenañ. Evel-se ar steriou, al lennou, al lammou-dour hag ar hoajou zo braz spontuz, kalz brasoh eged re an Europ.

Pa en em gaver er Hanada, ar henta tra a sko an daoulagad eo an dour. An dour a zo partoud, puill. E weled a reer o redeg e steriou braz, e weled a reer poulladet e meur a lenn vraz hag e milionou a lennou bihan, e weled a reer o koueza dre lammou-dour mantruz.

Gwir eo, n'eus ket da veza estonet.

Pa 'maom eno, d'ar 26 a viz mae, an erh hag ar skorn a zo o paouez teuzi. Deg devez kentoh, e oant teo c'hoaz war an douar ha zoken war ar ster Saint-Laurent.

Dond a ra deom c'hoaz bremañ kavoud, amañ hag a-hont, dreist-oll er hoajou, war an dorgennou uhel, tachennou goloet a erh oh echui da deuzi.

Hag an dour-ze, araog mond d'ar steriou pe d'al lennou, a chom pell en douar da lakaad an traou, fleur, gwez, plant a bep seurt, da zewel druz, koulz lavared en eun taol-kont.

Ar ster vrasa toud a-bell eo ar Saint-Laurent, unan euz brasa steriou ar bed. E Montreal, 1600 kilometr euz ar mor braz, he-deus dija ouspenn daou gilometr lehed ha deg metr donder. Soñjit mad petra eo an dra-ze : al Loire, e Bro-Hall, gand he 1010 kilometr, n'eo netra en he-hichen.

Ar bagou braz (re a bemp mil tonell warn-ugent) a hell mond warni beteg porz Montreal. Lavared a ranker ne vez ket atao heb eun tamm poan, rag an tréz hag al lehid, berniet er ster gand red an dour, a deu dezo cheñch plas aliez awalh. Ouspenn-ze, dirag Quebec, ar has gand an dour a deu da veza kalz kreñvoh, rag ar ster a strisa aleiz eno. War c'hweh pe zeiz kilometr n'he-deus ket ken nemed daouzeg kant metr lehed.

Med pelloh war-zu ar mor, e ledana adarre buan, ken buan ha ma kaver eno en he hreiz, nao pe zeg kilometr goude Quebec, eun enezenn anvet enezenn Orléans.

An enezenn-ze, evid eun enezenn hag a zo e kreiz eur ster, a zo eun enezenn vraz. Kalz eo brasoh eged Enez Eusa. Bez 'he-deus pemp kilometr ha tregont hed hag eiz kilometr lehed, en he ledanna. Eun enezenn gaer eo ivez, gand koajou braz war an hanter anezi, an hanter dosta da Gebec, hag en hanter all, e tu ar mor, tammou douar-labour ha koajou. An douar-labour a zo euz ar re wella, bet digaset eno gwechall gand dour ar ster.

Eun hent zo da ober tro an enezenn, eun hent braz a zeg ha tri-ugent kilometr hed.

Eun dudi e vez mond gand an hent-ze, a-hed ar hoajou, dindan ar gwez braz, hag a-hed ar parkeier, leun enno a wez avalou, a wez prun, a wez kerez hag a blant sivi, gwenn pe damm-ruz toud gand ar bleuñv da fin miz mae, pa 'maom eno.

Eun toullad mad a dud zo o chom en enezenn, pegwir ez eus 65 familh. En em zehel a reont e pemp bourk, pemp bourk hag o-eus peb hini anezo ano eur zant pe eur zantez : Sainte-Pétronille, Saint-François, Saint-Pierre, Saint-Laurent, Saint-Jean, hag en eur bourk all anvet Sainte-Famille. Ar 65 familh-ze a ziskenn toud euz ar re a oa deuet eno da chom tri hant vloaz just a vo er bloaz a zeu (1679). Hag er bloaz a zeu, toud ar familhou-ze a zo o zoñj, evid merka an trede kantved, ober eur gouel braz evid enori o zud koz, tud hag o-doa bet kalon awalh da zond di da veza keid all euz o bro.

En enezenn e heller c'hoaz gweled meur a di koz kaer bet savet d'ar poent-ze. Heñvel int toud ouz an tiez a veze savet d'ar memez amzer e bro an Normandie. An ilizou ivez a zo re ar memez bro en driwehved kantved.

Med ar vuhez en enezenn n'eo ket ken ar memez hini. Deuet eo da veza kalz èsoh. Bremañ ez eus eur pont da staga an enezenn euz an douar braz. Mond a ra dreist lodenn tu kleiz ar ster. Eur pont hir eo. Pa 'maom o vond d'e dreuzi en distro, Louis a lavar din : "Ar ster zo koulz lavared trohet e daou amañ gand an enezenn. Soñjal a ran e dlee kaoud lodenn an tumañ hag ar pont da dreuzi anezi da nebeuta pemp kant metr. Ne gav ket dit e welan just ?" - "Hann, a respontan dezañ ; kredi a ran o-deus kalz muioh. Me laka kentoh pemzeg pe c'hwezeg kant metr". N'eo ket tost, a welit, e vije ar memez muzul ganeom en on daoulagad. Med gelloud a raim prest gouzoud pehini ahanom a zo ar gwella gantañ. Hed ar pont ha lehed ar ster a zo heñvel. Setu pa 'z a an oto war ar pont, e sellom mad on-daou ouz ar honter. Hemañ en tu all a verk rik daou gilometr. On-daou e oa eet don on biz ganeom en on lagad. Kalz ledannoh eo al lodenn-ze euz ar ster eged ne gave deom !

Hag al lodenn a zo en tu all d'an enezenn zo ledannoh c'hoaz eun tamm brao. Donnoh eo ivez. En tu-ze eo e pase toud ar bagou.

Steriou braz a zo c'hoaz, meur a hini, e rann-vro an Ontario hag en hini Quebec. Ar re gaerra anezo zo an Outaouais, ar Saint-Maurice hag ar Saguenay. O Zeir emaint en tu kleiz d'ar Saint-Laurent hag o zeir ez eont da en em daol ennañ. O zeir int kalz hirroh, kalz ledannoh ha kalz donnoh eged al Loire, hirra ha brasa ster Bro-Hall. An hini genta, an Outaouais, zo just oh ober an disparti etre rann-vro an Ontario hag hini Quebec. An daou hent braz a zo etre Ottawa ha Montreal a heuill anezi penn-da-benn, unan e pep tu, ha, war an daou hant kilometr a zo etre an diou gêr, ne baouezet ket da zigeri braz an daoulagad hag ar genou o weled ar ster ken ledan, ken trankil an dour enni, en eun tu d'an hent, hag ar gwez braz er hoajou, en tu all.

Ar Saint-Maurice zo etre Montreal ha Quebec. En em daol a ra er Saint-Laurent e kêr Trois-Rivières, eur gêr vihan vras hag he-deus eun ano gouest da drompla an dud. Ne en em gav ket teir rivier e-barz e-giz ma lavar. Ne en em gav nemed unan, ar Saint-Maurice. Med hemañ, just araog dond e kêr, a zo lakaet da vond e tri brank gand diou enezenn. An tri brank a ra eno neuze evel ma vije teir rivier. Pa vezer o tond war-zu kêr dre ar Saint-Laurent e heller êz en em fasia en dro genta.

Ar Saint-Maurice, evel ar beurvrasa euz steriou ar Hanada, a deu d'an dour ennañ, e meur a blas, diskenn gand kas aleiz. Ne vez ket brao neuze mond gand ar vag warnañ.

Med peurliesha, e weler anezañ trankil kenañ, evel eul lenn. An hent braz da vond da Saint-Roc-de-Mékinac, da greiz bro ar Mauricie, a heuill anezañ penn-da-benn.

Eur blijadur dispar a vez mond gand an hent-ze. Mond a ra eeun-tenn, sao-diskenn, war dorgennou a 7-800 metr, etre ar gwez pin hag ar ster. Med aliez, en homañ, ne weler ket eur banne dour. N'eo ket dre ma vank an dour e-barz eo. Ar honter eo. An dour zo braz. Med goloet eo a dreujou koad teo diskrohennet, trohet toud heñvel, er memez hed, war-dro daou vetr, ha taolet goude en dour da veza kaset gantañ beteg ar milinou paper, brasa milinou paper a zo er bed. Diskenn a reont gantañ, stok ha stok, ken stank ha ma hellfed treuzi ar ster warno, beza ma deus da vihanna pemp kant metr lehed. An treujou a ra outi eur ster koad melen-rouz hag a ya buan pe houstad, hervez red an dour.

Gwechall e veze taolet ar gwez er ster en o fez hag e ranke tud mond warno d'o lakaad da ziskenn gand eur berchenn. Peb hini e-neze pemzeg pe ugent da gas. Eur vicher dañjeruz ha poaniuz evid ar paour-kêz tud ! Bremañ, trohet a dammou, ne chomont ket da dreina. Ma ya unan bennag da zouara war bord ar ster, ar holl n'eo ket braz, hag eun devez bennag, pa vo brasoh an dour, an tamm chomet war-lerh a yelo adarre gantañ.

Eno ez eo ar hoad eo a ra toud pinvidigez ar hêriou, kêriou bihan, pell an eil euz eben, en eur vro goloet a veneziou a zeiz pe eiz kant metr, bet krennet ha rontaet o hein dezo gand ar skorn braz pell-amzer-zo, ha leun a draoñennou kaer, striz ha don.

Ar Saguenay a zo eur ster vraz all, pelloh eged Quebec, war-zu ar mor. Dond a ra euz al lenn Saint-Jean. Al lenn-mañ zo, a-bell, ar brasa euz ar milierou (ar milionou marteze ; lavared a reer peb den euz rann-vro Quebec e-neus e lenn, kement ez eus) a lennou a zo er rann-vro, pegwir e-neus 226 kilometr tro.

Ar ster, pa deu euz al lenn, a zo dija eur ster ledan. Adaleg Chicoutimi, 52 kilometr euz al lenn, he-deus etre daou ha tri kilometr lehed koulz lavared beteg ar Saint-Laurent hag a-blasou ez eo don kenañ. Lavared a reer ez eus e-barz toullou hag o-deus beteg tri hant metr donder.

Unan eo euz kaerra steriou ar Hanada.

Etre kêr Chicoutimi hag ar Saint-Laurent, war gant kilometr, ez eus en daou du rehier a c'hweh pe zeiz kant metr uhelled, ken sonn ha mogerioù. Ar vag a base tost dezo da ziskouez mad pegen sonn int. Lavared a rafed ez int bet trohet net evid lakaad ar ster da vond etrezo. D'an neh ar gwez pin zo stank warno. Med, da weled, diouz ar vag, n'int ket brasoh eged ar gwez pin a vez lakaet e meur a iliz, da Houel-Nedeleg en-dro d'ar heo a vez savet d'ar mabig Jezuz, d'e dud, d'an azenn ha d'ar vloh.

Chom a reom eun nozvez e Chicoutimi. En devez war-lerh, ez eom da zeiz eur diouz ar mintin da bourmen gand ar vag war ar ster. An amzer n'eo ket kran. Du eo ha yen. Med ne ra ket a hlao. Setu e hellom chom war bont ar vag da zigeri braz on daoulagad hag on genou dirag ar menezioù a zo en daou du hag ar reier a gemer aleiz anezo, a-bell, furmou iskiz hag a cheñch dre ma tostaom outo. Eur blijadur vraz on-eus o selled outo.

War ar vag ez eus ganeom eun toullad bugale, eur hant bennag, paotred ha paotrezed a zaouzeg pe drizeg vloaz gand o mistri. Unan euz ar re-mañ, eur paotr yaouank barveg braz ha teo, tost d'e dregont vloaz, a oa bet tri bloaz-zo, skolaer e Brest. En em lakaad a ra da gaozeal ganeom. Med ne hell ket chom pell. Ar vugale, kerkent ha ma ouezont ez om euz Bro-Hall, a deu toud, laouen, you ganto, da en em voda en-dro deomp, pemp warn-ugent pe dregont en-dro da bep hini. A daolioù ilin eh em buntont da glask tostaad ouzom ar muia ma hellont, kuriuz, mall ganto da houlen mil dra diganeom diwar-benn Bro-Hall, diwar-benn ar feson da veva e-barz, diwar-benn ar skol .. ha diwar-benn n'ouzon ket pegement a draou all c'hoaz. Lavared a rafed, ouz o hleved, ez eo Bro-Hall evito eun espes Baradoz a glevont pell-zo kaozeal outañ, med a zo ken pell euz o bro ha ma deus poan o kredi ez eus outañ e gwirionez.

Ha bremañ, pa 'maom dirazo, pa glevont ahanom o kaozeal eur galleg eun tamm disheñvel ouz o hini, e chomont da zelled ouzom, da zelaou ahanom, eun herderr spontuz en o daoulagad digor braz, o klask tapoud, evid o zerhel da viskoaz, kement ger a deu ganeom. Mil boan on-eus zoken oh en em zizober outo pa deu deom ar poent da ziskenn euz ar vag. Araog mond kuit, e roan eur pez gwenn ugent real da bemp pe c'hweh anezo. Ar re-mañ a ya kuit d'ar haloup, en eur youhal hag en eur lammad, evel ma vijent penn-follet, kement a blijadur zo enno, o kaoud ar pez-ze. Evito ez eo, evid eur pennad, eun teñzor presiuz. Toud e teuont neuze da houlen diganeom lakaad dezo on sinador war an tamm paper a ginnigont deom. Pegeid e talhint soñj euz ar bourmenadenn-ze ? N'eo ket sur e chomfe pell en o spered. Med en devez-ze ez eo laouen o halon.

#### 4) Pevare pennad

##### Al lennou hag al lammou-dour

Er Hanada, ma 'z eus kalz a steriou braz, ez eus ivez eur bern lennou ha milierou a lammou-dour iskiz.

Lennou bihan a zo partoud, med dreist-oll e rann-vro an Ontario hag

e rann-vro Quebec. Eno, ne oar den ebed ped milier pe zoken pèd milion a zo.

Al lennou bihan-ze a vez eun dudi o gweled, e-harz ar menezioù, kuzet e-touez gwez braz ar hoajou, enno frêz ha net skeudenn ar houmoul gwenn, an oabl glaz hag ar gwez a zo tro-war-dro, en o dour sklêr glaz-gwer. Dirazo, e teuer dioustu da zoñjal emaint eno evel mein glaz presiuz ken kaer eo o liou.

Lennou braz aleiz zo ivez, hag a zo peb hini anezo kentoh eur mor eged eul lenn.

Ni n'om ket bet nemed war bord teir lenn vraz : al lenn Erie, al lenn Ontario hag al lenn Saint-Jean.

Homañ a zo e rannvro Quebec, eun tamm uhellou war-zu an hanternoz eged Park Broadel al Laurentides. Beza ma 'z eo dija braz awalh gand he 226 kilometr tro, ez eo kalz bihannoh eged an diou all. Gweled a reer partoud an douar en-dro dezi.

Al lenn Erie hag al lenn Ontario zo o-diou e rann-vro an Ontario. Tost emaint an eil euz eben. N'eus etrezo nemed tri gilometr ha daou-ugent. Dour al lenn Erie a ya zoken da goueza el lenn Ontario. D'an hini genta n'on-eus greet nemed just rei eun taol-lagad goude beza bet o selled ouz lammou-dour an Niagara.

Al lenn Ontario, er hontrol, on-eus bet leh da weled mad anezi, da genta pa oam bet e kêr Toronto, (homañ a zo just war hê bord) ; goude, pa oam o vond beteg lammou-dour an Niagara, rag an hent a heuill anezi e-pad eur pennad brao ; hag eur wech all pa oam o tistrei da Vontreal. Neuze eo on-eus bet ar muia a amzer da zelled outi, pegwir an hent a ya penn-da benn gand tu hanternoz al lenn.

Pa vezer dirazi, e lavarfed emae dirag ar mor, ken braz eo : bez'he-deus tri hant kilometr hed, keid hag euz Brest da Laval. Med n'he-deus nemed etre tri-ugent ha kant kilometr lehed. An dra-mañ, sur, n'eo ket kalz evid eur mor. Awalh eo goulskoude evid mired, pa vezer en eun tu (lakom e Toronto) na hellfed gweled an douar en tu all.

Pa vez brao an amzer, e vez warni ar memez gwagennoù bihan ha war ar mor ha, pa vez kreñv an avel, ar memez tarziou dirollet. Warni e weler ar memez bagou braz ha war ar mor. Dond a reont dre ar Saint-Laurent evid mond kalz pelloh war-zu al lennou braz all, al lenn Erie, al lenn Huron hag al lenn Superieur.

Da lakaad anezi da veza disheñvel ouz ar mor, n'eus netra nemed n'eus mare ebed e-barz ha n'eus en dour nag hollen na bezin.

Ar sterioù braz hag al lennou, braz ha bihan, ken niveruz er Hanada, a vez atao traou kaer da weled. Marteze goulskoude, n'int ket ken iskiz hag al lammou-dour.

Ar re-mañ a zo gouest da skei muioh c'hoaz an daoulagad hag ar spered.

Aleiz a zo anezo. N'eus ket eur ster, memez ar re vrasa, hag a ne vije ket warno da nebeuta daou pe dri lamm-dour araog ma 'h en em gavont war an douar plên.

Med n'eus hini ebed par da lammou-dour an Niagara, brudet pelle-zo dre ar bed oll. Meur a hini, a gredan, a zalh soñj c'hoaz euz ar pez a skrive diwar-o-fenn, er hantved diweza, ar skrivaniar braz Chateaubriand. Va fluenn din-me a zo gourd ha paour e-kichen hini hennez. Ar pez a deuo ganti ne hello e mod ebed tostaad ouz ar pez a oa deuet gand e hini. En e-gichen e vo displeet, dinerz ha diliv. Kavoud a ra din goulskoude ez eo dleet din ober eun tamm esa da ziskouez ar pez am-eus gwelet.

An ano a Niagara n'eo nemed ano eur pennad ster, an hini a zigas dour al lenn Erie d'al lenn Ontario, eur pennad hag a n'eo e gwirionez nemed ar Saint-Laurent. Eur pennad berr a dri gilometr ha daou-ugent. Med etre an diou lenn, ez eus eun tamm mad a bant : al lenn Erie zo kant metr uhellou eged an Ontario. Setu ez eus ouspenn daou vetr pant dre gilometr.

Abalamour da ze, an dour ledet ledan war ar pennad-ze, a zo eur has spontuz gantañ, kement ha ma ne vije bag ebed gouest da vond warnañ.

Med a-greiz-toud, pa vez o vond a-benn-kas, eh en em gav war eur fraill, pe war eun troh, ledan ha don er roh, eun troh hag a ra dezañ ober eul lamm spontuz a 55 metr, pe gentoh daou lamm, unan e pep tu d'ar ster.

An hini brasa euz an daou lamm-dour-ze a zo unan euz an iskisa traou a hellfed gweled dre ar bed.

O-daou emaint eno evel ma oant pa noa nwelet Chateaubriand anezo, er bloaz 1791, e-pad an Dispah Braz. N'eus nemed an traou a zo en-dro dezo hag o-dije cheñchet.

E-leh ar hoajou braz a oa eno d'ar poent-se partoud, ez eus bremañ diou gêr vihan : unan zivalo gand he ziez re uhel, er Stadou-Unanet ; eben, kalz braoh, er Hanada. Homañ n'eus ti uhel ebed e-barz, da vihanna n'eus tour uhel ebed.

Goulskoude ar pezh e-neus lakaet ar muia a cheñchamant da zond, a zoñjan, eo an hent braz a zo bet greet a-hed ar ster hag a zigas bemdez bremañ, en eul leh hag a ne veze den ebed ennañ koulz lavared kant vloaz-ze, milierou a otojou ha berniou tud.

Med nag an tiez, nag an otojou, nag an dud ne hellont mired ouz al lammou-dour da chom atao eun dra iskiz da weled.

Eur pennad brao araog ma 'h en em gav war al lammou, war-dro 1600 metr araog, dour ar ster a zo trohet e daou gand penn eun enezenn. Goat Island a vez greet outi (Enezenn ar havr). En enezenn-ze, e-leh ar brouskoad fall a oa e-barz gwechall, ez eus bremañ eur park plijuz awalh.

Al lodenn vrasa, a-bell, euz an dour a en em daol e tu ar Hanada. Al lodenn all a ya e tu ar Stadou-Unanet.

Setu ez eus e gwirionez daou lamm-dour, distaget mad an eil euz egile, pemp kant metr da nebeuta, gand an enezenn.

N'o-deus ket o-daou ar memez hed, na tost, nag ar memez furm ha n'eo ket tost dezo beza na ken braz na ken kaer.

An hini brasa, an hini kaerra, hini tu ar Hanada, a zo bet roet dezañ an ano a Horse Shoe (an Houarn-Marh), abalamour me neus eun tamm furm eun houarn-marh. Eun houarn braz, digor e gosteziou war-zu an traoñ. Eun houarn-marh hag a zo gantañ tost da eiz kant metr tro (787 metr). Eun houarn-marh hag a base warnañ beb munut da goueza, pemp metr hag hanter-kant izelloh, pevar-hant mil metr kub a zour. Pevar-hant mil metr kub a ra reno beb munut eul lamm a bemp metr hag hanter-kant !

Eul lamm spontuz ! N'eo ket goulskoude lamm-dour uhella ar Hanada, na tost. Meur a hini all a zo kalz uhelloh. E rann-vro Quebec, deg pe zaouzeg kilometr euz Quebec, war-zu ar mor, ez eus unan, anvet lamm-dour Montmorency. En hennez an dour a gouez euz pemp metr ha pevar-ugent. Tregont metr muioh ! Eul lamm-dour kaer eo, med n'eo netra e-kichen hini braz an Niagara. N'eo ket zoken e mod ebed par d'an hini bihan.

Lamm-dour braz an Niagara zo mantruz da weled. Ne gredan ket e hellfe den ebed tostaad outañ heb beza da genta skoet gand ar spont. Kemend all a zour o koueza en eun taol-kont war gemend all a hed, oh ober eul lamm ken uhel gand kement a drouz ! Lavared a rafed dirazañ emañ distroet da boent an dour diluj, pa oa an dour diweza o vond kuit. Soñjit e kouez eno dirag ho taoulagad, beb segondenn daou pe dri milion a litradou dour o vond da bulluha d'an traoñ war ar reier.

An dour, d'an neh, dre ma tosta ouz bord ar roh, ouz bord an troh, a red buannah buanna, gwenn gand an eonenn. Strinka a ra uhel en êr war gemend roh a gav war e hent. Netra ne hell ken herzel ouz al lañs a zo gantañ eno. Den ebed ne hellfe gouzoud pegement a nerz a zo gantañ pa ra e lamm diwar ar roh. Pa ra e dro da goueza war he bord e-neus marteze daou vetr donder. Eno neuze e kemer eul liou kaer : gwer, eun tamm gwennaet a-blasou gand an êr a ya ennañ ha gand an eonenn, melenaet a-blasou all gand ar pri a gas gantañ, mesket ennañ. Tarza a ra d'an traoñ gand eur harnach skrijuz, gouest da lakaad meur a hini da grena. War ar reier eno ez eo evel pulluhet hag e weler eul lodenn vad anezañ o sevel en êr ouspenn kant metr, penn-da-benn an houarn-marh, en eur vogedenn, en eur goumoulenn wenn ken teo ha ma kuz toud an traou beteg an traoñ. Ne weler ket an dour o koueza war ar reier.

Ne weler ket anezañ nemed kant pe zaou hant metr izelloh o tiboucha a zindan ar vogedenn en eur ruilla, en eur vouilla, en droidella gand eun nerz spontuz, kement ha ma laka seiz pe eiz kant metr da drankillaad eun tamm.

An eil lamm-dour, en tu all d'an enezenn, n'eo ket tost dezañ beza ken kaer. Eur pennad brao a hed e-neus goulskoude, pegwir e-neus tri-hant metr. Med n'eus ket kement a zour warnañ ha n'eus ket tost kement a gas gantañ. Ne en em gav warnañ nemed war-dro daou vil metr kub beb munut, ugent

gwech nebeutoh eged war al lamm-dour braz. Med ouspenn, an troh er roh a zo troet disheñvel. Troet eo a-hed ar ster. Setu an dour, araog dond da goueza, a rank ober eun dro hag a droh dezañ toud e lañs.

Dre ma n'eus ket kement a gas gantañ, dre ma n'eus ket kement a zour, dre ma 'z eo goloet toud an drouz a ra gand hini al lamm-dour all, hemañ ne sko ket kement, na tost, nag an daoulagad nag ar spered. Ar re-mañ a dro dioustu war-zu al lamm braz hag a ne zistagont ket ken dioutañ.

N'eus forz pegen spontuz eo ar ster hag al lamm-dour, ez eus bet tud hardiz awalh, pe gentoh dievez awalh, evid soñjal klask diskenn d'an traoñ gand red an dour pe dreuzi anezo a-ziouto.

Aleiz anezo o-deus laosket o buhez en eun dra ken riskluz. Evel-se, Steve Peere, wardro ar bloaz 1830 hag Matthew Webb, d'ar bevar warn-ugent a viz gouere 1883.

Eun den all, anvet Carlisle D. Graham, e-noa lakaet en e benn, tri bloaz goude, diskenn ar ster en eur varrikenn greet gantañ e-unan, rag toneller e oa. E varrikenn a ranke beza unan vad, pegwir e oe eüruz awalh evid gelloud dond er-mêz euz an dour. Med bet e oa hejet ha brallet awalh evid koll ar c'hoant da ober eun dro all.

Er bloaz 1901, eur vaouez, Annie Taylor, a zavas ivez ar c'hoant ganti da ober kement hag heñ. En em lakaad a reas eveldañ en eur varrikenn vad, eur sternañ kreñv en-dro dezi ha meur a dorchenn dindanni. Ar ster hag al lamm-dour ne baouezjont ket d'he heja ha d'he lakaad da vranskellad e-pad 17 munut araog he has war ar reier el leh ma oe mil boan o terhel ar varrikenn gand krapinellou hag o sacha anezi beteg an douar. Pa oe tennet er-mêz, ar paour-kêz maouez a oe hanter-vatouellet; toud he horv e gwad.

Eur pennad brao araog, er bloaz 1859, eur Gall (J.F. Gravelet a oa e ano; med anavezet e oa kalz gwelloc'h dindan e lez-ano: Blondin) a dreuzas toud lehed ar ster, med war eun orjalenn. E vicher a oa, er sirk brudet Barnum, dañsal ha bale war eun orjalenn.

Talvoud a ra ar boan konta an abadenn. C'hoarvezoud a reas da viz even 1859. An orjalenn a oe lakaet en e flas a-benn pemp eur goude lein. Da bemp eur just, an den a zo en e zao warni, prest da staga da dreuzi ar ster.

Eur bern tud a zo deuet e pep tu da zelled outañ ha marteze da hedal anezañ da goueza.

Med mond a ra, trankil da genta, gand kalz a evez. Evid en em zerhel êsoh war an orjalenn, e talh e kempouez en e zaou zorn eur berchenn a drizeg metr. War raog e ya êz ha sur eur pennad brao. Med goude e fell dezañ en em lakaad da ober van da vranskellad, da gaoud aon, da gaoud poan oh en em zerhel, kement ha ma teu an dud en traoñ, en daou du d'ar ster, da gemered aon. Lod a you, lod all a gren o weled anezañ, o daoulagad stegn war-zu ennañ.

En em gavet e kreiz ar ster, el leh ma 'mañ an izella an orjalenn, e kendalh da lakaad homañ da vranskellad. An dud neuze o-deus poan o kredi o daoulagad: eun den ken bihan da weled eno, keid all outo, d'an neh a-zioh eul lamm-dour ken spontuz! Har eun orjalenn ken moan! A-veh ma weler anezi just a-zioh ar penn en daou du. E kreiz, an den a zo evel ma vije en êr heb netra dindan e dreid.

Eno zoken e weler anezañ o chom a-zav eur pennad, amzer awalh da leuskel eur gordenn da ziskenn beteg ar vâg a zo en traoñ. War homañ, eun den all a stag eur voutaillad champagn ouz ar gordenn. Heñ a zach anezi beteg ennañ hag a ev djou pe deir lonkad ken êz ha ma vije bet er gêr ouz taol. Etretant, ar re a zo o selled outañ a zo kentoh dizeh o horzaillen, kement a herder hag a enkreiz a zo enno.

Goude, eh en em laka da zevel tamm ha tamm war-zu an tu all, war-zu tu ar Hanada. Tost emañ dija d'ar penn, pa weler anezañ a-greiz-toud oh ober eul lamm-choug-e-benn. "Biskoaz kement all!" a zoñj an dud mañtret. Lod zoken n'int ket gouest da zouten an dra-ze, dreist-oll ar merhed, hag a kouezont semplet e-touez ar re all. Heñ a gendalh da vond beteg penn. En em gavet eno, e-leh diskenn, e tistro war e orjalenn hag e ya e-giz ma 'z eo deuet beteg an tu all. N'eo ket bet nemed triweh munut of ober e dro.

Med lakaet e-neus aleiz a aon da zevel e kalon eur bern tud hag ivez souezenn hag estlamm dirag kement a skañvder hag a hardizegez.

Goude an den-ze, kalz a re all a glaskas ober eveldañ. Lod a deuas a-benn da ober, med meur a hini a dorras eno e benn. Setu pell-ze, ar re a zo o veilla war ar ster ha war al lamm-dour ne fell ket dezo ken leuskel an dud da riskla o buhez evel ar re-ze.

Kement a zour oh ober e lamm eno n'emañ ket heb krignad ar roh dindannañ. He hrignad a ra zoken kement ha ma ya buan awalh war he-hiz.

E daou-hant vloaz, e-neus lakaet anezi da gila tost da dri-hant metr (285 metr). An dra-ze a ra ouspenn eur metr beb bloaz. Ma kendalh d'he hrignad ken buan-ze, ar roh, benn daou-hant vloaz all amañ, a vo eet war he-hiz pelloh eged penn uhella ar Goat-Island (Enezenn ar Havr) hag an dour a en em gavo toud da goueza en eul lamm nemed ken, eul lamm hag a vo neuze iskisoh c'hoaz eged an hini brasa bremañ.

Eun dra ken braz, ken iskiz, ken spontuz, ken kaer, e hellfed chom benvez, e-pad an deiz, da zelled outañ heb dond biskoaz da fasta gantañ, memez ma ne deufe ket dezañ cheñch e mod ebed.

Med eno, n'eus netra hag a chomfe heb cheñch an disterra pennad-amzer. Toud an traou a vez dirag an daoulagad a cheñch bepred. An dour o tond a-benn-kas da ober e lamm ne zalh ket nag ar memez furm nag ar memez liou : sevel ha diskenn a ra heb ehan ; mond a ra, euz ar glaz-gwenn sklêr beteg eur gwer hag a denn awechou da velen an traou louz ha zoken d'ar rouz. Ar vogedenn uhel a-zioutañ a deu, a ya, a zav, a ziskenn, hervez an avel, evel ma vije buhez enni. Ar ganevedenn a ra an heol warni, kerkent ha ma teu da bara warni (kaerra kanevedenn am-eus gwelet biskoaz), a deu en eun taol-kont kement liou a zo warni da veza flamm kenañ hag ivez ken buan da goll toud e nerz.

Kement all e vez skoet ar spered gand an drouz spontuz a ra an dour o tarza war ar reier ha gand ar fet ma santer toud an douar tro-war-dro o krena dindan ar pouez mantruz a deu da skei warnañ.

Med piou a hellfe kaoud eur bluenn fin ha kreñv awalh asamblez da rei da entent e gwirionez pegen braz, pegen iskiz, pegen kaer eo lamm-dour an Niagara ?

##### 5) Ar hoajou braz

En eur vro ken braz e kaver ivez koajou aleiz, koajou divent, dreist-oll er peder rann-vro ez om bet enno.

Koulz lavared toud an douar e rann-vro Quebec hag en hini ar Holombi Britanik, al lodenn vrasa euz hini an Ontario, el leh ma n'emañ ket dindan an dour, el leh ma n'eus ket a lennou, hag eul lodenn vad, marteze an hanter, euz an Alberta, zo dindan goad.

Eno ar hoajou zo partoud, evel an dour, en draoñiennoù, war ar gompezennoù uhel (nemed el leh ma vez re zeh an amzer, evel en Alberta), ha war gostezioù ar menezioù, uhel warno zoken. Sevel a reont warno koulz lavared beteg an erh hag ar skorn. Lavared a rafed, pa 'z eer gand an henchou, n'eus fin ebed d'ar hoajou. Mond a reer war zaou-hant, war dri-hant kilometr, heb gweled netra all en daou du d'an hent braz nemed gwez. Dond a reer zoken awechou da fasta o weled anezo. Eüruzamant, beb an amzer e teu eul lenn gaer, glaz ha trankil an dour enni, da ober eun toull en o-zouez. Al lenn a zo eno evel eun tachad tokenn war benn eun den, med eun tachad tokenn hag a vezer laouen ouz e weled.

Gwez, ha gwez atao a-hed an hent, sav-diskenn ! An hent n'eo, en o-zouez nemed eun troh striz eeun-tenn.

Med ar hoajou n'eo ket tost dezo beza heñvel en daou du d'ar vro.

E tu ar Zav-Heol, e rann-vro Quebec hag en hini an Ontario, n'eo nag uhel na teo ar gwez. Ne zavont ket kalz ouspenn deg metr. Just int braz ha teo awalh evid mond da ober paper pe botojou min. Re stank e vezont evid gelloud teoad muioh, ken stank ha ma 'h en em houlenner penaoz o-doa gelllet gwechall an Europeaned deuet da genta er vro mond da brena krehin loened gouez digand an Indianed pe da glask douar da labourad. N'eo ket gouest eun den da vond eno e-touez ar gwez. Re dost emaint an eil ouz eben hag ouspenn e vez teñval spontus dindanno.

Ar gwez, e rann-vro Quebec hag en Ontario, zo dreist-oll gwez pin, gwez sapr, gwez epinet (gwez eun tamm heñvel ouz ar sapr). Ar re-ze a ra partoud evel eul vantell hlaz-du teo war gein an douar.

Med en o-zouez e vez aliez meur a wezenn peupli ha skav-grah (érable) ha kalz a wez bezo. An tri seurt gwez-mañ a vez pourvuia a-vochadou e-touez ar pin, ar sapr hag an epinet pe war bord ar hoajou, o lakaad tachadou kalz sklêrroh war hlaz-du trist ar pin, ar sapr hag an epinet.

Ar gwez peupli zo eun tamm disheñvel ouz ar re a weler dre amañ e Breiz. Gwennoh eo o hrohenn ; evel arhantet eo. O deliou a zo gwer evel dre amañ, med krena a reont evel dre amañ re ar grenerez.

Ar gwez skav-grah zo prizet aleiz er Hanada. Gwez kaer int hag ouspenn, ez eus eur seurt anezo hag a laosk da zivera, d'an nevez-amzer, pa vez greet eun troh en o hrohenn, eur seo fonnuz. Hemañ, dastumet, a heller tenna outañ eur sirop hag eur sukr mad kenañ hag a blij aleiz d'ar Hanadianed.

Delienn ar gwez-ze a zo ivez eun delienn gaer. Ledan ha danteg, eun tamm heñvel ouz hini ar platan. En ho haerra e vez d'an diskar-amzer pa en em laka da ruzia. Ken kaer e vez neuze ha ma 'z eo bet kemeret gand gouarnamant ar Hanada evid beza ardamez ar vro war an drapo.

Hemañ a zo ruz gwenn ha ruz, gand delienn ruz ar skav-grah e kreiz ar gwenn.

Gwez bezo aleiz a zo ivez er hoajou. Ar re-mañ, beza ma ne vezont ket ken teo hag ar gwez all, a zo ivez gwez kaer, gand o hrohenn gwenn, eun tamm melen evel an dienn, merket a-blasou gand pikou pe varennou rouz. Sevel a reont uhel dreist ar gwez all. Med ar beurvrasa anezo a vez neuze dibennet e-pad ar goañv gand ar skorn hag an avel foll. Ne zervich ket kalz dezo klask sevel dreist ar re all. O hoad a zo bresk ha pa deu o hreizenn da skorna e vez kalz breskoh c'hoaz. Ar henta taol avel greñv a deu neuze, dre ma n'o-dez goudor ebed, a zibenn anezo net, evel evid kastiza o ourgouill.

Mantret e chomer er wech kenta ma weler anezo evel-se, kollet o fenn ganto, e-touez toud ar gwez all, solud en o zav.

Gwez dero a gaver ivez, gwez kaer ; med nebeud awalh a vez outo. Eun tamm int disheñvel ouz ar gwez dero a vez dre amañ. O horv zo ken sonn, ken teo, ken kreñv ha ken skarnilet o hrohenn. Med o deliou n'o-deus ket ar memez furm. Dre amañ, deliou an dero a vez rond an dent warno. Eno e vezont begeg, eun tamm evel re ar gwez kistin.

Ar gwez a zo skignet stank partoud en drañhennou. Med e rann-vro an Ontario hag en hini Quebec, e teuont ivez brao war ar menezioù, rag ar re-mañ n'int ket uhel. Ne zavont ket kalz ouspenn eiz kant metr ha toud eo ront o heñ.

En Alberta hag er Holombi Britanik, er hontrol, ne 'z eont ket beteg an neh. Sevel a reont uhel goulskoude, koulz lavared beteg an erh hag ar skorn, partoud el leh ma kavont eun tamm douar da spega o gwrizioù.

En diou rann-vro-mañ, ar hoajou n'int ket heñvel ouz re an Ontario ha re rann-vro Quebec. Ma kaver atao enno ar memez gwez peupli, ar memez gwez dero, n'eo ket tost dezo beza ken niveruz e-touez ar gwez all. Memez ar skav-grah (érable) ne vez ket gwelet kement outo hag ar re a zo n'int ket euz ar memez seurt. Euz seo ar re-mañ ne heller ket tenna na sirop na sukr.

An epinet, ar pin hag ar sapr zoken n'int ket toud euz ar memez gouenn.

Ouspenn, e kaver eno eur seurt gwez all, gwez kaer kenañ, ar gwez sedr, a vez war o spillou evel eur gwiskad tano a arhant.

Med ar pez a zo eno ar muia disheñvel eo gwel ar hoajou. Ar gwez n'eo ket tost dezo beza ken stank enno. Stank int c'hoaz, sur, med e-leh beza koulz lavared stok-ha-stok, evel en Ontario hag e rann-vro Quebec, emaint eur pennad an eil ouz eben, eur metr-hanter pe zaou vetr, awalh da rei dezo er ha boued, kement ha ma 'z eo red dezo da gemered nerz, da zevel druz, uhel hag eeun-tenn.

Ar beurvrasa anezo o-deus hanter-kant, tri-ugent, deg ha tri-ugent metr. N'eo ket rouez zoken gweled re hag o-deus pevar-ugent, deg ha pevar-ugent pe gant metr, tost kement hag ar gwez a gaver, seiz pe eiz kant kilometr izelloh war-zu ar hreisteiz, er Haliforni, er Stadou-Unanet, el leh ma vez kalz tomoh an amzer.

Ar gwez a zo ar muia anezo a-bell en Alberta hag er Holombi Britanik eo ar gwez pin. Ar re-mañ a zo partoud ha ne baouezet ket da veza souezet ganto. Toud, beza ma savont outo o-unan euz an had kouezet war an douar, e vezont heñvel, med heñvel-poch, evel ma vije bet eur jardiner o planta anezo hag o taol evez warno. Toud int just ken uhel, toud eeun-tenn beteg ar beg, gand ar memez bochad brankou berr d'an neh war o beg, toud ken teo ha toud gand ar memez hrohenn ruz.

Paoamen Alberta, da fin miz even, e oa eun amzer dispar, na re domm na re fresk. Eun dudi e veze mond gand an hent braz dindan an oabl glaz.

An hent e-kreiz an draonienn, ne oa nemed eun troh striz er hoad pin. En daou du e welem, d'an neh, reier griz pe ruz kern ar moneziou, erh gwenn ha skorn teo warno pe en-dro dezo ; en traoñ, tostoh deom, korvou ruz ha sonn ar gwez pin, boned bihan glaz-du o spillou war o beg, alaouret gand bannou skeduz an heol mintin.

Beb an amzer, e teue da skei on daoulagad ha da dristaad on spered, eun dachenn vraz a zouar dizolo, teo ha du al ludu warnañ, hag, amañ hag a-hont, korv distruj eur wezenn vraz bennag chomet en he zav, he brankou noaz astennet war-zu an neñv evel divreh treud eur paou-kêz den mahagnet o pedi Doue da gaoud truez outañ. Petra a zo c'hoarvezet eno ? An tan-gwall, lakaet pe gand ar gurun pe gand eun den bennag dibreder. Med, n'eus forz pegen trist eo ar gwel, ez eo ivez leun a esperañs, rag eur bern plant yaouank a ziskouez dija o fenn, prest da zével buan war al ludu ha da gemered plas ar re zistrujet.

N'eus ket a goad partoud goulskoude. Neh ar menezioù uhel n'eus plantenn ebed warno. Eno, war ar roh, ne hell netra sevel, na brouskoad na yeot. Med bez' e weler awechou, war veneziou eun tamm izelloh, evel pa dostaer ouz kêr Kamloops, war bord an Thomson River, tachadou braz a zouar dizolo. Eno ar menezioù n'o-deus ket kalz ouspenn daouzeg kant metr. Warno ne weler ket ken nemed eur yeotenn dreud kaled, eun tamm arhantet, ha, beb an amzer, eun spes boul, deliou ha brankou dizeh eur blantenn heñvel awalh ouz lavand kreisteiz Bro-Hall, an hini a vez greet outi sage-brush er Stadou-lhanet hag a weler e kement dezert a zo eno.

Goude kêr Kamloops, e ranker mond eur pennad mad (hanter-kant pe dri-ugent kilometr), evid kavoud adarre ar hoajou braz, druz hag uhel ar gwez enno.

Er hoajou, e kaver ivez leun a steriou bihan hag a heller kaoud kalz a blijadur o selled outo.

C'hoarvezoud a ra aliez awalh, pa vezer o pourmen en o-hichenn, gweled penn eur hastor, just e fri hag e zaoulagad er-mêz, o lakaad an dour da griza en eur bunta eur brank dirazañ war-zu e di, pe eul luzenn ken braz hag eur zamon, war hed e kichen eur skos, pe c'hoaz teir pe beder luzenn all bihannoh oh ober n'ouzon ket ped lamm en eul leh trankil an dour ennañ.

E-touez ar gwez e kaver laboused a beb seurt heb paouez, dreist-oll kegined glaz-du, farsuz da weled gand eur bouch war o fenn ; kizier-koad aleiz o lanmad euz an eil brank war egile, o tond hag o vond euz an eil gwezenn d'eben ken buan ha luhed ; pe c'hoaz daou pe dri garo, re yaouank peurvuia, o chom a-zav, kuriuz, da zelled hag a-greiz-toud, oh ober eul lamm da vond kuit gand ar foeltr.

Eun dra all iskiz awalh e-neus skoet on daoulagad en Alberta hag er Holombi Britanik. Gweled a reer aliez eno war bord an hent, ha don zoken er hoajou, ar gwez diskrohenet net beteg an douar, war eur metr-hanter pe zaou. Petra a zo en em gavet ganto ? Netra nemed ez eo bet debret ar hrohen warno gand al loened gouez, ar hirvi, dreist-oll, e-pad ar goañv, pa ne gavent ket ken a yeot da beuri.

Ar hoajou a vez atao eun dra gaer da weled er Hanada ha tud aleiz a deu da bourmen enno. Med, ouspenn e roont d'ar vro eul lodenn vad euz he finvidigez, dre ma hell gwerza ker ar bevrvasa euz ar hoad da ober paper evid ar gazetennou, eur paper hag a vez goulen dezañ dre ar bed oll.

#### 6) C'hwehvet pennad

##### An dud a en em zalh er hêriou

Ar Hanada a zo eur vro vraz, med en eur vro ken braz, n'eus ket koulz lavared a dud. War 11 milion 478 mil kilometr kare, n'eus nemed tri milion warn-ugent a dud. En Europ, war eun tamm nebeutoh a zouar, ez eus 622 milion, tost da dregont gwech muioh.

Med n'eus ket da veza estonet. Ar Hanada a zo eur vro yen kenañ. El lodenn vrasa war-zu an hanternoz, an hini a vez greet outi Douarou an Hanternoz-Gwalarn (Territoires du Nord-Ouest) ez eo diêz spontuz beva. Eno ne deuz ket koulz lavared biskoaz nag an erh nag ar skorn. Eno, n'eus o chom nemed eun nebeud Eskimoed (war-dro hanter-kant mil) hag eun nebeud micherourien kaset di da glask petrol pe da labourad er miniou plom, kouevr, nickel, zink hag houarn.

Izelloh war-zu ar hreisteiz, e kêriou evel Montreal, ha zoken Toronto, ar goañv a vez c'hoaz hir ha kaled. Erruoud a ra da fin miz gwengolo ha ne echu ket araog hanter miz mae. E-pad ar pennad amzer-ze ne vez ket ral gweled daou vetr erh e kêr Montreal hag ar Saint-Laurent skornet an dour ennañ euz an eil tu d'egile, skornet ken teo ha ma heller e dreuzi war an troad heb riskl ebed.

N'eus nemed e tu ar Huz-Heol, er Holombi Britanik, e bord ar Mor Pasifik hag e kavfed eun amzer eun tamm klouarroh.

Lavared a ranker ivez, n'eus forz pegen estonabl eo, n'eus ket kalz a zouar-labour er Hanada. Ar bevrvasa a zo e kreisteiz diou rannvro, ar Manitoba hag ar Saskatchewan. Tachadou braz a zo ivez en Alberta, en hanter a zo e tu ar Zav-Heol. En teir ran-vro-ze, n'eus nemed tiegeziou braz, aleiz a zaou, a dri, a bevar mil devez-arad. Tiegeziou hag a ne vez ket kalz a dud war o-zro, rag ne vez lakaet enno nemed eun drevad, eun drevad gwiniz, hag a vez labouret oll gand machinou braz.

Pa'z eer dre greisteiz an teir rannvro-ze, euz ar harr-nij, etre Toronto ha Winnipeg, etre Winnipeg ha Saskatoon, etre Saskatoon ha Calgary, e weler plenennou gwiniz beteg an dremmvel ha plenennou gwiniz nemed ken. Beb an amzer, e kaver en o-zouez lojamant kaer eun tiegez braz, eur voger kare en-dro dezañ, ha, rouesoh, touriou uhel grignolou braz da lakaad greun, bodet a-blasou e bord eul linenn hent-houarn.

Eno ez eus nebeud a dud o veva.

Er ran-vroioù all, n'eo ket ken braz, na tost an douar-labour. E rannvro Quebec, ken braz all goulskoude, n'eus nemed e traonienn ar Saint-Laurent, en daou du d'ar ster, etrezi hag ar menezioù, hag endro d'al lenn Saint-Jean. Eno, ez eus douar leton aleiz hag a vez savet enno eun toullad mad a loened-korn. E rannvro an Ontario, en-dro d'all lennoù braz, hag ivez er Holombi Britanik, en eun draonienn bennag, eun tamm ledannoh eged ar re all, e vez lakaet da zond gwez frouez aleiz hag a ro frouez euz ar re wella, avalou, pechez, kerez hag abrikotez ; sivi zoken a vez kavet e meur a blas.

Med war ar miz n'eus ket kalz a dud o chom. Ar bevrvasa, deg ha tri-ugent dre gant, e-leh en em skigna dre ar vro a-bez, a zo en em vodet

en he hreisteiz, a-hed frontier ar Stadou-Unanet, war bord ar steriou, dreist-oll war bord ar Saint-Laurent, e rannvro Quebec, en-dro d'al lennoù braz, en Ontario, hag en daou du, war bord ar mor (Halifax, Vancouver, Victoria...).

Tentet int bet zoken da en em vernia en eun niver bihan a gerioù braz.

E Montreal ez eus daou vilion eiz kant mil den, e Toronto, daou vilion tri-hant mil. An diou ger-ze zo a-bell an diou vrasa, med ivez a-bell an diou zivaloa. O-diou int kêriou bet savet buan, evel kêriou bras ar Stadou-Unanet, gand ruiou hir ha ledan eeun-tenn, gand leun a diez (pe gentoh a dourioù) a dregont pe zaou ugent estaj, gand leun a uzinoù braz hag a vez o siminalou noz-deiz o tisonka moged du ; kêriou leun a otojou braz, ken braz ha bagonioù hent-houarn hag a zo kement outo ha ma vez mil boan o lakaad anezo da vond ken buan hag eun den d'ar paz.

En diou gêr-ze, n'eus e peb hini anezo nemed eun dra gaer, ar parkoù braz a zo en o hreiz. Ar haerra a-bell eo hini Montreal. Hemañ zo war eun enezenn e kreiz ar Saint-Laurent. Eun enezenn hir ha ledan, a 48 kilometr hed hag a 16 kilometr lehed. Warni emañ ar park hag eul lodenn vad euz kêr. Ar park a zo anvet Park ar Menez Royal, abalamour ma 'mañ toud war eur menez a 233 metr uhelded (anvet gwechall : Mont Real ; heñ eo e-neus roet heano da gêr) ; eur menez kalz uheloh da weled eged e gwirionez, dre ma sav a-greiz-toud war douar plad an enezenn. Soñjal a reer ez eo eur menez-tan koz, kousket pell-ze. Warnañ ez eus eur hoad kaer a bevar-hant devez-arad, digor d'an oll. Tud Montreal a blij dezo mond da bourmen e-barz pe, e-pad an hañv, da labaskenna war tachadou douar-leton dalhet brao ha druz ar yeot warno.

E Toronto ez eus ivez parkoù brao, med n'eus hini ebed par da Bark ar Mont Royal e Montreal.

Bez' ez eus c'hoaz eun nebeud kêriou all, kalz bihannoh. An hini vrasa eo Vancouver, er Holombi Britanik, gand he 965 mil den. Ar re all, n'eus ket ouspenn 450 mil den enno. Ar hêriou-ze zo Ottawa, kêr-benn rannvro an Ontario ha kêr-benn ar Hanada, Quebec, kêr-benn rannvro Quebec, Winnipeg, kêr-benn rannvro ar Manitoba, Edmonton, kêr-benn an Alberta, Hamilton, e rannvro an Ontario, ha Calgary, en Alberta.

Euz toud ar hêriou-ze n'eus nemed diou gaer : Ottawa ha Quebec, disheñvel goulskoude an eil ouz eben.

Ottawa zo kaer, da genta, dre ma 'mañ en eul leh dispar, en eur horn-bro goloet a dorgennou ha just el leh ma teu ar ster vihan Rideau da en en daol er ster vraz Outaouais. Ar gêr a zo ar bevrvasa anezi war an dorgenn, e bord ar ster-mañ, a-zioh ar ster kentoh.

Ar gwel war ar ster, war an draoniennou ha war an dorgennou goloet a goajou braz, en daou du, a zo dispar. Mond a ra da goll pell, pell en drennwel.

Ar gêr zo kaer ivez dre ma 'z eo bet dalhet e-giz ma oa e kreiz ar hantved diweza. N'eus ket a diez uhel e-barz evel e Montreal hag e Toronto. Ar bevrvasa euz an tiez zo tiez izel. Ar re uhella zo tiez a dri pe bevar estaj, bet davet toud evel tiez Bro-Zaoz an amzer-ze.

Rag ar bevrvasa euz tud kêr a ziskenn euz ar Zaozon deuet eno d'ar poent-ze. Ar re-man o-doa digaset ganto o yez, o gizioù, o feson da veva hag o-doa savet tiez heñvel ouz ar re a oant o paouez kuitaad e Bro-Zaoz.

Souezuz eo gweled pegement ar Zaozon, beza ma vez tentet eun niver braz anezo da guitaad o bro, a zalh d'ar pez o-dez kavet enni.

E Ottawa, an tiez kaerra eo re ar gouarnamant.

Ar re-mañ zo war neh an dorgenn, distag mad euz kêr, war eun dachenn douar-leton hîr ha ledan. An ti brasa a zo a-hed ar ster. En hennez eo emañ ti an deputeed hag ar senadourien. En eur penn dezañ, med eur pennad outañ hag a-blom gantañ, emañ ti bureviou kenta ministr ar Hanada, an aotrou Trudeau. Er penn all, eur pennad outañ ivez hag a-blom gantañ evel egile, emañ ti bureviou ministr an transportou.

O zri int tiez kaer, bet savet evel tiez gouarnamant Londrez, hervez ar hiz goteg, hini ar bevarzegved hag ar bemzegved kantved. Warno o zri ez eus eun doenn gouevr deuet gand an amzer da gemered eul liou glaz brao kenañ.

A-zioh porched braz ti an deputeed hag ar senadourien, just en e greiz, ez eus eun tour brudet. Greet e vez outañ Tour ar Peoh. Eun tour uhel eo, pegwir e-neus eun tamm ouspenn kant metr. N'eus forz pegen kaer eo toud

talbenn an ti, ez eo hemañ eo a sko da genta an daoulagad. E neh an tour ez eus eur vrimbalerez hag a zo warni 53 kloh. Ar re-mañ a ya o fouez euz 9 lur, pouez an hini bihanna beteg unneg tonenn, pouez an hini pounerra. Karet em-mije kleved anezo o zon, med re abred e oam en em gavet e kêr. Ne vezont lakaet da zon nemed e-pad an hañv, da zevezioù kenta miz gouere.

Med kaerra kêr a zo e tu Sav-Heol ar Hanada eo Quebec. Hi a zo ivez a-bell ar gêr gosa. Hi eo kêr-benn rann-vro Quebec, beza ma 'z eo kalz bihannoh eged Montreal. Chomet eo eur gêr grenn, pegwir n'eus e-barz nemed pevar-hant mil den.

Gwintet eo, war bord ar Saint-Laurent, en tu kleiz, war eur roh uhel ha ledan. Just emañ el leh ma teu d'ar ster strisaad en eun taol-kont, evel yennet etre diou roh ken kaled ha ma ne hell ket dond a-benn d'o lakaad da bellaad, en desped d'an imor a zav eno ennañ hag a ra dezañ en em daol a-benn-kas outo.

Ar ster n'he-deus ket ken eno nemed eiz-kant metr lehed, ken nebeud ha ma teu an dour da gaoud 52 metr donder.

Tiez kreiz-kêr, e neh ar roh, ha re ar porz en traoñ, etre ar ster hag ar roh, a zo aleiz anezo tiez koz, tiez brao, bet savet ar bevrvasa e kreiz ar zeitegved kantved hag en driwehved.

Ar re gaerra eo ar seminêr koz, ar chapel vraz a zo ennañ ha kouent an Ursulinezed. Med bez' es eus meur a hini all brao, evel an hini anvet ti ar Maillou, eun ti braz bet savet etre 1648 ha 1650, dalhet mad en etad abaoe ; ti ar famill Touchet, bet savet diwezatoù er bloaz 1748, eun tamm bihannoh eged hennez, med brao kenañ ivez. En traoñ, e bord ar ster, emañ maner braz ar famill Chevalier, unan kaer, bet savet e kreiz an driwehved kantved.

Bez' ez eus ivez ilizou kaer, meur a hini, evel an diou ilis-veur, hini ar Zaozon, an iliz-veur anglikan, hag iliz-veur ar gatoliked.

Med an traoù kaerra e kêr Quebec eo c'hoaz ar baliou braz a zo a-hed ar ster hag ar Park braz, er-mêz euz kêr, anvet Park Plenenn Abraham, hag a zo dindannañ toud an douar a oa bet warnañ, en driwehved kantved, an emgann diweza etre ar Zaozon hag ar Hallaoued, an hini e-noa lakaet Bro-Hall da goll ar Hanada. Ar gwel euz ar baliou-ze hag euz ar Park, war ar ster, war an douar en tu all ha war-zu ar mor a zo eun dra dispar.

Eur hastell-kreñv braz a zo ivez war ar roh, eun tamm uhelloc'h eged kreiz-kêr, med er miz euz kêr, etrezi ha Park Plenen Abraham. Hemañ a oa bet savet diwezatah, en naontegved kantved, gand ar Zaozon, evid divenn Quebec ouz an Amerikaned. Atao ez eus soudarded e-barz, med pell-zo n'eus Saoz ebed ken ennañ. Ar zoudarded a zo oll kanadianed gallegerien, oll euz rann-vro Quebec.

Gwechall, evid divenn kêr, e oa, ouspenn ar hastell-kreñv, ramparziou en-dro dezi. Atao emaint en-dro d'ar gêr goz. Ober a reont outi eur gêr gloz evel kêriou koz Breiz ha Bro-Hall. Kavoud a ra din n'eus kêr all ebed evel di en Amerik.

Kêr Quebec n'eo ket bet divaloet, evel Montreal ha Toronto, gand an tiez uhel, an touriou, a dregont pe zaou-ugent estaj.

Bez' ez eus goulskoude unan uhel awalh, pe gwir e-neus pemzeg estaj, an hini a vez greet outañ Château Frontenac. En desped d'e ano, n'eo ket nag eur maner nag eur hastell, med eun otel, eun otel kaer e kreiz kêr, war bord ar Saint-Laurent, bet savet c'hweh vloaz ha pevar-ugent zo, eun tamm heñvel ouz eur hastell koz.

Braz spontuz eo. Marteze e-neus ouspenn kant metr kostez hag en traoñ e kaver magazennou a beb seurt, bankou, restorantou, kafeou.

Greet eo toud e brik ruz, gand touriou braz ront ha re gare en-dro dezañ. An doenn warnañ, zo eun doenn gouevr uhel kenañ hag he-deus kemeret dindan an amzer eul liou glaz-gwer dispar hag a ya mad meurbed gand liou ruz brik ar mogerioù. Ar Château Frontenac zo braz e vrud dre ar bed. N'e-neus ket laeret anezi. Pa weler anezañ a-bell, war dalbenn kêr, a-uz d'ar ster ha d'an tiez all kalz izelloh, en e-gichen, e ranker anzav e vankfe eun dra bennag da gêr ma ne vije ket eno.

#### 7) Pennad

##### An otobuziou da gas ar vugale d'ar skol

Eun dra all hag a denn warnañ daoulagad eur Breizad hag eur Gall, pa ya war henchoù ar Hanada, eo an otobuziou da gas ar vugale d'ar skol.

En eur vro ken braz hag honnez, heb an otobuziou, aleiz euz ar vugale ne hellfent ket mond d'ar skol. Re bell e vijent outi. Lod anezo o-deus deg, ugent, tregont kilometr, ouspenn zoken, da ober. Setu gouarnamant peb rann-vro e-neus lakaet prena en e qont otobuziou da gas anezo d'ar skol. An otobuziou-ze zo ar memez re dre ar Hanada a-bez. Bemdez ez eont euz kêr-benn ar hanton da gerhed ar vugale diouz ar mintin. Bemdez e teuont diouz an noz d'o zigas d'ar gêr. Goude e tistroont toud da gêr-benn ar hanton, el leh ma vezont bodet. Med aze n'eus netra souezuz ebed. Ar souezusa evidom-ni eo ez eo heñvel toud an otobuziou-ze dre ar vro a-bez. E toud ar Hanada, euz ar mor Atlanteg beteg ar mor Pasifik, ez int toud heñvel-poch, heñvel-poch zoken ouz re ar Stadoù-Unanet. Dond a reont toud, sur, en diou vro, euz ar memez uzin. Bez' o-deus toud ar memez furm, ar memez ment hag ar memez liou. Hag e rankan lavared (hag hini ebed euz ar re a welo anezo gand e zaoulagad ne hello tamall din beza eun teod fall) n'eo ket tost dezo beza brao. N'eus ket klasket ober outo traoù brao. O furm zo divalo. O liou zo divalo : rouz int pe kentoh melen-rouz, liou ar haoh-gwazi. War ar rouz divalo-ze ez eus teir barrenn zu a zeg pe zaouzeg santimetr lehed, unan d'an neh, unan e kreiz hag eun all d'an traoñ tro-ha-dro d'an oto.

N'eus, er Stadoù-Unanet hag er Hanada, nemed an otobuziou-ze o kaoud ar furm hag al liou-ze. Den ebed ne hell en em droñplañ ganto.

Med ar souezusa ganto, da vihanna evidom-ni eo an dra-mañ : an hini a deu gand e oto war-lerh unan anezo a rank beza atao digor mad e zaoulagad warnañ, atao e rank beza ar evez. Perag ? Abalamour ma rank chom e-unan a-zav kerkent ha ma chom an otobuz a-zav. Divennet eo klask mond e-biou dezañ. Ma chom an otobuz a-zav beb kant metr, ar pezh a en em gav aliez, pa dostaer ouz eur bourk pe ouz eur gêr, an hini a deu war-lerh a rank ivez derhel an oto a-zav beb kant metr. Ker e koustfe dezañ beza paket o klask e zibaseal. Mond war-lerh eun otobuz da gas ar vugale d'ar skol zo eur skol vad a basianted. N'eo ket ral rankoud chom a-zav war-lerh eun otobuz 20 pe 30 gwech da hortoz, amañ hag a-hont, eur bugel da zevel e-barz. Hemañ peurvuia ne vez ket preset ha ma vez, kant pe zaou-hant metr pelloc'h, eun all bennag o hortoz ivez ne vez ket tost

dezañ en em skuiza evid mond beteg ennañ. N'eo ket dezañ eo da gemered poan. D'an otobuz eo da zond beteg ennañ.

War lost an otobuz ez eus daou houloù ruz braz, d'an neh, unan e peb tu. Elumet, e roont sklêr da entent ez eo red chom war-lerh. Hag evid ma vo ententet gwelloc'h, e weler, skrivet dindan gand lizerennou braz ar gourhemenn-mañ : "Arabad eo klask mond e-biou e-pad ma vez elum ar goulou ruz".

Goude, pa en em laka an otobuz da vond gand an hent braz, ar rener a zalc'h c'hoaz pell awalh elum ar goulou ken na wel dirazañ eur pennad mad a hent eeun.

Med lavared a ranker e kemer an dud pasianted. N'em-eus gwelet den ebed o tizenti. Hag an dra-mañ evid eur Breizad hag evid eur Gall a zo eun dra iskiz awalh. E Breiz hag e Bro-Hall e welfed buan meur a hini o vond da zod ma rankfent plega evel-se da vond goustad gand o hent, sioul ha sentuz.

#### 8) Pennad

##### An tiez

Tud Breiz ha re Vro-Hall o-dez c'hoaz leh da veza souezet o weled ar peder rann-vro ez om bet enno. Eno e vez rouez gweled war ar mêz, er bourkou, er hêriou bihan ha zoken en-dro d'ar hêriou braz, tiez mên pe diez simant. Ne vez ti mên pe di simant ebed koulz lavared nemed e kreiz ar hêriou. Partoud, el leh all, an tiez a zo tiez koad ar beurvrasa anezo, evel er Stadou-Unanet, tiez braz, heb estag ebed, tiez kaer, livet brao. Al liou a vez, sur, renevezet warno beb bloaz.

Eur pennad brao e vezont an eil euz egile, kant-hanter-kant pe zaou-hant metr da nebeuta, heb moger pe damm orjal ebed da ober an disparti etrezo.

Peurvuia, eur pennad euz an hent pe euz ar ru, e-touez eur bochad gwez. Toud e vezont dibrad war-dro eur metr diwar an douar. War an dalbenn, e vez eur porched hir, keid hag heñ peurvuia, gand eur balustr penn-da-benn hag e pep tu d'ar peder pe bemp pazenn a vez da vond beteg ennañ.

N'eus ket da veza estonet ma 'z eus eno kement a diez koad. Ar hoad a zo partoud. Dond a ra beteg kêr. E meur a gêr zoken, e Montreal, e Toronto, e Vancouver..., emañ e kreiz kêr. Ar hoad ne vank e nebleh. Partoud e kaver outañ kement ha ma vez c'hoant. Pep tiegez, war ar mêz, e-neus e goad braz hag a ro awalh a goad da zevel ti ha lojamant ken aliez ha ma vez red. "Zoken, a lavare din eur peizant, pa vez ezomm da gaoud eun tamm arhant ne vez da ober nemed gwerza eun toullad gwez. Ar re-mañ ne vankont ket biskoaz".

Ha neuze, ar hoad a vez labouret kalz êsoh ha kalz buannoc'h eged ar vein. Da zevel eun ti koad, ne lakaer ket kalz ouspenn eur miz hag e heller mond da chom e-barz dioustu, pa ranker konta triweh miz pe zaou vloaz evid sevel eun ti mên. Setu ar Hanadianed a ya kentoh d'an ti koad, kalz gwelloc'h marhad.

Hag arabad eo mond da lakaad er penn e hellfe an tiez koad-ze beza tiez paour. Oll int tiez braz, beza ma n'o-dez estaj ebed. Eno ne vezer ket selluz pa brener an douar da zevel an ti. Hemañ ne vank ket muioh eged ar hoad, hag e vez marhad mad. Setu an ti a vez savet ledan hag hir en eur jardrin braz.

An tiez a vez ivez tiez êz, divennet mad ouz ar yenienn kement hag ouz an dommder. He vez da glemm ouz hini ebed. Diou voger goad a vez atao warno hag, etrezo o-diou, traou gouest da herzel mad ouz yenienn ha tommder.

Ouspenn, e-leh unan nemed ken, e peb toull-prenest e vez daou breneest, gand diou werenn deo war peb hini. Diou zor a vez ivez e pep toull-dor.

Ni, e-pad eur miz-hanter n'on-eus ket kousket nemed en otiou koad. Biskoaz n'on-eus bet da glemm nag ouz an dommder, war ar blênenn, nag ouz ar yenienn, war ar meneziou, tost d'an erh ha d'ar skorn.

A-hend-all, e toud an tiez koad-ze e kaver kement êzamant a heller gedal en tiez mên kaerra.

Med lavared a ranker n'eo ket heñvel e mod ebed an tiez koad a vez savet bremañ ouz ar re a veze savet gwechall, da boent ar bionierien, da boent an dud a oa deuet da genta er vro, d'ar poent ma ranke peb hini sevel e-unan e di e-giz ma helle.

Tro on-eus bet da weled meur a di euz ar seurt-ze, e rann-vro an Ontario, en eur bourk anvet bremañ : Upper Canada Village, da lavared eo ar "Bourk heñvel ouz ar re a veze savet gwechall er Hanada".

An tiez a zo bremañ er bourk n'eo ket tiez koz int. Savet int bet toud a-nevez-ze evid digas da zohj euz an tiez koz a oa eno gwechall, ouspenn kant vloaz-ze, hag a zo eet toud da fall pell-ze. Med savet int bet heñvel-poch ouz ar re-ze. Toud int tiez koad nemed ti mestr kazetenn ar vro hag an ostaleri. Homañ eo an ti brasa, eun ti brik ruz, gand eur porz hir ha ledan a-dreñv ha lojamant aleiz e kare en-dro dezañ, marchosiou da lakaad ar hezeg hag eur harr-di braz evid ar harrosiou. E traoñ an ti, en eun tu d'an trepas, ez eus eur zal vihan gand eur hontouer ha stalafennou da lakaad boutaillou. Pelloh ez eus eur zal vihan all, eur zal vraz da reseo an dud. En tu all, emañ ar zal-debri vraz hag a zo enni eun daol hir meurbed. Pemzeg pe ugent den, da vihanna, a helle mond da zebri en-dro dezi.

D'an neh, d'ar pella toud, ez eus teir gramb vihan, e peh hini eur gwele braz, gand eur stel kaer a-zioutañ. An teir gramb-ze a oa da zigemered ar pennoù-braz. Evid mond beteg enno, e ranked treuzi eur zal vraz hag a gemere toud lehed an ti. Homañ a zerviche da lakaad an dud da zañsal, bemdez goude koan. Eur wech echu an dañs, e veze lakaet golhedou e-barz, war ar plarched. Ar veajourien ordinal, ar re a ne veze ket pounner o yalh a ranke kousked eno, an eil e-kichen egile, peb hini war e holhed.

Tiez all ar bourk zo daou seurt anezo. Ar re vrasa, c'hweh pe zeiz, an ti-kêr, ti ar boloñjer, an ispisiri, ti ar medisin, an daou di-skol hag ar chapel a zo heñvel awalh ouz an tiez a vez savet bremañ. Greet int gand pleñch eveldo ha livet gand liou flamm eveldo. Ar re all, an niverusa, a zo kalz simplh. Savet int bet, heb dispign arhant gand o ferhenn e-unan, rag n'int ket greet gand pleñch, med gand gwez pin lakaet en o-fez an eil war eben, troad unan war beg eben. N'eus bet greet nemed trehi o brankou dezo, dilemel ar hrohenn diwarno, kempenn anezo eun tamm a daoliou bouhal da ober daou du plad da beb hini, evid lakaad an hini war-horre da en em ober gwelloc'h diouz an hini dindan. Med dre ma vezent kempennet groz e helle chom aliez toullou etrezo. An toullou a veze stanket mad gand pri-melen evid miret ouz an avel hag ouz ar yenienn da zond en ti.

An doenn a veze greet gand tammou koad taillet e teoder hag e ment eun deolenn vihan ha lakaet an eil war eben evel an teol.

Peh hini euz an tiez koad-ze a veze greet ennañ eur siminal hag eun oaled mein. Er mod-ze ne veze ket ken braz ar riskl a dan-gwall.

An tiez-ze a dlee beza yen kenañ e-pad ar goañv ha tomm, re domm, e-pad an hañv.

Er hontrol, an tiez koad a vez savet bremañ a vez divennet mad ouz ar yenienn hag ouz an domder. Tommet mad e vezont e-pad ar goañv, kalz re zoken aliez (ne vez ket ral gwelet pemp degre warn-ugent en ti) hag ivez distanet mad e-pad an hañv.

Ar Hanadiane a deu da Vreiz, pe da Vro-Hall, a vez estonet ar beurvrasa anezo o weled pegement a arhant a laka an dud da zavel o ziez nevez. En o bro ne fell ket dezo lakaad kement.

Eur paotr yaouank a dregont pe zaou vloaz ha tregont a oa en em gavet ganeom eun devez e Chicoutimi, eur gêr vraz pinvidig war ar ster Saguenay, e rann-vro Quebec, tost d'al lenn Saint-Jean. Eur paotr solud e oa, eun tamm re deo marteze. Eur paotr a-zoare da weled, en desped d'e vleo ha d'e varo hir.

En em lakaad a ra da gaozeal ganeom. Laouen eo pa deu da houzaod ez om Gallaoued ha muioh c'hoaz pa oar ez on, me, euz Brest. "O! Emezañ. Euz Brest ? N'eo ket posubl ! Me a oa e Brest daou vloaz-ze, kelenner e skolach Plouzane.

Gweled am-eus eno sevel tiez nevez aleiz, dreist-oil e bord ar mor. Toud tiez brao, sur, med toud kalz re ger, dreist-oil ar re n'int nemed tiez repoz evid ar zul hag ar vakañsou. N'ont ket gouest da gompren e hellfed dispign kement a arhant da zavel eun ti hag a ne vezer ket e-barz ouspenn daou viz beb bloaz.

Amañ, er Hanada an dud a zo lojet ken koulz ha re Vreiz ha re Vro-Hall. Med o ziez a zo tiez koad ha n'o-deus ti repoz ebed. Goulskoude e hounezont kalz muioh eged na reer e Breiz hag e Bro-Hall. Med ne fell ket dezo dispign kement nag ober kement a zle evid sevel eun ti. N'o-deus c'hoant ebed kennebeud da chom stag er memez leh e-pad toud eur vuhez. Eun ti koad ne bad ket pell, pemp bloaz warn-ugent, d'ar muia toud ; setu ne

vez tamm diegi ebed o tilezel anezañ, pa vez red, pe pa zav c'hoant gand an den da vond da glask eur plas all gwelloc'h pe da cheñch bro nemed ken. Kavoud a ra din e Breiz hag e Bro-Hall ez eo deuet bremañ an dud da en em staga kalz re ouz o zi. Re ger eo koustet dezo. Re a zle o-dez warnañ. Abalamour da-ze n'int ket gouest e mod ebed ken da zilezel anezañ, zoken evid mond da glask labour pe da gemered eur plas gwelloc'h en eul leh all. Er vro-mañ, eUruzamant n'eo ket deuet ar pleg-ze c'hoaz".

Ar paotr a ouie kaozeal, kement ha ma ne roe ket kalz a dro d'ar re all da respont. Ma vijem bet e Bro-Hall on dije lavaret dioustu e oa dirazom eur paotr euz ar hreisteiz, kement a gaoziou a deue gantañ.

Med aze e oa ar wirionez gantañ. E Bro-Hall hag e Breiz, henn an zav a ranker, e vez dispignet aleiz, re marteze, en tiez nevez. Med lavared a ranker ivez ne vezer ket atao re asur e tiez koad ar Hanada, n'eus forz pegement a ézamant a vez enno, da vihanne en tiez koz a vez meur a estaj enno.

An oteliou ez om bet enno a oa koulz lavared toud e koad, med heb estaj ebed. Eur vech goulskoude, e bourk Field, er Holombi Britanik, e kreiz park broadel Yoho, er menezioù Rohelleg (montagnes Rocheuses), e-harz ar menez Stephen, eur menez kaer a 3149 metr, e oa en em gavet ganeom en em loja en eun otel a dri estaj, e koad euz an traon beteg an neh. Ne oa nemed eur skalier striz da vond d'ar hrampou. E neh ar skalier, e heb estaj, a-wel d'an oll, war ar hloazon, e oa eur skritel hir ha ledan, treset braz warni, gand liou ruz, skeudenn tan-gwall o tevi eun ti ha merket warni, gand ar memez liou ruz : "On brasa enebour amañ, an hini a ranker bepred kaoud aon razañ, eo an tan-gwall". En otel-ze e oam chomet diou nozvez. Heb kaoud aon, beb tro ma welem ar skritel-ze, e santem eun tamm skrijadenn o vond dre on hrohen, dre ma savem beteg on hramb, en eil estaj. O weled ar skalier, e kavem anezañ gwall striz. "Penaoz", a zoñjem aweichou, "e hellfe toud an dud a zo en eil hag en trede estaj diskenn buan awalh evid en em denna, ma teufe d'an tan kregi en ti ?" Med on sousi ne chome ket pell da boueza war on halon. Mond a ree kuit ken buan, kerkent ha ma vezem en on gwele, en desped d'ar skritel spontuz-ze.

Med ar Hanadiane a rank beza atao war evez war ar poent-ze. E bourk Field, a-veh daou hant metr euz an otel, e oa pemp pe c'hweh ti, stag ouz stag, bet distrujet gand an tan-gwall, daou pe dri miz a oa. Trist e oa o gweled ; du e oa o mogerioù, du e oa an tri pe bevar darn treust a chome c'hoaz war an douar. Euz toud an traou a oa araog eno, ne weled ket ken nemed eur bernig ludu griz dister.

#### 9) pennad

#### Ar prejou

Ar prejou, er Hanada, a vez disheñvel ouz ar prejou e Breiz hag e Bro-Hall, hag an dra-ze dre ar vro a-bez. Euz an eil tu d'egile, euz ar mor Atlantik beteg ar mor Pasifik, e kaver partoud ar memez re. Lavared a heller zoken ez int partoud ar re a gaver er Stadou-Unanet.

War ar prejou, evel war an otojou, ar Hanada a heuil ar Stadou-Unanet.

Kentoh e vezont eged dre amañ : dijuni (pe lein) war-dro seiz eur, lein (pe verenn) war-dro unneg eur-hanter ha koan war-dro pemp eur-hanter. Med en oteliou hag er restorantou e heller mond da glask dijuni etre c'hweh eur hag eiz eur, lein etre unneg eur hag eun eur ha koan etre pemp eur ha seiz eur.

An den a vez pres warnañ, an hini ne fell ket dezañ koll tamm amzer ebed, a hell mond d'ar memez poent, da vihanne er hëriou braz, da staliou bihan hag a vez kavet éz awalh war ar blasennou e kreiz-kêr. Er re-mañ e vez kinniget dezañ, dioustu koulz lavared, patatez fritet hag eun tamm "hamburger". Hemañ n'eo nemed eur mell tamm kig ejenn, med kig bet draillet da genta ha goude gwasket stard da ober dezañ kemered furm ha gwel eur bifstek teo kaer. Ar Hanadiane, evel tud ar Stadou-Unanet a zo sod gand ar seurt kig-ze.

Er staliou bihan-ze, e vez kinniget dezo, poszet buan pe war ar billig pe war ar grill. Ma teu zoken dezo beza eun tamm lezireg, m'o-deus aon da veza re skuiz o tiskenn euz o oto da vond beteg ar stal, n'o-do ket da loh outi. Digaset e vo beteg enno ar hig hag ar patatez.

Ar prejou a vez atao kalz fonnusoh eged dre amañ ; me, ne hellen ket biskoaz debri an hanter euz ar pez a veze kinniget din. Ar Hanadianed, ar beurvrasa anezo da vihanna, a zo tud vraz ; o horv a houlenñ boued aleiz. Ouspenn o-dez da harpa ouz eur yenienn griz e-pad c'hweh pe zeiz miz. Setu ez eo red dezo debri plajou fonnuz.

Med ar prejou ne vezont ket, na tost, ken koulz ha dre amañ. Ar geginerien hag ar geginerezed ne gemeront ket ar boan da aoza an traou evel ma vez greet dre amañ. Re a implij a reont euz an traou a gaver aozet dija eur magazennou, euz an traou e boestou hag a ne vez da ober nemed lakad anezo war an tan da domma. Leziregez ? Marteze. Med kentoh, a gredan, ar c'hoant da ober buannoh ha da zispign nebeutoh.

Med lavared a ranker ne goust ket ken ker ar prejou dre eno ha dre amañ. E meur a restaurant kaer e helled kaoud, pa oam eno, eun dijuni euz ar re wella etre 7 ha 10 lur, eul lein vad etre 7 hag 20 lur. Koan a veze eun tamm kerroh, med etre pemp skoed hag 30 lur e helled kaoud eur pred mad. Gwir eo e ranked atao konta ouspenn 12 pe bemzeg dre gant a werz-ar-butun.

Ar pred kenta, dijuni, (henn lavared am-eus dija) a vez abred, etre c'hweh eur hag eiz eur, da vihanna e teir euz ar peder rann-vro ez om bet enno, en Ontario, en Alberta hag er Holombi Britanik. En teir rann-vro-ze e kaver digor toud ar restaurantou da c'hweh eur. E rann-vro Quebec, ne vez ket heñvel. Eno e vez diegusoh da zevel an dud a vez o servicha. Eno ne dalv ket ar boan mond da glask dijuni araog eiz eur. Araog, e kaver partoud dor zerr.

Dijuni er Hanada a vez atao eur pred mad hag eur pred fonnuz, evel ma vez e Bro-Zaoz hag er Stadou-Unanet. An dud o-dez c'hoant da gemered nerz araog komañs o devez. Pa ne hiner ket war labour, e ranker chom heb gina ar ar boued.

D'ar pred-ze e vez kinniget da genta da choaz etre eur werennad vad a zourenn orañjez pe bamplemous pe rezin pe avalou. Da zigeri ar galon n'eus netra gwelloc'h eged eur werennad dourenn pamplemous. Goude e vez digaset, hervez ar c'hoant, pe dri pe bevar vi, aozet e-giz ma karer gand tri pe bevar damm kig sall, fritet war ar billig pe beder pe bemp silzigenn,

fritet ivez ; pe c'hoaz eun tamm bifstek (aliesoh eun tam hamburger) ken ledan ha va daou zorn, ken teo ha va biz meud, gand patatez draillet rostet eun tamm war ar billig. Aliez e vez kinniget c'hoaz teir pe beder grampouezenn deo ledan gand kement ha ma karer a sirop seo skav-grah (érable) ha konfitur da lakaad warno. Eno ne vez ket da gaoud aon da veza lipous.

Ha toud an traou-ze gand kafe ha te, hervez ar c'hoant.

Pa nez echu e zijuni, an den a vez ennañ nerz ha kalon awalh evid staga dioustu a-zevri gand e lodenn-labour.

An eil pred, lein (pe verenn) a vez abred ivez, etre unneg eur hag eun eur. Henez ne vez e mod ebed evel ma vez dre amañ. Dre ma dez debret eur pred mad diouz ar mintin, an dud ne vez ket braz o naon d'an eur-ze ha ne vezont ket tentet da zebri kalz a dra. Peurlies a ne ya ganto nemed eur sandwich, da lavared-eo daou damm bara lakaet etrezo pe eun tamm kig-moh pe gig ejenn draillet pe eun tamm fromaj ha ganto diou pe deir delienn saladenn. D'e lakaad da ziskenn, an dud a houlenñ toud pe gafe pe de, pe c'hoaz eur werennad lèz. Ar hafe vez atao eur hafe sklèr ha divlaz hag a vezer brokuz gantañ. Med, tra farsuz awalh, ma houlenñit o kafe gand ar pezh ho-peus c'hoant debri, e vo kontet deoh e priz ho sandwich ; ma houlenñit anezañ goude m'ho-po echu hemañ e vo kontet deoh ivez hag e rankoh e baea ouspenn.

Ar pred brasa, ar pred gwella, eo koan. Evel an daou bred all, koan a vez debret abred, etre pemp eur ha seiz eur. Er beurvrasa euz ar bureviou hag en uzinou e vez labouret heb distag ebed. Setu e vez echu an devez pe da deir eur pe da beder eur, ha goude e heller kemered an amzer da zebri koan.

Koan a gomañs atao gand eur volennad vad, eul litrad da vihanna, a zaladenn draillet. Er zaladenn-ze e kaver asamblez letuz, kaol gwenn ha kaol ruz, toud draillet fin ha mesket gand eur saoz ruz divlaz anvet ketchup, eur seurt saoz tomatez hag a gaver bepred eur voutaillad anezañ war an daol hag o-deus kollet ennañ an tomatez toud o blaz.

E meur a restaurant, e weler, merket war ar menu da lakaad gand ar zaladenn eur saoz hag a vez greet outañ e saozneg french dressing, da

lavared eo saoz greet e mod Bro-Hall. Med ar saoz-ze n'eus netra euz mod Bro-Hall ennañ, en desped d'an ano a zo bet roet dezañ. N'e-neus ket muioh a vlaz eged ar hetch-up, ar saoz tomatez.

Biskoaz, e-pad eur miz-hanter, n'on-eus gelllet kaoud eur saoz mad, eur saoz aozet gand ar heginer pe gand ar geginerez. Atao saoz prenet e boutaill en eur vagazenn. Lavared a rafed ez eo deuet eno toud ar heginerien hag ar geginerezed da veza mogn ha n'e-neus hini ebed ken gouest da ober eur saoz e-unan.

Goude ar zaladenn e vez kinniget eur plajad fonnuz a gig, pe gig moh, pe gig leue, pe gig ejenn. N'on-eus ket bet biskoaz an disterra tamm kig dañvad, evel ma ne vije dañvad ebed er Hanada. Ha gwir eo n'on-eus ket gwelet kalz, a-veh diou pe deir bandenn, en devez diweza, just araog echui on beaj.

Ar hig leue hag ar hig moh a vez atao kig brao ha kig mad. Med ar saoz a vez gantañ a vez bepred ar memez hini e toud ar restorantou, divlaz atao. Ar geginerien hag ar geginerezed ne glaskont ket muioh aoza saoz gand ar hig eged gand ar zaladenn. An dud ne zisplij ket dezo ar saoz prenet, perag mond da derri o reor oh ober eul labour hag a n'eo ket red ?

Didrabasoh eo evel-se. Med an estrañjour e-neus poan oh en em ober ouz ar saoz e boutaill ken divlaz.

Ouspenn, ma vez mad atao ar hig moh hag ar hig leue, ar hig ejenn ne vez ket ken koulz, da vihanna evid an estrañjour. Ar Hanadianed evel an Amerikaned ne vank ket an ohen lard dezo. Goulskoude ne weler ket aliez a dammou kig fresk war an daol ganto. Er restorantou ne heller kaoud nemed tammou hamburger, kig draillet gwasket goude da ober tammou evel bifstek. Ne heller ket lavared ne vijent ket mad, med n'o-dez e mod ebed blaz eur bifstek fresk en e bez hag e teuer buan da fasta ganto.

Da echui ar pred e vez da choaz etre eur gouignenn, dien skornet, konfitur hag eur frouezenn boaz.

Ar houignou hag an dienn-skornet a vez atao euz ar re wella. Pell e talhin soñj euz eur gouignenn anvet cheese-cake, da lavared eo kouignenn-fromaj, abalamour ma vez lakaet fromaj da ober anezi. Honnez zo eur gouignenn dispar, melen-wenn evel an dienn, ken tener ha ken koulz ha ma teu din

awechou bremañ c'hoaz en em lakaad da hlaouri o soñjal enni nemed ken. Ken aliez ha ma veze kinniget din (koulz lavared bemdez) e kemeren anezi heb beza deuet biskoaz da gaoud heug outi.

Ar frouezenn boaz ne veze na mad na fall ; n'he-dez blaz ebed evel ar honfitur. Homañ, sur, ne veze ket kalz a frouez e-barz, marteze ne veze tamm ebed zoken rag n'he-deze ket kalz a liou.

Ar pez e-neus manket ar muia deom e-pad on beaj eo eur pesk hag eur frouezenn fresk bennag beb an amzer.

N'on-eus ket gelllet kaoud frouez fresk (kerez) nemed diou pe deir gwech ha beb tro en eun tiegez war ar mēz.

Pa veze kinniget eun tamm pesk bennag deom er restorant, e veze beb tro ar memez hini, eun tamm moru bet aozet en eun uzin bennag ha dalhet goude skornet en eur hoñjelater. Diou pe deir gwech ez eo bet en em gavet ganeom gweled merket war ar menu ar ger "sole" hag a verk evel ar ger galleg unan euz ar pesked saourusa, ar harlizenn. Er wech kenta m'on-oo gwelet ar ger-ze e oem laouen rag an dra-ze a lakae ahanom a wel da cheñch eun tamm euz ar hamburger. Med pebez souezenn fall pa oe digaset ar plad pesked dirag on daoulagad ! Ar harlizenn, ar "sole" a oam o hedat anezi gand kement a joa hag he-dije greet kement a blijadur deom, en desped d'an ano a oa war ar menu, a oa deuet en eun taol, eur wech all, da drei en eur hoz-tamm moru divlaz, bet aozet en eun uzin ha dalhet goude er hoñjelater. N'on-eus ket gelllet kaoud pesked fresk nemed diou pe deir gwech er Hoñbi Britanik. Med eno on-neze da choaz etre luzed kaer ha tammou samon euz ar re wella. An dra-ze, eur pesk fresk, eur frouezenn fresk hag eur banne gwinn beb an amzer on-eus kavet diouer dezo meur a wech e-pad on beaj.

Evid diskouez sklēr petra a hell beza eur pred er Hanada, ne hellan ket ober gwei'oh eged lavared petra em-oo bet d'am lein (merenn) d'ar ?? a viz even en eur restorant e Vancouver. Toud e oa en eun asied, eun asied vraz, heñvel ouz ar plad a vez lakaet aliez ar pesked warnañ war an daol dre amañ ha ken braz hag heñ. Setu ar pez a oa warni :

- teir delienn letuz ledan,
- peder hanter-behezenn vraz en o sirop,
- c'hweh brank ach (celeri) heb o deliou,
- c'hweh pe zeiz tamm kokombrez tano,

- c'hweh rabezenn-vihan ruz,
- pevar benn-ognon glaz, pemp kerezenn ruz en o sirop,
- eun tamm anana teo en e sirop,
- diou loaïad vad a fromaj gwenn fresk,

ha, dindan toud an traou-ze,

- tri damm morzed-pemoh ledan ha teo.

Ober a reont war an asied eur bern spontuz, awalh da lakaad meur a hini da chom sebezet dirazañ. Eur Breizad euz Bro Leon a en em gav awechou gantañ (a en em gave kentoh gwechall) beza lakaet dirag meskajou iskiz awalh da weled, (evel-se ar farz gwiniz-du pe ar hig ha farz), med biskoaz ne teu dezañ gweled mesket asamblez kement all a draou : legumachou glaz, frouez koñserv en o sirop, kig-moh yen ha fromaj gwenn. Dirag eur seurt meskaj e chom eur pennadig eun tanm nehet da zelled outañ ; gina a ra zoken marteze, beza ma 'mañ e stonok o krial e naon.

Med kerkent ha ma neus tañvet anezañ e wel anezañ o tiskenn heb poan ebed. Ha goude e teu buan da gavoud anezañ mad kenañ.

Meur a wech on-eus bet traou mad da zebri e-pad on beaj. Anzav a rankan goulskoude, e oa mall ganen, pa oan en em gavet e Pariz en distro, mond d'ar restaurant da dañva traou heñvel ouz ar re a blij deom kaoud dre amañ ha da eva eur banne gwin. Dreist-oll da eva eur banne gwin. Re a gafe, re a lêz ha re a zour on-ou ranket lonka. Deuet e oa on horzaillenn da fasta ganto.

#### 10) Pennad

##### Diëzamant an erh hag ar skorn

Eun dra all gouest da skei spered eur Breizad ha zoken hini eur Gall er Hanada eo an amzer hag an diëzamant a deu gantañ e-pad ar goañv.

E Breiz, ne vez biskoaz na re yen na re domm. E Bro-Hall, ma vez tonmoh an hañv ha yennoh ar goañv, an dommder vraz peurvuia ne bad ket pell hag ar goañv ne vez ket nag hir na kriz.

Er Hanada, er hontrol, e teu tommer vraz goude eur yenienn vrasoh c'hoaz. Rag ar yenienn eo a bad an hirra, etre seiz hag eiz miz, memez e tu ar hreisteiz, e Quebec, e Montreal hag e Toronto, eur yenienn hag a bouez aleiz war buhez ar Hanadianed.

Ma oa tomm kenañ (33<sup>a</sup>) e Montreal, da eun eur-hanter, pa oam en em gavet eno, d'ar 26 a viz mae (e Pariz hag e Brest, er memez devez, da unnek eur-hanter, pa oa ar harr-nij o sevel en êr, ne oa nemed 13<sup>a</sup>) deg devez araog, ne oa ket teuzet c'hoaz toud an erh en-dro da gêr hag ar skorn war ar Saint-Laurent. Euz ar harr-nij (10.000 metr en êr) e welem toud douar al Labrador, toud enezenn an Douar-Nevez (Terre-Neuve) hag al lodenn vrasa euz rann-vro Quebec goloet a erh hag a skorn teo.

Ne weljom teuzet an erh nemed eur wech tostaet war-dro kant kilometr ouz ar Saint-Laurent. Med deg devez goude, war-dro ar 5 a viz even, pa oam e Park Broadel al Laurentides, e rann-vro Quebec, eh en em gave c'hoaz ganeom beb an amzer koueza war dachadou erh teo, er hoajou dindan ar gwez, war menezioù hag a n'int ket gwall uhel goulskoude ; n'o-deus ket ouspenn seiz pe eiz kant metr.

En Alberta zoken, d'ar zeiteg a viz even, pa en em gavom e Calgary, ez eo glaz an oabl ha klouar an amzer. Eun devez dispar ! Med en devez warlerh n'eo ket tost heñvel. An amzer a zo deuet a greiz-toud da veza fresk, yen zoken. An erh a en em laka da goueza war-dro unnek eur hag a gendalh da goueza beteg an noz. Gwir eo Calgary zo e-harz ar Menezioù Rohellig (Rocky Mountains), war eur gompezenn uhel, 1200 metr uhelloc eged rez ar mor.

En devez warlerh, eüruzamant, diouz ar mintin, n'eus ket ken eur goumoulen war an amzer. An oabl a zo adarre glaz digatar hag an êr seh ha yahuz.

Er Hanada e vez berr an nevez-amzer hag an diskar-amzer. Mond a reer en eun taol koulz lavared euz ar yenienn vraz, euz ar skorn hag an erh, d'an dommder vraz hag euz tommer vraz an hañv d'ar yenien vraz adarre.

An dommder vraz n'he-dez ket a efed fall war buhez ar Hanadianed. Ne hell nemed digas eur pennad sehor bennag. Med ar zehor eno n'eo ket gouest da ober droug ebed : ne hell na padoud pell, evel ma ra awechou dre

amañ, na dizehi an douar. Hemañ a vez re a zour ennañ. Setu tomder vraz ha dour aleiz a laka an traou da zavel buan ha druz. Hebto, ar re-mañ ne hellfent ket kaoud amzer awalh na da zavel na da zarevi.

Gand ar yenienn n'eo ket tost heñvel. Dond a ra abred. An erh a en em laka da goueza peurvuia da hanter miz gwengolo hag a chom da goueza beteg hanter miz mae. Ha pa gouez, e kouez fonnuz : hanter-kant santimetr da neheuta beb tro, hag aliez kalz muioh.

Ar goañv a vez hir ha kriz. An termometr a en em zalh peurvuia e Quebec, e Montreal, e Toronto, war-dro 10° dindan ar zero. Med dond a ra dezañ aliez diskenn beteg 30°. Pellou war-zu an hanternoz e tiskenn kalz izelloh c'hoaz.

Lavared a ranker ar Hanadianed ne zisplij ket dezo nag ar yenienn nag an erh. Plijoud a ra dezo zoken an erh. Ma teu dezañ chom heb en em ziskouez d'ar poent ma en em gav peurvuia, e kavont diouer dezañ, o-dez mall da weled anezañ. Er wech kenta ma oan bet er Hanada, da fin ar bloaz 1974, e oan en em gavet d'an 21 a viz kerzu. Er harr-nij e-noa digaset ahanon euz New-York da Vontreal e oa em-hichenn daou Ganadian yaouank, eur plah a ugent pe zaou vloaz warn-ugent hag eur paotr daou pe drei bloaz kosoh. O tond e oant euz ar Martinik. Eno e oant bet e-pad teir zizun, tost da Fort-de-France, o klask repoz en eur vro gaer dindan an oabl glaz hag an heol tomm. Laouen e oant o tistrei d'ar gêr. Plijadur o-doa o kaozeal euz ar pez o-doa gwelet ha greet eno. Med a-greiz-tous e klevan ar plah o lavared d'ar paotr : "Daoust ha kavoud a raim bremaig an erh e Montreal ?" En em houlen a ree an dra-ze abalamour, er bloaveze-ze, e oa c'hoarvezet eun dra ral kenañ er vro : ne oa bet tamm erh ebed c'hoaz da fin miz du, pa doa kuitaet Montreal evid ar Martinik. O klevet anezi e santen mad e oa en he mouez evel eun tamm aon da weled douar Montreal dizolo, heb an erh gwenn hag he-doa mall, sur, da houzoud hag hemañ a vije adarre fidel, beza ma noa daleet eun tamm. Ha me a lavar deoh ne oe ket bihan he joa pa welas euz ar harr-nij e oa gwenn-kann toud an traou war douar ar Hanada.

Med, beza ma plij an erh dezo, ar Hanadianed a rank konta gand an diêzant a deu gantañ.

Ouz ar yenienn, n'eus forz pegen kriz e vez, e ouzont en em zivenn hag en em zivenn mad. Gouzoud a reont ober gwiskamanchou tomm. Gouzoud a reont tomm mad o ziez. Evid an dra-ze, ne vank dezo nag ar hoad nag ar glaou-douar nag ar petrol. Eur Breizad a deu dezañ aliez kavoud e vez tommet re an tiez e-pad ar goañv er Hanada. Rouez eo an tiez hag a ne vije ket lakaet enno an domder da zavel beteg 25°. Kalz re evidom-ni.

Med ouz ar skorn hag ouz an erh n'eo ken êz en em zivenn.

Ar skorn hag an erh a vez partoud.

Kement rivier, kement ster vraz, kement lenn a zo a vez teo ar skorn warno e-pad toud ar goañv. War ar Saint-Laurent e vez ken teo ha ma heller treuzi toud anezañ war an troad n'eus forz pe leh. Setu e koust ker ar skorn d'ar vro, rag red e vez kaoud bagou espres d'e drehi ha d'e derri war ar sterioù evid gelloud lakaad ar bagou braz da genderhel da vond beteg porz Montreal hag ar perzier all a zo pellou war al lennou braz ha goude da zond kuit outo.

Med an erh a goust kalz kerroh c'hoaz.

Ken teo e kouez ha ma teu dezañ aliez stanka an henchoù war ar mêz ag ar ruiou e kêr. E Montreal hag e Quebec e kouez, bloavezioù a vez, ouspenn tri metr erh. Kement a vez ha ma laka toud an traou da chom a-zav, an otojou, an trehioù, ar bagou hag ar hirri-nij. Setu, dre ar vro, e ranker kaoud atao partoud, prest da vond e roud, machinou braz (anvom anezo "dierherien") greet da zilemmel buan an erh diwar henchoù ha ruiou ha d'o derhel digor.

Bremañ gand ar machinou-ze ne chom ket pell an traou a-zav. Ne chomont nemed pa deu d'an erh ha d'an avel-foll en em gavoud asamblez war ar vro. Neuze ne vez netra all da ober nemed gortoz er gêr ar barr-avel da sioullaad hag ar barr-erh da echui. Ar skoù zoken a chom a-zav d'ar poent-ze. Med kerker ha ma vez echu toud, ar vuhez a en em ziskouez adarre dre ar vro.

An dra-ze goulskoude n'eo gwir nemed evid eul lodenn outi, evid kreisteiz rann-vro Quebec, evid kreisteiz an Ontario, hini ar Manitoba, hini ar Saskatchewan, hag evid eul lodenn euz an Alberta. N'eo ket gwir evid eul lodenn euz ar rann-vro-mañ, hini tu ar Huz-Heol, an hini a zo enni ar Menezioù Rohelleg (Montagnes Rocheuses) nag evid ar Holombi britanik.

Eno e c'hoarvez aliez kalz gwasoh tra. Perag ? Abalamour ma 'z eo kalz uhelloc'h ha kalz sonnoh ar menezioù. Eno e kouez kalz muioh a erh c'hoaz eged el leh all. Setu e teu buan da en em vernia war gostez ar menezioù. Neuze, a-blasou, e teu dezañ en em zistaga diouz an douar ha diouz ar roh ha da vond en eun taol-kont da goueza en e boull en draonienn en eur ziskar dra ma ya kement tra a en em gav gantañ war e hent, gwez, reier ha tiez, da goueza en eun "avalanche". Ar galleg e-neus eur ger evid an dra-ze a en em gav aliez awalh en Alpoù hag er Pireneoù. Ar brezoneg n'e-neus ger ebed evid eun dra hag a ne en em gav biskoaz e Breiz hag a ne glevet ket zoken ano outañ gwechall.

An erh, o koueza evel-se en e boull, a zo eun dra spontuz. Ober a ra eun drouz iskiz. Metra ne hell herzel outañ. Dihwizienna ar gwez a ra, taol a ra an tiez d'an traoñ, diframma a ra ar reier diouz ar menezioù ; unan eo euz ar gwaso darvoudoù a hell c'hoarvezoud er bed. Er Menezioù Rohelleg hag e menezioù ar Holombi Britanik e tigouez aliez an dra-ze. Ober a ra zoken eno kalz a zroug.

D'ar bevar a viz meurzh 1910, e oa deuet evel-se d'an erh skei war ar vicherourien a oa o labourad war al linenn hent-houarn, en eul leh anvet Roger's Pass. Laza a reas 62 anezho. En desped d'an drouz a ree ar bern erh hag an traou a dreine gantañ, ar paour-kêz tud n'o-doa ket gelllet en em denna e poent hag oent frigaset dindannañ.

Abaoe, an hent-houarn hag an henchou braz, el leh ma 'z eus menezioù uhel hag a heller kaoud aon da weled an erh o tiroll d'an traoñ diwarno, e-pad ar goañv, ez eus bet klasket o diwall. Evid-se, ez eus bet savet, gand mil boan, mogerioù douar pe zimant, a-zioh al linennou hag an henchou, uhel ha kreñv awalh evid derhel an erh pa deu dezañ en em zistaga diouz an neh.

Ouspenn ez eus bet klasket mired ouz an erh da zond da veza re deo ha re bouner evid beza dalhet toud gand ar mogerioù-ze. Evid-se, e vez greet dezañ koueza, pa weler e vez ezomm. Da lakaad anezhañ da goueza, ez eus bet greet war an hent braz, er han, e traoñ ar menez, beb daou pe dri hant metr, plasou da reseo, e-pad ar goañv, kanolioù braz (105 mm.), prest da denna war erh neh ar menezioù evid e lakaad da goueza araoz ma teufe dezañ beza re deo. Pa vez tennet warnañ e poent, an erh a gouez d'an traoñ hag a vez neuze dalhet mad gand ar mogerioù.

Pa oam o tistrei euz Vancouver, on-eus bet meur a wech tro da weled plasou euz ar seurt ze, heb ar hanolioù ha, dirag peb hini, war gostez ar menezioù, eun tamm uhelloc'h eged an hent pe an hent-houarn, gwez merket warno gand pentur ruz-flamm kroazioù da rei da weled mad al linenn da heulia evid tenna war an erh el leh ma 'z eo dleet.

Bez' e vez zoken, tra ma vez eur riskl bennag d'an erh da goueza en e boull, implijidi karget da veilla war an amzer, da daol evez war an erh hag ivez da zerri pe da zigeri an hent braz hag an hent-houarn, hervez ma vez red.

E Breiz hag e Bro-Hall, ar skorn hag an erh a hell awechou lakaad meur a hini da gaoud eun tamm poan-benn. Med an dra-ze ne bad ket pell, eun devez bennag pe eur zizun bennag. Er Hanada, er hontrol, an abadenn a bad c'hwec'h miz pe ospenn. Setu, eno, an dud, ar re a zo e penn ar gouarnamant hag ar re all, o-deus ranket lakaad o spered da labourad evid gelloud en em denna heb re a goll hag heb re a boan, euz an diêzant a deu e-pad ar goañv gand an erh ha gand ar skorn.

Ar skorn hag an erh a goust ker d'ar Hanada.

#### 11) Pennad

#### En Ontario

Euz rann-vro an Ontario em-eus bet tro da gaozeal dija meur a wech. Gwelet on-eus e-barz lennou braz (Ontario hag Erié), lammou-dour iskiz an Niagara, koajou braz, ar ster vraz Outaouais, kêr Ottawa ha kêr Toronto.

Med eun dra all a zo c'hoaz hag e-neus skoet ivez va daoulaquad ha va spered.

Rann-vro an Ontario a zo eur rann-vro saoz ha nerket don gand an dra-ze.

Ar beurveza euz an dud en em gavet eno a oa deuet euz Bro-Zaoz hag o-doa digaset ganto spered, yez ha gizioù o bro.

Ar spered a gaver dreist-oll er fed ma 'z eus protestanted aleiz er

rann-vro, er fed ma 'z eo diêz d'ar Hallaoued ha d'an estrañjourien all en em glevet mad ganto. Ar Zaozon, er Hanada evel el leh all a zo braz al lorch enno. Setu ne fell ket dezo klask darempred gand an dud all. An dra-ze a weler dreist-oll dre ma ne lakaont tamm bolontez vad eved da zeski ar galleg na da ober implij gantañ.

Rag derhel a reont stard d'o yez. Homañ eo a glever partoud. Homañ eo a gaver en anioù ar geradennoù, ar bourkou, ar hêriou, ar steriou zoken.

Ken stard e talhont d'o gizioù. Ar re-mañ a zo dreist-oll e furn an tiez.

Soñjal a heller, goude toud ar boan o-deze bet o treuzi ar mor braz, goude toud ar vizer o-deze bet da houzañv diwezatoù o vond keid all dre ar hoajou da glask douar da labourad ha da zével o zi warnañ, goude beza ranket en em zivenn ouz an Indianed, e kroge enno kleñved ar vro. Neuze, evel evid klask skañvaad o foan, e roent d'o zi furn an hini o-doa kuitaet ha d'al leh ma en em vodent (keriadenn pe vourk) hag ivez d'ar ster a gavent en o-hichen ano ar geriadenn (pe ar bourk pe ar gêr) hag hini ar ster o-doa laosket war-o-lerh en o bro.

Evel-se e kaver en Ontario London (Londrez), Milton, Dale, Brampton, Georgetown, Trenton, Brighton, Stratford... hag all..., anioù hag a gaver partoud war gartennoù Bro-Zaoz.

Da veur a ster zoken ez eus bet roet ano ar ster a dreuz e Bro-Zaoz ar geriadenn pe ar bourk pe ar gêr kuitaet. London an Ontario a zo war an Thames (Tamise) evel London, ker-benn Bro-Zaoz. Stradford a zo war bord an Avon evel Stradford Bro-Zaoz.

Koulz lavared toud an tiez, ar re goad evel ar re savet gand brik, war ar miz, er hêriou bihan ha zoken e bord ar hêriou braz, a zo bet savet evel ar re a weled kant-hanter-kant vloaz-ze e Bro-Zaoz. Hag en-dro dezo e kaver ar memez jardin gand ar memez yeot, ar memez gwez hag ar memez fleur ha dalhet ken kaer. Ha dirazo, e kêr Toronto, e kaver trist gwelad en o-hichen an tiez uhel a dregont estaj a zo berniet kement a dud enno.

Pa 'z eer euz Toronto da Vontreal, an hent a heuill penn-da-benn, war 270 kilometr, bord al lenn Ontario, beteg kêr Kingston.

En tu deo, ne baouezer ket koulz lavared da weled al lenn glaz ha frankil, goloet gand eur vrummenn dano. En tu kleiz, beb an amzer, war dammou douar plad hag ivez war eun dorgenn izel bennaq, ez eus parkeier ha prajou kaer, druz ar foenn pe an drevadou enno. Eno emaint kluchet e-touez koajou braz a wez pin, a wez bezo, a wez skav-grah stank hag uhel. E meur a bark ez eus zoken gwez avalou ha gwez per, gwenn gand ar fleur nevez digoret. Eun dudi eo o gwelad. Lakaad a reont ahanom da zoñjal eun tamm en Normandi. Ken glaz, ken pinvidig ha ken kaer eo ar vro-mañ hag hi.

Beza m'on-eus bet tost da bemp kant kilometr da ober adaleg lammou-dour an Niagara. eh en em gavom abred e Kingston, war-dro div eur-hanter. Treuzet on-eus, heb chom a-zav, kêr Hamilton, eur gêr leun a uzinou braz, duet toud an tiez e-barz gand ar moged a deu outo, ha kêr Toronto. Ar gêr-mañ on-oa dija tremenet daou zevez e-barz.


C'hoant on-oa da loja e Kingston ha da vond da weled ar ford koz brudet a zo e-kichen kêr.

Kingston a zo e penn al lenn Ontario, e tu ar Zav-Heol, just el leh ma ya dour al lenn da ober a<sup>r</sup> ster Saint-Laurent.

N'eo ket eur gêr vraz. N'eus e-barz nemed 56.000 den. Med eur gêr vraz eo, etre al lenn, en eun tu, evel eur mor dirazi, hag, en tu all, torgennoù uhel hag a ra ar ster Catarqui eun troh ledan ha don enno.

Eur gêr vrudet eo er Hanada, dre ma'z eo eur gêr goz hag a chom c'hoaz e-barz meur a di koz kaer, bet savet gand mein gris ar vro. En eur plas kaer emañ ivez, eur plas bet choazet dija araog gand an Indianed (Iroquois) da lakaad o heriadenn. An dud wenn kenta a oa en em gavet eno er bloaz 1615. Med brudet eo dreist-oll abalamour ma 'mañ e-barz skol-veur armeou ar Hanada, an hini a vez roet enni an deskadurez a zo red dezo en o micher da ofiserien an teir arme, ar Royal Military College, hag ivez abalamour ma 'z eus, tost da gêr, eur ford braz koz, ar Ford Henry, bet renevezet hag a deu touristed aleiz da weled anezañ.

Ar ford a zo eno bremañ n'eo ket an hini kenta a oa eno. Hemañ a oa bet savet er bloaz 1812 e-pad ar brezel etre ar Zaozon hag Amerikaned ar Stadou-Unanet; ne oa ket tost dezañ beza na ken braz na ken kreñv hag an



FORT HENRY

hini a weler bremañ. Hemañ a oa bet savet er bloaz 1832. En desped d'ar peoh etre ar Hanada hag ar Stadou-Unanet, ar Zaozon a zalhas soudarded ennañ betek ar bloaz 1891. Eur wech tennet kuit ar re-mañ, ar ford dilezet a oe buan dismantret gand ar glao, ar yenienn, an avel foll hag an domnder.

Med, er bloaz 1936, unan bennag euz ar re a oa penn gouarnamant ar rann-vro a zoñjas klask lakaad kempenn anezañ hag e zerhel en etad "Marteze, emezañ, e tigas da zoñj d'ar Hanadianed a deuo d'e weled euz eur pennad-amzer diêz euz istor ar vro". Divizet e oe neuze renevezi anezañ toud.

Al labour a oe echuet daou vloaz goude.

Ha bremañ emañ eno dirazom, koulz lavared heñvel, diavêz ha diabarz, ouz ma oa pa oa bet savet, gand ar meubl, an armou ha toud an traou a oa red d'ar zoudarded kaoud d'ar poent-ze.

Talvoud a ra ar boan mond d'e weled. Eno emañ war eun dorgenn dizolo ha noaz. E furn a zo tost awalh ouz hini ar fordou braz e-noa lakaet Vauban sevel e Breiz hag e Bro-Illal, er zeitegved kantved.

Dre amañ, eur ford evel hennez, ne vije ket gouest, outañ e-unan, da sacha na tud ar vro nag an douristed all. Re a fordou euz ar seurt-se a zo dre ar vro. Er Hanada n'eo ket heñvel. Eno n'eus ket kalz a Fordou koz, da vihanna fordou mên. Ne gav ket din e vije ford mên all ebed nemed ar Ford Erié, bet renevezet evel hemañ.

O-daou e teu bremañ an dud niveruz da zelled outo. Pa oam e Ford Henry, e Kingston, e oa asamblez ganeom eno da vihanna pevar hant den all. Leun e oa ar ford.

C'hoant em-eus, beza ma n'eo ket êz, êsa rei da entent petra eo.

War eun dorgenn uhel emañ. Da vond betek ennañ ez eus eur zao hir ha sonn. An amzer a zo kaer pa 'z eom, ha, dindan an heol berô, e rankom skuilla dour aleiz araog en em gavoud dirag an nor vraz.

Pa dostaer outañ, en taol-lagad kenta, e weler ez eus teir lodenn disheñvel ennañ : d'ar pella, war an dorgenn, emañ ar ford braz, kalon ar ford ; stag ouz kostez diazez hennez, ez eus eun all bihannoh ; en hennez eo emañ ar magazennou braz. Izelloh eged hemañ, hag en-dro dezañ, ha dija eun tamm war an diribin, ez eus eun dachenn vraz dizolo, divennet gand eur foz ledan ha don ha pevar dour-korn.

Ar ford braz a zo c'hweh-korneg gand e gostez diazez kalz hirroh eged pep hini euz ar re all. Ar hostez-ze e-neus daou hant metr hed pe dost. Ar pemp al o-deus pep hini war-dro deg ha tri-ugent metr. Eur horn digor a reont daou ha daou. Ar hoztez diazez n'eo ket eeun penn-da-benn. Dor vraz ar ford a zo warnañ. Evid he divenn, ez eus greet ennañ, war-zu an diabarz, evel eun dant hag a ya don, war-dro pemzeg pe ugent metr, ennañ.

Al lodenn-ze euz ar ford a zo kreñv meurbed, rag, ouspenn ar voger a dri metr-hanter pe bevar metr lehed hag a zeg pe zaouzeg metr uhelled, ez eus oh ober an dro dezañ eur foz don (5 metr pe ouspenn) ha ledan (7 pe 8 metr). Kazarniou ar zoudarded, kambrou an ofiserien, diou pe deir vagazenn vihan, an infirmiri a zo a-hed ar voger, stag outi penn-da-benn, eul lodenn a-rez an douar, ar re all en estaj, en-dro d'ar blasenn eksersis. War ar voger vraz ez eus c'hoaz eur voger izel (eur metr-hanter pe eur metr tri-ugent) kalz strisoh (1 metr) ha dirag homañ c'hwezeg plas ront simantet hag a zo war beb hini eur hanol braz. Ar hanoliou-ze a zo bremañ du gand ar mergl, rag bez'int ar re a oa eno er hantved diweza, lakaet e-giz ma oa dezo beza evid mired da dostaad ouz ar ford. En o-hichen emañ atao ar bern boleji ront a oa da beb hini da denna, du ivez gand ar mergl.

E peb kazarn, e peb kambr, e peb magazenn, en neh evel en traoñ, nemed e tu an diazez, tu an nor vraz, ez eus er voger vraz toullou aleiz, striz en diavêz, ledannoh en diabarz, evid lakaad fuzuillou da denna.

Ar ford bihan n'eo ket tost dezañ beza ken kreñv. Stag eo ouz kostez hirra egile, e gostez diazez, just araog an dant a zo war hemañ, med e peb tu n'eus stag nemed ar voger diavêz. An diou voger-mañ n'int ket diou voger greñv. N'int nemed re magazennou braz, a gant metr hed pe dost, goleet peb hini gand eun doenn brik ruz. Med er penn izella ar re-mañ ez eus adarre daou bennad-moger beskelleg hag a ya an eil beteg egile da ober eur horn digor braz. Ken ledan ha ken uhel int ha mogeriou ar ford braz. War an daou bennad moger-ze ez eus pemp plas simanted evid pemp kanol heñvel ouz ar re all. O femp emaint eno atao ivez, gand o bern boleji en o-hichenn.

Er mogeriou-ze e weler ivez toullou da lakaad fuzuillou da denna.

Izelloh eged an daou ford, emañ an dachenn vraz dizolo. Homañ a zo divennet mad ivez, da genta gand kanoliou ar ford, goude gand eur foz hag

a ra an dro dezi, eur foz ken don ha ken ledan hag hini ar ford braz, hag ivez gand pevar dour kreñv er pevar gorn a ra gand an daou gostez all peb hini euz tri gostez an traoñ.

Toud an traoz-ze a ra eno eur ford kreñv kenañ, kaer da weled bremañ. Eur ford hag a n'eus bet den ebed, eüruzamant, biskoaz o klask mond ennañ dre forz ha dond a-benn outañ. Abaoe ar bloaz 1814 n'eus bet tamm trouz ebed etre ar Stadou-Unanet hag ar Hanada.

Ar ford n'emañ eno bremañ nemed evid sacha tud ar Hanada hag an douristed estañjour evid diskouez dezo eun tamm euz istor ar vro.

Eur monument kaer eo, war e dorgenn noaz, gand e vogeriou ken kreñv, bet savet gand kement a ouiziegez.

Med bez' ez eus ouspenn, diwar ar vogeriou, eur gwel dispar, en eun tu, war zour glaz al lenn Ontario, hag en tu all, war an dorgennou ha war ar hoajou braz a zo warno.

Eun dra all a zo c'hoaz hag a laka an dud da zond. Eun dra gaer zoken. Euz ar bemzeg a viz mae beteg ar bemzeg a viz gwengolo, eun toullad paotred yaouank, daou-ugent pe hanter-kant, studierien oll, a deu eno da ober dirag an douristed an eksersisou a ree eno, e kreiz ar hantved diweza, ar zoudarded a veze o terhel ar ford.

Talvoud a ra ar boan gweled anezo gwisket evel d'an amzer-ze, gand eur chupenn ruz, eur bragou du, eur varrenn ruz warnañ, hag eur hepi du uhel gand eur bouch plu gwenn.

Beb eur e reont war ar blasenn kement eksersis a ranke ober gwechall soudarded war droad ar ford hag ar ganolierien.

Ar muia plijadur a vez o selled ouz ar re-mañ pa en em lakaont da denna gand ar hanoliou braz.

C'hweh paotr kreñv a zo red evid lakaad peb kanol en e blas e-giz ma 'z eo dleet hag evid e staga gand kerdin hir ha teo. Toud e rankont ober an dra-ze gand nerz o divreh nemed ken.

Pa vez prest ar hanol, unan euz ar baotred a skuill ar poultr e-barz, eun all a laka goude ar vourell. Ne chomje ket ken nemed ar boled da lakaad. Med emañ ne vez ket lakaet. Pa vez prest ar hanol da denna, toud ar baotred

a bella outañ nemed an hini e-nez da elumi ar vechenn. An tenn, tennet gand poultr du a-hiz koz, a ra eur voged spontuz, hag ar hanol, beza ma 'z eo dalhet gand ar herdin a ra eul lamm ken spontuz all war e giz.

Toud an eksersisou-ze a vez greet mad kenañ gand ar baotred. Plijuz int da weled. Dond a reont ganto êz, soupl, evel ma n'o-dije ket greet nemed an dra-ze abaoe ma 'maint war an douar ; dond a reont ganto evel eun dañs, en eur heulia eur muzul merket mad gand gourhemennou seh ha net.

Ar baotred-ze a zo eno oh ober an dra-ze bennez e-pad o amzer vag, evid gounid eun tamm arhant, awalh evid gelloud mond goude adarre d'ar Skol-Veur da genderhel war o studi.

Med, da zacha an douristed beteg ar ford ez eus c'hoaz ar muze a zo er hazarniou hag er hamrou. Eno ez eo lakaet dirag daoulagad an dud kement tra a zell ouz buhez ar zoudarded a veve eno e-pad ar hantved diweza : o armou, o ostilloù, o dillad ha toud an traou a veze red dezo evid beva hag en em zivenn.

Ne goller ket an amzer o vond da weled ar ford. Deski a reer zoken traou aleiz.

## 12) Pennad

### E rann-vro Quebec

#### Anoioù ar bourkou hag ar hêriou

Unan euz an traou a sko da genta daoulagad eur Breizad hag eur Gall pa ya dre rann-vro Quebec eo ano ar bourkou hag ar hêriou a gav war e hent. An anoioù zo kalz disheñvel ouz ar re a gaver dre amañ. Bez' ez eus zoken re iskiz, rag kavoud a reer, an eil e-kichen egile, anoioù indian, anoioù saoz hag anoioù galleg.

N'eo ket estonabl e vije c'hoaz meur a ano indian. Gwechall e oa eno Indianed aleiz dre ar vro. Ar re-ze a oa eno pell araog ma oa en em gavet ar re wenn, Breiziz ha Gallaoued, e kreiz ar c'hwezegved kantved.

Meur a veuriad a oa anezo. Ar re a oa anavezet ar muia a veze greet outo Huroned, Iroquois, Kriz, Algonkins, Montagnais. Ar re-ze eo a oa an niverusa, med bez' e oa c'hoaz re all an Askapi, an Abenakiz, ar Pasamodi hag ar Mikmak.

Aleiz euz Indianed ar meuriadou-ze a zo en em lakaet da veva e-touez ar Hanadianed all hag heñvel outo. Med eul lodenn vad euz peb meuriad a zalh c'hoaz da veva evel ma ree gwechall an Indianed koz, war ar hoz-tamm douar laosket ganto gand ar gouarnant, war o "reserve", e-giz ma vez lavaret e galleg. Evel-se e vev ar re on-eus gwelet e reserve Maria, war bord ar mor Atlantik, e kreisteiz ar Gaspésie, an Indianed Micmac.

Ar re-mañ a zo eno 1950 den. Evid beva, e reont panerou gwial, evel ma vezent greet gwechall, hag e werzont anezo d'an douristed e-pad an hañv. Gwelet on-eus an Indianed-ze en o bourk. Hemañ, pa vezer ennañ, ma ne zeller nemed ouz an tiez, ne zoñjed ket, e mod ebed, e hellfe beza eur bourk indian. Toud an tiez a zo tiez koad heñvel-poch ouz re ar Hanadianed all, dalhet ken kempenn, renevezet al liou warno ken aliez. Tiez brao.

Gand an Indianed-mañ, emaoñ pell euz tiez braz pri-douar Taos-Pueblo, en New-Mexico, er Stadou-Unanet, on-oa gwelet daou vloaz zo. Med red eo din lavaret ma 'z eo nevez ha brao an tiez-mañ, n'eo ket tost dezo skei kement an daoulagad ha ma ree ar re-ze (1).

Pa en em gaver war ar blasenn, er bourk, ne zaleer ket da weled meur a Indian. Lod a deu hag a ya dirazom, lod all en o zi, digor ar prenest ganto, a chom da zelled ouzom. Gwisket int oll evel ar Hanadianed all hag... evel dom-ni. Goulskoude n'int ket heñvel ouzom nag ouz ar Hanadianed gwenn. Ar re a welom a zo toud tud krenn, tud reud ha teo kentoh, evel ar re on-oa gwelet er Stadou-Unanet. O 'fas rond, o 'fri tough, o daoulagad, berr ar malvennou warno, a laka anezo da veza heñvel awalh ouz ar Chinaed, med o liou a zo rusoh, tenna a ra eun tamm da liou ar c'hwevr ruz. O bleo du, pe gentoh glaz-du, a lugern dindan an heol evel plu ar vran. An Indianed-mañ a zo heñvel-poch ouz an oll Indianed on-oa gwelet daou vloaz zo er Stadou-Unanet.

(1) Gweled : "Eur veaj e Stadou-Unanet an Amerik" (1976) pajenn 19.

Eun dra all c'hoaz a ziskouez deom emañ en eur bourk indian. An iliz n'he-deus ket ar memez furm gand an ilizou all. Homañ a zo eun iliz vihan hag a zo tra awalh da veza estonet dirazi. He furm zo hini eun deltenn vraz indian, an deltenn a veze greet outi "tipi". An Indianed a zave an deltenn-ze gwechall evel-henn : lakaad a reent 8 pe 10 treujenn, hir ha teo, en o-zav, o 'fenn teoa d'an traoñ, en eur helh braz, o beg d'an neh, staget eno an eil ouz eben evid o derhel mort. War an treujou e veze astennet, da ober an doenn, krehin loened gouez bet lakaet da zehi. E kreiz, d'an neh, e veze laosket etre an treujou eun toull d'an er fall ha d'ar moged da vond er-mêz hag, en traoñ, eun toull all brasoh d'an dud da vond e-barz.

Mad, an iliz a zo bremañ he-deus furm an deltenn-ze. Med bez' eo kalz brasoh ha, da ober an doenn, ez eus, e-leh krehin, tammou aluminium hir ha ledan. Iskiz awalh eo gweled an iliz-se eno, just e penn ar bourk.

Maria, ano ar bourk, n'eo ket eun ano indian, med, dre ar rannvro ez eus meur a vourk ha meur a gêr hag o-deus dalhet an ano bet roet gwechall d'al leh gand an Indianed. An anoiou-ze, souezuz awalh evidom-ni, a lavare aliez traou a-leiz e berr. Quebec, er yez indian, a lavare :

- "al leh ma teu ar ster da strisaad" ;
- Chicoutimi, "beteg al leh ma chom don" (ar ster) ;
- Kenogami, "al lenn hir" ;
- Mistassini, "ar roh vraz" ;
- Peribonka, "ar rivier a ya dre an trêz" ;
- Washicontai, "a zo a-zioh pleg ar mor", "a-zioh ar bae" ;
- Caughnawag, "al leh ma ya buan dour ar ster" ;
- Coaticook, "ar rivier a ya dre zouar goloet a wez pin" ;
- Yamaska, "al leh ma 'z eus kalz a vroen" ;
- Maskinonjé, "ar pesk begeg ("brochet" e galleg) divalo" ;
- Ymachiche, "ar rivier leun a lehid" ;
- Amqui, "al leh ma chom an dour da c'hoariella" ;
- Cacouna, "bro an heureuchin braz" ("porc-épic", e galleg) ;
- Escuminac, "al leh ma heller lakaad tud da daol evez war ar vro" ;
- Matapedia, "al leh ma teu eur ster da en em daol en eun all", e brezoneg : "Kemper" ;

- Rimouski, "al leh ma vez kavet kirvi braz" ;
- Shigawake, "ar vro a zav an heol enni" ;
- Arthabaska, "al leh ma 'z eus raoskl" ;
- Massawippi, "e kreiz an dour" ;
- Batiscan, "brumenn dano". Ha me oar c'hoaz ...

Korn-bro ar Gaspestie he-deus tennet he ano euz kêrig Gaspé, deuet he-unan he ano euz ar ger indian Gaspeg, da lavared eo Penn-ar-Bed.

Med ar beurvrasa euz anoiou ar bourkou hag ar hêriou a zo anoiou galleg.

Eul lodenn vad anezo a zo farsuz awalh.

Tennet int bet gand an dud a oa en em gavet eno da genta pe euz eun dra hag o-doa gwelet eno kerent ha ma oant erruet pe euz traou c'hoarvezet ganto goude.

Evel-se : "Rivière du loup", ano eur gêr war bord ar Saint-Laurent. En ano-ze, ar ger galleg "loup" n'eo ket ano ar bleiz kumun eo, an hini a weled c'hoaz dre emañ kant vloaz zo, med ano ar bleiz-mor, ar reunig. Hemañ, d'ar poent ma oa deuet ar Gallaoued er vro, a deue dezañ sevel pell er ster, ha zoken er rivierou a deu da en em daol e-barz, evel er rivier emañ ar gêr warni bremañ. Al leh e-neus tennet e ano euz eur bleiz-mor gwelet eno.

"Trois-Rivières" a zo ano eur gêr all, war bord ar Saint-Laurent, eur gêr vraz, tost da Vontreal, etre homañ ha Quebec. Ar gêr, ma 'z eo bet roet an ano-dezi, n'eo ket abalamour ma 'z eus eno teir rivier eo, rag n'eus nemed unan, ar Saint-Maurice. Med homañ a en em daol eno er Saint-Laurent hag a zo just eno trohet e teir ganol gand diou enezenn. Setu an hini a deu gand ar vag dre ar Saint-Laurent a gav dezañ ez eus dirazañ eno teir rivier.

Eun ano farsusoh a gaver c'hoaz : "Trois-Pistoles". Hemañ a zo ano eur gêr all war ar Saint-Laurent. Eur pistol a oa gwechall eur pez a zeg Tur. Med perag an ano-ze d'ar bourk a zo eno ouspenn tri hant vloaz zo ha d'ar rivier a base e-kichen ? Lavared a reer unan euz ar re a oa diskennet eno euz ar vag da genta, er bloaz 1620, a oa gantañ eur picher arhant kaer. Derhel a ree d'ar picher-ze kement ha d'e zaoulagad. Med, eun devez ma oa war ar pont koad savet war ar rivier, kropet e zaouarn pe gand ar riou pe gand ar banne gwin-ardant a re a oa gantañ dindan e 'fri, e-noa laosket e

bicher da goueza en dour. O weled e bicher karet o vond da goll, e oa deuet gantañ kerkent e galleg : "Voilà trois pistoles de perdues !" "Setu aze tri bistol eet da goll !".

Ar baotred a oa gantañ a oa chomet ar ger en o diskouarn. Deuet e oa dezo, kredabl, meur a wech, digas da zoñj outañ d'ar paour-kêz den, ken aliez ha ma oa deuet da veza ano ar rivier hag hini ar bourk.

Meur a ano euz ar seurt-se a gaver c'hoaz. Eur bourk a zo, bet anvet "Les Boules" abalamour ma oa (ha ma 'zeus atao) dirazañ mein braz rond war bord ar Saint-Laurent.

Eun all a zo bet roet dezañ an ano a "Ruisseau-à-Rebours". Perag ? Abalamour ma 'z eus o treuzi ar bourk eur wazenn-zour hag a zo ganti kement a droidellou ma ne heller ket gouzoud re, pa dostaer outi, war-zu pe du e ya. Lavared a rafed, e meur a blas ez eo en em lakaet a-greiz-toud da drei war-zu an tu all, war-zu an tu a-eneb, "à-rebours".

"Percé" a zo eur porz bihan brao war bord ar mor Atlantik, e penn gourenez ar Gaspésie. E ano a zo deuet dezañ dre ma 'z eus dirazañ, pevar pe bemp kant metr er mor, eur roh ruz vraz a zaou pe dri hant metr hed hag a zo enni en he 'fenn pella eun toull braz bet kleuzet gand an tarziou-mor. E galleg : "le rocher percé", deuet da veza "Percé", ar Roh Toull.

Med anioiu kuriusoh ha farsusoh a zo c'hoaz. Petra a lavarfeh o weled merket dirazoh gand lizerennou braz an ano "Grandmère", eun tamm araog eur gêr. Ar Grandmère-ze a zo eur gêr a bemzeg mil den. Treuzet on-eus anezi ha gwelet on-eus en he hreiz ar roh vraz a zo eno hag a oa bet roet dezi an ano-ze da genta, abalamour ma 'z eo da weled a-bell, eun tamm heñvel ouz eur vamm-goz. Ano ar roh a zo deuet goude da veza hini ar bourk savet en-dro dezi hag a zo chomet hini kêr abaoe.

Eur bourk zo hag a zo "Nouvelle" e ano. Abalamour ar misioner a oa deuet eno da genta a oa Henri Nouvel e ano. Ano an den a oa deuet da veza hini ar bourk.

Eur bourk all a zo anvet "Tabatière", eun all "Manche d'épée". An dud a en em gave er Hanada da genta ne gemerent ket kalz a boan da glask eun ano d'al leh ma deze c'hoant lakaad ennañ diazez d'o famill.

Meur a vourk a zo hag a zo bet roet dezo gand ar re a oa en em gavet eno ano al leh ma teuent outañ. Evel-se e kaver : Nantes, Angers, Varennes, Clermont, Chambord, La Guadeloupe, Vendée ... hag all... Anioiu galleg. Med kavoud a reer ivez anioiu saozneg, memez e rann-vro Quebec, ha zoken tost da Gebec : Douglas, Hopetown, New-Carlisle, Newport, Richmond... hag all... Soñjal a heller e veze taget kalon meur a hini gand kleñved ar vro pa roent ano ar bourk pe ar gêr a vezent o paouez kuitaad, d'ar bourk pe d'ar gêr nevez.

Med an anioiu a zo ar muia anezo eo an anioiu sent. Kredi a ran e kaver e rann-vro Quebec ano kement sant ha santez a zo en almanag : ano sent anavezet mad evel : Saint-Jean, Saint-Paul, Saint-Joachim, Sainte-Anne ... hag all. Med ivez re hag a ne glever ket anezo biskoaz : Saint-Agapit, Saint-Anicet, Saint-Césaire, Saint-Ephrem, Saint-Evariste, Saint-Malachie, Saint-Ours ... hag all ...

Kavoud a reer zoken re hag a zo souezusoh c'hoaz gweled ez eus greet eus pep-hini anezo ano eur bourk pe eur gêr : Sacré-Coeur-de-Jésus, Pente-côte, Sainte-Famille ... hag all ...

Er Hanada, dreist-oll e rann-vro Quebec, ano ar bourkou ha re ar hêriou a ra eur meskaj iskiz awalh. Med rei a reont da weled sklêr penaoz eo deuet ar vro da en em ober, da genta gand an Indianed o-deus laosket mad o merk warni, goude gand ar Gallaoued ha, war-lerh ar re-mañ, gand ar Zaozon. Disklêria a reont ivez, (eul lodenn anezo, da vihanna, ha, dreist-oll, e rann-vro Quebec) pegement a bouez o-deus bet eno beteg-henn ar relijion gatolik hag ar visionerien deuet da glask he skigna.

### 13) Pennad

#### Ar galleg e rann-vro Quebec

Eun dra all ivez a sko spered eur Breizad hag eur Gall kerkent ha ma en em gavont e rann-vro Quebec. Beza ma vez bet lavared dezo meur a wech ez eo ar galleg yez ar rann-vro, eh en em zantont eno en eur vro estrañjour. Kleved a reont kaozeal galleg koulz lavared atao en-dro dezo. Ya, atao, nemed e Montreal. Rag er gêr-mañ e klever aliez awalh kaozeal saozneg. Ha n'eus ket

da veza estonet. Eun toullad brao a Zaozon a zo o chom e-barz. Hag ar Zaozon-ze, evel ma ra bepred ar Zaozon n'eus forz e pe leh e vezont, a zalh stard d'o giziou ha d'o yez. Klask a reont zoken kaoud an nebeuta ma hellont a zarempred gand an dud all hag en em zerhel etrezo ar muia posubl.

Bez' ez eus karteriou hag a n'eus enno nemed Saozon. Bez' ez eus zoken skoliou hag ospitaliou hag ne vez enno nemed Saozon.

N'eus ket pell c'hoaz ne felle ket dezo e mod ebed en em lakaad da zeski galleg. Bremañ, abaoe ma 'z eo deuet ar galleg da veza yez ofisiel kenta rann-vro Quebec, pa 'z eo red dezo e zeski, e vez diêz o lakaad da ober implij gantañ. Ober a reont kentoh ar van da veza heb e houzoud.

Ar Zaozon a chom atao enno bremañ kement a lorch has a ourgouill ha gwechall. Kavoud a ra dezo ez int bet greet evid ren ar bed oll hag e kendalhont da gaoud evid an dud all an dispriz o-deus bet atao evito.

Kaer o-do ober goulskoude, ar re anezo a chomo e rann-vro Quebec a vo red dezo gouzañv en em ober diouz ar re all hag en em lakaad da gaozeal galleg eveldo ha plega d'al lezenn.

Ar galleg eo a vez klevet ar muia e rann-vro Quebec hag a-bell. Med n'eo ket tost dezañ beza an hini a glever e Bro-Hall. Poan e vez zoken a-wechou o kompren anezañ. Perag ? Da genta, abalamour ma ne vez ket distaget eno evel ma vez greet e Bro-Hall. An aksant a zo dishével.

En desped da-ze, eur Gall a zo êz awañ dezañ heulia ar pez a deu gand ar Hanadianed o-deus eun tamm deskadurez. Med ar re all n'eo ket êz dezañ o entent. E Montreal ez eus zoken meur a garter hag a zo enno eur feson da gaozeal ar galleg hag a ra outañ eun trefodach spontuz. Hemañ a zo bet roet dezañ eun ano. Ar "joual" a vez greet outañ. An ano-ze nemed ken a ziskouez sklêr pegeid ez eo eet al langaj-se euz ar galleg. Ma houlenfen diganeoh petra eo ar ger "joual", ez on sur e chomfeh boud. Goulskoude n'eo nemed eur ger galleg, eur ger galleg bet mahagnet a-hed an amzer : ar ger "Cheval", deuet da vez "ch'val" ha goude "choual" ha d'ar fin "joual". Hag ar geriou all a zo bet mahagnet kement hag hennez.

Med ar heurvrasa euz tud ar rann-vro, heb mond beteg mahagna kement-se ar geriou galleg, a deu dezo o difurmi tamm pe damm.

Er wech kenta ma klever eur Hanadian o lavared geriou ken simpl hag ar re-mañ : "Mon père et ma mère ont eu un empêchement", e chomer estonet eur pennad, rag klevet a reer gantañ, e-leh an dra-ze : "mon peñre et ma meñre ont eu eñ empeñchemeñt". Toud ar pez a deu gantañ a deu gantañ dre e 'fri. Setu ne vez ket tost evel ma dlefe beza e galleg Bro-Hall.

Med eun dra all a zo c'hoaz hag a ra e vez poan a-wechou oh entent mad galleg ar Hanadianed : dond a ra ganto aliez pe heriou nevez hag a ne vezont ket implijet e Bro-Hall, pe heriou koz eet da goll er vro-mañ pell zo ha dalhet eno c'hoaz, pe zoken geriou deuet euz ar saozneg.

Rag ar saozneg e-neus lakaet geriou a-leiz da zond en o yez, ar beurrasa heb cheñchamant ebed.

Eur Ganadianez euz rann-vro Quebec a lavaro deoh : "Je vais au Market (= au marché)". Eur micherour a deuo gantañ : "J'ai besoin de voir le foreman (= le contre-maître)". Eun all a lavaro deoh : "Mon fils s'est engagé dans l'Air-Force (= l'armée de l'air)". Arabad deoh beza estonet o klevet gand eun all : "J'ai été victime d'un blackmail (= d'un chantage)", pe "J'ai un blind date (lavared ; blaïnd deit) ce soir (= un rendez-vous avec une inconnue)". N'ouzon ket ped kant pe ped milier a heriou saozneg a heller klevet evel-se, pa gaozeer galleg gand tud rann-vro Quebec. M'ho-peus c'hoant kaoud eur skwer all bennag, setu amañ eun toullad : bonfire (= feu de joie), bootlegger (= débit de boisson clandestin), boyfriend (= ami, fiancé), brandnew (= flambant neuf), bigshot (= gros bonnet), building (= un immeuble), breakdown (= une panne) ... hag all ...

Med leun a heriou galleg a zo ivez hag a n'o-deus ket ar memez ster e galleg ar Hanada hag en on hini. Ma klevit unan bennag o lavared : "Je vais prendre mon char", arabad deoh mond da lakaad en ho penn emañ o vond da staga daou varh ouz e garr braz koz. Mond a ra da gerhed e oto, eun oto keit ha ken ledan hag eur vagon.

M'emah o vond gand an hent braz, e helloh gweled a-greiz-toud war bord an hent, skrivet e lizerennoù braz war eur plak melen, an daou her :

"compression rapide". "Petra ar foeltr an dra-ze, a en em houlenit dirazo, er wech kenta" ? Med, kant metr pelloh, pa welit an hent o tiskenn sonn dirazoh hag oh oto o vond kalz buannoh eged n'ho-peus c'hoant, e komprenit dioustu. Ne rankit kaoud den ebed da zisplega deoh petra a zo dindan an daou her-ze. En eil taol e ouezit mad ez eus o hortoz ahanoh eun diskenn a bemzeg pe ugent dre gant a bant hag ez eo dleet deoh beza war evez.

Ma welit a-zioh dor eun ostaleri pe eun espisiri, e-kichen ano ar mestr, ar ger "licencié", n'ez it ket da lakaad en ho penn ez eo bet an den-ze o studia en eur Skol-Veur hag e-neus gellet kaoud e "lisañs". Ar ger "licencié" aze ne verk netra all nemed e-neus an den droed, "lisañs", da werza boeson hag a zo alkool e-barz, gwin, bier, cognac, wiski hag all... N'ez it ket ivez da 'frotta ho taouarn re vuan, ma welit ar ger-ze merket war eun ti, laouen o soñjal emañ o vond da gaoud eur banne gwin da lonka. Chañs braz ho-peus da rankoud diskana buannoh. Perag ? Abalamour peurliesal al "licencié" n'e-nez da ginnig deoh nemed eur hoz-bier divlaz. E-pad eur miz-hanter on-eus tremenet er Hanada, n'on-eus gellet kaoud gwin nemed teir gwech, eur wech e Montreal, eur wech e-kichen lammou-dour an Niagara hag eur wech all er Holombi Britannik, e Penticton. Er gêr-mañ, on-oa gellet kaoud gwin euz ar vro hag e rankan lavared ne oa ket tost dezañ beza fall. Diskenn mad a ree zoken.

Ma kavit merket war eur garaj ar geriou-mañ : "Mécanicien en devoir", eh en em houlenit petra a hellont lavared : "Pe seurt mekanisian a hell beza hennez ?" Ma ouezer eun tamm saozneg, ne vezer ket re estonet. Soñjal a reer e saozneg e vez lavaret : "mechanic on duty" hag an dra-mañ a zo, ger evid ger, ar galleg "mécanicien en devoir", da lavared eo ar pez a lavarom e Bro-Hall "Mécanicien de service", ar mekanisian a zo e dro da labourad d'ar zul pe, war ar zizun, e-pad an noz, pa vez red.

Ma c'hoarvez ganedh gweled a-zioh dor eun ti pe hini eun atelier an daou her : "débossage et peinture", ne hellit ket chom heb en em houlenit petra a zo dindan an daou her-ze. Ma'z it en ti pe en atelier, an drouz a glevit hag ar c'hwez a deu beteg ho fri a ro deoh buan da entent ar pez a vez greet eno. Ne vez greet nemed digabosa an otojou kaboset ha goude lakaad peintur nevez warno, e galleg : "tôlerie et peinture".

Ar ger "tabaie", a-zioh dor eun ti ne vanko ket da skei ho taoulagad. Med arabad deoh soñjal e vije an ti-ze eun ti hag a hell an dud mond ennañ da fumi pa dez c'hoant. An "tabaie" n'eo e mod ebed ar pez a lavar ar ger galleg. N'eo nemed eur buro-butun.

Eun devez, e-kreiz Quebec, en eur ru goz, striz kenañ, med kaer ha dalhet kempenn, e welan e he-zav eur gamionetenn vihan, merket warni ano he zaou 'ferhenn : "Côté et Fleury", ha goude : "On débarre tout". Chom a reom eur pennad estonet da esa kompren petra a zo dindan ar ger : "débarre", "on débarre tout". Hag e rankom anzav ez om boud. Med, just pa 'maom o vond da genderhel gand on hent, kuriuz ha nehet, e welan eur paotr yaouank a bevar pe bemp bloaz warn-ugent o tond er-mêz euz eun ti e-kichen hag o sevel er gamionetenn. Kerkent ez an beteg ennañ hag e lavaran dezañ : "Karoud a rafen, aotrou, e lavarfeh din petra eo "débarrer" e "on débarre tout" ? Ouz va hleved, an den a wel dioustu n'on ket eur Hanadian. Va aksant n'eo ket e hini. "O! Aotrou, emezañ, n'eo ket diéz da houzoud. "On débarre tout" ne ra nemed lavared ez om gouest da zigeri kement dor prenet a zo, pe gollet pe dorret eo an alhwez. "Débarrer" a oa gwechall, d'ar poent ma ne oa alhwez ebed c'hoaz, evid digeri an nor, dilemel ar varrenn goad a veze lakaet a-dreuz warni da brenna anezi. Ar ger "débarrer" a vez kendalhet d'e implij c'hoaz dre emañ, beza ma ne vez barrenn ebed ken e neb leh da brenna an nor.

Ar paotr a zispleg an dra-ze din, eun tamm mousc'hoarz war e vuzellou hag, araog mond kuit e kinnig din eur gartenn hag a zo ano an ti warni : "Sellit, emezañ, setu emañ kartenn on ti. Ganti e helloh rei da anaoud anezañ er Frañs. M'ho-peus ezomm, eun devez bennag, da lakaad digeri ho tor deoh, n'ho-po nemed gervel ahanom gand eun taol telefon. Dioustu e kemerim an avion da vond da zibrenna anezi deoh." Hag ez a kuit laouen.

Ar Hallaoued hag ar beurvrasa euz Kanadianed rann-vro Quebec o-dez eun tamm poan e-pad eur pennad oh en em gompren, dre ma'z eo disheñvel o aksant, dre ma 'z eus chomet en o yez geriou koz a-leiz, eet da goll e Bro-Hall, ha dre ma teu geriou saozneg enni. Med dond a reont a-benn nebeud amzer da en em ober an eil ouz egile. Red eo goulskoude gouzoud ne blij ket kalz d'ar Hanadianed klevet tud Bro-Hall o rei dezo da zantoud ez eo disheñvel o aksant ouz hini ar "galleg mad", an hini a reont outañ gand eun tamm hegas en o halon, ar "galleg brao".

14) Pennad

Kudennou rann-vro Quebec

Rann-vro Quebec zo eur rann-vro binvidig, beza n'eo ket ken pinvidig hag ar rann-vroioù all. Kavoud a reer e-barz kement tra a zo red evid lakaad ha derhel da vond en-dro an uzinou braz ha toud buhez ar vro.

Bez' e kaver e-barz kement ha ma karer a goad, houarn, kouevr, nikel, aour, arhant, uraniom, amiant ha n'eus forz pegement a zour da ober elektrisite. Ne vank netra nemed petrol. Hemañ n'eus ket eur berad outañ, med fonnuz eo e rann-vro an Alberta.

Toud ar binvidigez-se ne vir ket euz ar rann-vro da veza paket e gwask gand meur a dra. Traou hag o-deus poan oh en em denna ganto gouarnamant Quebec hag hini Ottawa, kudennou diêz da ziluzia evel hini an dud dilabour, hini an divors, hini an estrañjourien a deu da glask labour er vro, hini an taillou, hini ar galleg hag hini plas ar rann-vro er Hanada.

Gand kement a binvidigez, ar beurvrasa euz tud ar rann-vro a hell beva mad. Gounid a reont arhant a-leiz, kement tost hag er Stadou-Unanet. Med en desped da-ze, ez eus eur bern tud dilabour. Kement a zo ha ma 'z int evid gouarnamant Quebec hag evid hini Ottawa eur gudenn ziêz kenañ da ziluzia.

Kudenn an dud dilabour a zo, eur pennad zo, eur wâll hini evid kement bro a zo er bed. Med kalz eo gwasoh er Hanada eged er broioù all. E Breiz hag e Bro-Hall, e heller konta etre 5 ha 6 dre gant a dud dilabour. Er Hanada a-bez ez eus tost d'an hanter muoh, pegwir ez eus ouspenn 10 dre gant. Med e rann-vro Quebec eo ez eus ar muia a-bell, peogwir ez eus 16 dre gant. Eun niver spontuz !

Ha gand ar re-ze e ranker konta c'hoaz ar re a zo dilabour dre ma fell dezo chom heb labourad, dre ma 'maint e grev. Rag chom a reont aliez pell e grev.

Pa oam e Montreal, etre ar c'hweh hag an nao warn-ugent a viz mae, ouvrierien uzin kaoutchoug Uni-Royal a oa e grev deg miz a oa ha ne oant ket a wel c'hoaz da staga adarre gand o labour.

Re unan euz brasa kazetennou Montreal, "Le Soleil", a oa bet hirroh c'hoaz heb labourad. 13 miz a oa dija abaoe m'o-doa paouezet. Med lavared a rankan o-doa gellit en em glevet gand o mistri prest goude ma oam en em gavet eno evid mond adarre d'o labour.

Gant kement a dud dilabour, gand kement a vicherourien e grev hag e-pad keid amzer, ez eus mizer a-leiz dre ar vro.

Med, m'o-dez poan-benn tud gouarnamant Ottawa ha re gouarnamant Quebec o weled kement a dud dilabour, o-deus leh ivez da en em dourmanti gand eur gudenn all, deuet a-nevez zo er vro. N'eus ket gwall bell c'hoaz, deg pe unneg vloaz zo nemed ken, ar Hanadianed a oa kreñv ar feiz en o halon. Derhel a reent stard d'o relijion. Heulia a reent striz lezenn an iliz gatolik hag hini an ilizou protestant. Setu e veze familhou braz a-leiz. Ne veze ket rouez ar familhou a zeg pe zaouzeg a vugale. Ne veze ket, dreist-oll, gwelet an divors o tond da lakaad ar famil da vond e tammou, tu amañ, tu ahont.

Med, n'eus forz pegen estonabl eo, en eun nebeud bloaveziou, adaleg ar bloaz 1960, ez eus deuet eur cheñchamant spontuz war ar poent-se, en eun taol-kont koulz lavared. Ken buan ha m'o-deus poan an dud en-oad oh en em ober ouz ar pez a welont dirazo.

Eun den e karg uhel, bet meur a wech e Pariz e-giz kannad ar gouarnamant e bodadegou an U.N.E.S.C.O., a lavare deom e teu bremañ da gement a dud divorsi, ha ken aliez, ma 'z eo deuet ar re a zo e penn gouarnamant Ottawa da en em houlen penaoz gelloud dond a-benn da lakaad fin d'an dra-ze. Gweled a reont ez eo dija eur gwall-zarvoud evid ar vro.

"An dud, emezañ, a zo evel dirollet. Divorsi a reont bremañ evid an disterra digarez, heb soñjal tamm ebed en o bugale. Lavared a rafed ne vez ket ken en o 'fenn nemed ar c'hoant da glask o 'flijadur. Lod a zivors ken aliez ha ma ne heller ket ken, pa vezer bet daou pe dri bloaz heb e weled, gouzoud pe 'z eo atao dimezet eur mignon pe n'eo ket, pe gand ar betved gwreg emañ, an eil ? an drede ? ar bevare ? ar bempved zoken ? Iskiz eo.

Med ar gwaso eo e vez merket don kalon ha spered ar vugale gand an dispartii etre o zad hag o mamm".

"Er skol, emezañ c'hoaz, e kaver a-wechou beteg tri-ugent dre gant euz ar vugale, divorset o zud. N'eo ket spontuz an dra-ze ? Hag ar beurvrasa anezo ne heuliont ket mad ar skol. Ar skolaerien o-dez mil boan ganto, kement ha ma ne ouezont ket aliez petra da ober outo. A-leiz euz ar vugale-ze a vez ken trubuillet o spered, o weled o zad hag o mamm o vond pep hini en e du, ha ma teu dezo trei fall".

Meur a hini, dre ar vro, a en em houlenñ bremañ petra a zo o vond da hoarvezoud diwar goust an divors, deuet da veza ken niveruz, gand eur vro hag a oa beteg-henn trankil ha didrouz ar vuhez e-barz.

Eur gudenn all ken diêz da ziluzia da houarnamant peb rann-vro ha da hini Ottawa eo hini an dud estrañjourer deuet da labourad er vro.

Er Hanada, beza ma 'z eo diêz kenañ beza digemeret e-barz pa deuer da glask labour, eh en em gav estrañjourien a-leiz.

Ar re-mañ, eun deg vloaz bennag a zo, pa yee mad ar homers, a gave plas da labourad kement ha ma karent, dre ma houzañvent ober toud al labouriou pounner ha louz, ar re ziêz ha dañjeruz, toud ar re hag a ne 'felle ket ken da dud ar vro ober anezo, evel d'ar memez poent e Bro-Hall. Kavoud a reed anezo neuze o tiskar gwez, o kleuzia foziou en douar da zevel tiez, da lakaad korzennou, da ober an henchou, o tarbari, o vañsonad, o labourad dirag toull ar 'ferniel da ober teol, da deuzi houarn, kouevr ... hag all...

Peseurt estrañjourien a deu di evel-se ? Eur Breizad hag eur Gall bennag hag a zav c'hoant ganto da hounid muioh eged e Breiz hag e Bro-Hall, med dreist-oll tud euz broiou paourroh, Italianed, Portugaliz, Spagnoled, Libaniz ha Gresianed. Med bez 'ez eus ivez kalz a dud euz an Indez, euz ar Japon. Arabed (nebeud) ha zoken re zu euz enezennou Haïti ha Saint Domingue.

Kement a estrañjourien a zo bremañ ha ma teu ar Hanadianed da gavoud ez eus re anezo ha da gemered droug outo, kement a-wechou ha ma 'z eont beteg klask o laza.

Ar re a vez ar muia a gas outo, dreist-oll e kêr Toronto, eo ar re deuet euz an Indez. Ar re-mañ a vez êz anaoud anezo abalamour d'o liou ha d'ho gwiskamant.

Tenna a reont eun tamm war an du ha derhel a reont mad da wiskamant o bro. Ar beurvrasa euz ar wazed, dreist-oll ar re gosa, a vez ganto eur

turban gwenn en-dro d'o 'fenn. Ar merhed a vez ganto oll, koz ha yaouank, eur gwiskamant euz ar re gaerra, eul lostenn hir beteg an douar, livet flamm ha fleur a-leiz warni, eur horsaj, ken flamm e liou ha kement a fleur warnañ. O bleo du a vez dalhet stard war o 'fenn gand eur chignon brao. War o diskoaz (hag a-wechou zoken war o 'fenn) e vez eur harre lien braz kaer, heñvel eun tamm ouz ar mouchouer a veze gwechall gand merhed Leon, flamm e liou ivez. Da vale, memez dre yenienñ vraz, ne vez ganto nemed soliou dalhet en o zreid gand eul lerenn.

Hervez eur gazetenn am-oa kavet e Toronto, ar "Golden Star" (ar steredenn aour), e-pad an tri devez e oam bet eno da viz even, ne oa ket bet eun nozvez heb eun emgann bennag etre Kanadianed ha tud deuet euz an Indez ha beb taol e oa bet kavet lazetao pe dri Indezad. Pa oam goude e Vancouver e veze ivez ken gwaz an traou.

Gouarnamant ar rann-vroio hag hini Ottawa a zo eur pennad zo lakæet nehet gand an dra-ze. Ne welont ket penaoz dond a-benn da lakaad fin d'an drouz a zav evel-se etre tud ar vro hag an estrañjourien, d'an emgannou ha d'al lazerez.

Eur gudenn all a zo, disheñvel ouz honnez, med diêz awalh ivez da ziluzia, hini an taillou.

Er Hanada, evel er Stadou-Unanet, ez eo pounner an taillou, kalz pounnerroh eged e Bro-Hall, da vihanna an taillou a vez da baea d'ar perseptour. Med n'eus forz pegen souezuz eo, n'eo ket an taillou-mañ eo a laka droug en dud. Ar re a 'flemm ar muia o imor eo ar re a rankont paea beb tro ma prenont eun dra bennag, ar re a vez greet outo T.V.A. dre amañ. Ar re-mañ a vez beb tro evito eur 'flemmadenn gasaliz hag a deu d'o hegasi muioh mui dre ma 'z a an traou war gerraad.

E Breiz hag e Bro-Hall ne zanter ket kement pouez an taillou-ze, beza ma ranker paea muioh c'hoaz eged ar Hanada. Perag ? Abalamour e Breiz hag e Bro-Hall ne vez ket distaget priz an taillou euz hini an dra a brener. O-daou e vezont en eur priz. Setu den ebed ne deu dezañ soñjal en taillou e-nez pæet. Er Hanada, er hontrol, pa brener eun dra, e prener anezañ gand e briz. Med pa 'z eer da baea e weler atao ar priz-se o sevel buan gand an deg pe zaouzeg dre gant a vez da lakaad ousspenn evid an taillou hag an dud a gav kaletoh paea anezo evel-se, pa vez kontet dezo dirazo.

Ar rann-vro a zav ar muia an dud enni a-eneb d'an taillou-ze eo rann-vro Quebec. Kredi a ran ez eo abalamour ma kav dezo ez int bet lakaet gand gouarnamant Ottawa. Med n'eo ket hemañ eo e-neus lakaet anezo. Lakaet int bet gand gouarnamant ar rann-vro, evel er beurvrassa euz ar rann-vroioù all. Kavoud a ra din n'eus nemed diou pe deir rann-vro hag a ne vije ket ar seurt taillou-ze enno. N'on sur nemed euz unan, an Alberta, rag homañ a denn fouge euz an dra-ze. E rann-vro Quebec ez eus meur a hini dija hag a refuz paea.

Med ar gudenn a ro ar muia a boan-benn da houarnamant Ottawa, ran lakaad a ra trubuil er vro a-bez, eo hini rann-vro Quebec.

Ar beurvrassa euz tud ar rann-vro-mañ a zo gallegerien. E kêr Montreal, el leh ma 'z eus ar muia a Zaozon a-bell, n'eus nemed eur saozneger evid daou halleger. Er rest euz ar rann-vro ez eus kalz nebeutoh : eur saozneger nemed ken evid pevar galleger.

Yez ofisiel ar vro a zo bet pell ar saozneg, daou hant vloaz pe ouspenn. E-pad an daou hant vloaz-se, Kanadianed ar rann-vro a veze red dezo ober toud o 'faperiou e saozneg. Med en desped da-ze o-deus dalhet mad d'o yez koz. Hag an dra-mañ n'eo ket nemed ken abalamour ma oa ar galleg yez o zadou koz. Bez' eo muioh abalamour ma tigas ar saozneg dezo da zoñj euz ar pez o-deus bet ar Gallaoued da houzañv gand ar Zaozon, p' o-doa lakaet ar re-mañ o hraban war ar Hanada en driwehved kantved. Gwallgaset e oant bet ganto neuze, ha pell goude zoken, peogwir, er bloaz 1839, unan euz pennou braz ar vro d'ar poent-se, Lord Durham, n'e-noa ket aon o lavared c'hoaz e oa dleet derhel da lakaad ar gallegerien da gemered gizioù, yez ha spered ar Zaozon.

Med ar re-mañ n'int ket bet gouest biskoaz da zond a-benn d'hen ober.

Gwir eo ez eo deuet tamm ha tamm gallegerien rann-vro Quebec da gemered eun dra bennag euz gizioù ha spered ar Zaozon, med kentoh re Zaozon ar Stadou-Unanet eged re ar Hanada. Deuet ez eus zoken en o yez meur a her saozneg (henn gwelet on-eus dija) ; chomet eo homañ gouslkoude beo ha kreñv. Dalhet ez eus bet mort d'ar yez en amzer dremenet ha bremañ e talher mortoh c'hoaz dezi.

Rag deuet or a-benn, gand mil boan da genta, da lakaad gouarnamant Ottawa da blega da ober euz ar galleg kenta yez ofisiel rann-vro Quebec hag

eil yez ofisiel unneg rann-vro all, toud ar re a zo enno deg dre gant euz an dud gallegerien. Setu bremañ toud an dud a rank deski diou yez : e rann-vro Quebec, ar galleg da genta, ha goude ar saozneg ; en unneg rann-vro all, ar saozneg da genta ha goude ar galleg.

Ma ne vije ket bet nemed stad ar galleg oh ober poan da hallegerien rann-vro Quebec e vije bet bremañ diluziet ar gudenn.

Med n'eo ket tost dezi beza. Perag ? Abalamour ma 'z eus eul lodenn vad euz tud ar rann-vro, an hanter pe ouspenn marteze, hag a fell dezo mond pelloh. C'hoant o-deus da weled ar rann-vro oh en em zistaga euz ar rest euz ar Hanada. De Gualle, er-bloaz 1967, o youhal dirag tud Quebec : "Vive le Québec libre !" ("Bevet ar Hebec libr !") e-noa atizet enno eur c'hoant hag a oa kreñv dija e meur a hini, ha bremañ ez eo ken kreñv enno ha ma 'z eo deuet da zalla anezo kement ha ma n'int ket gouest ken da weled netra all ebed nemed an dra-ze.

Henn gweled mad on-eus beb tro m'on-eus bet leh da goazeal gand unan bennag anezo.

Chicoutimi a zo eur gêr a 60.000 den, tost da Lenn Saint-Jean. En daou du emañ d'ar ster Saguenay, just el leh ma komañs homañ da veza don awalh da zigemeret ar bagou braz.

Eur gêr vras eo, beza ma 'z eus uzinou braz a-leiz e-barz. Chomet e oam daou zêvez eno. En eil devez, beza ma ne oa ket gwall vras an amzer, e oa savet c'hoant ganeom da vond da ober eur bourmenadenn hir war ar ster. Eur vag a oa hag a yee bemdez warni evid an devez. Eur vag gaer e oa homañ, heñvel awalh ouz an "Enez Eusa" e Brest, med kalz nevesoh. War ar vag ne oa nemed 100 pe 120 bugel, paotred ha merhed a saozneg pe drizeg vloaz, gand eur helenner yaouank ha seiz pe eiz kelennerez ken yaouank hag heñ.

Ar bourmenadenn a zo kaer kenañ penn-da-benn.

Ar vag a ziskenn gand an dour pell war-zu ar Saint-Laurent. Dre ma 'z eom, ar ster, adaleg Chicoutimi, a zo ledan dija. Marteze he-deus 3 pe 4 gilometr lehed. Eur blijadur eo mond warni, rag an dour a zo trankil, ken trankil hag an dour-mor pa ne vez mouch avel ebed.

Beb an amzer, ar vag a dosta eun tamm muioh en eun tu, ha goude en tu all, da ziskouez deom, pa vez leh, ar rehier uhel a zav e meur a blas

ken sonn ha mogeriou a-zioh an dour.

Gweled a reom neuze eno gand plijadur leun a houelaned, a skreved, a vorvrini hag a n'ouzon ket ped seurt all a laboused-mor, e toullou ar rehier, kluchet war o neiz o tofi pe o hori. Klevet a reom zoken ar zafar spontuz a reont o ragachad.

N'on-eus ket goulskoude kalz a amzer da zelled en-dro deom. Ar vuqale, kerkent ha m'o-deus gouezet ez om Gallaoued (penaoz o-deus gouezet ? N'em-eus ket gellet gouzoud) ne laoskont ket ganeom an disterra tamm amzer. Felloud a ra dezo chom da gaozeal ganeom, tregont pe zaou-ugent en-dro da bep hini ahanom, pe gentoh warnom. N'om ket gouest d'o distaga diouzom, kement a draou o-deus da houlen diganeom diwar-benn Bro-Hall ha kement a vall a zo ganto da ober. Estonet int dreist-oll o weled ne deu ket ganeom ar memez galleg gand o hini.

Med ni a zo ken estonet pa welom ne ouzont netra euz on bro nemed he ano. Pa houlenom diganto e pe leh euz ar bed emañ, hini ebed ne hell henn lavared. Chom a reont boud dirag on goulenn. Soñjal a reom neuze gand eun tamm tristidigez ne zeblant ket beza kalz gweltoh an deskadurez a vez roet er skol er Hanada eged an hini a vez roet bremañ dre amañ.

Goulskoude on-eus gellet kaoud eur pennad bennag da gaozeal gand ar helenner.

Kaozeal a reom eur pennad diwar-benn ar skolachou e Bro-Hall hag er Hanada ha diwar-benn galleg rann-vro Quebec. Med ne zaleom ket pell da goueza war an dra a zo bremañ o touella spered ar bevrvasa euz re yaouank ar rann-vro : ar plas a zo dleet da homañ kaoud er Hanada.

Ar paotr hag ar merhed yaouank a zo gantañ a fell dezo e vije distaget dioustu ar rann-vro euz ar rest euz ar Hanada evid en em houarn he-unan. "Skuiz om, emezo, o rankoud ober gand ar Zaozon ha plega dezo, o klevet ano zoken outo. Ne fell ket dom kaoud darempred ebed ken ganto. Re a boan o-deus bet on zud koz ganto gwechall. Ar henta ar gwella ma vo greet an disparti etre on rann-vro hag ar rest euz ar vro. Ouspenn an hanter euz tud ar rann-vro, toud tud ar parti a zo bremañ e penn gouarnamant Quebec, gand an aotrou Lévesque, a zo ar memez c'hoant en o 'fenn. Toud e 'fell dezo an disparti".

Goulenn a reom diganto daoust ha gouest eo rann-vro Quebec da en em denna he-unan heb ar rann-vroioù all.

Med ne hellom ket kaoud respont ebed diganto. O spered n'emañ ket ken e-touez an traou a zo e gwirionez dirazo hag a ranker konta ganto. O hoant a zo ken kreñv enno ha ma vevont evel en eur bed all kalz sklêrroh, kalz kaerroh, hini an huñvre, unan hag a vo mad toud an traou ennañ. An disparti, a gav dezo, a lakao toud an traou da vond en-dro e-giz ma 'z eo dleet, hag e vo kalz eürusoh an dud gantañ.

Lavared a rafed o-deus kollet toud o skiant.

Ne deu ket dezo soñjal ez eus ivez gallegerien a-leiz e toud ar rann-vroioù all, da nebeuta deg dre gant en unneg anezo. Petra a deuo ar re-ze da veza ? Daoust ha gouzañv a rayo ar Zaozon gweled anezo o chom e l'eh ma 'maint heb lakaad anezo da blega da zeski ar zaozneg hag hemañ nemed ken ? Med o spered n'eo ket gouest ken da vond beteg eno. Ne welont ket ken nemed o hoant.

Ne deu ket dezo zoken soñjal, ma 'z eo pinvidig rann-vro Quebec, e vank ivez dezi daou dra hag a ne heller ket ken ober kalz a dra hebto : ar petrol hag ar moneiz.

Ar petrol a zo toud er rann-vroioù all, dreist-oll en Alberta, hag ar moneiz a zo toud koulz lavared etre daouarn ar Zaozon, kalz pinvidikoh eged ar gallegerien.

Gwir eo he-deus ar rann-vro, pe e hellfe kaoud kentoh, kement a elektrisite ha ma kar. Med bremañ n'eo ket tost dezi kaoud awalh da lakaad da drei toud an uzinou a vije red. Evid-se e vije red dezi gelloud kaoud arhant da ober fardellou.

N'he-deus ket zoken a uzinou awalh da rei labour da doud he micherourien.

An hini a zo e penn ar rann-vro, an aotrou Lévesque, hag ar re a zo a du gantañ a zo bet desket dezo a-nevez zo petra a hell c'hoarvezoud gand eul lezenn bet greet ha votet re vuan, hag ivez bet klasket re vuan lakaad an dud da zenti outi.

Hervez al lezenn-ze, ez eo red bremañ da Zaozon rann-vro Quebec, ar re a zo e penn uzinou pe gomersiou, ober toud o 'faperiou e galleg, e-leh o ober e saozneg, evel ma reent araog.

Mad, Saozon ar rann-vro a ra, evel ma ra atao ar Zaozon a vez er-mêz euz o bro, pa vez c'hoant d'ho lakaad da blega en desped dezo. Gwelloh e kavont mond kuit. Med pa 'z eont kuit, ez a kuit ivez ganto o arhant.

Med eno, ar gwsa eo, e-touez toud ar gallegerien, n'eus hini ebed hag e-nije moneiz awalh da gemered plas ar re a ya kuit.

Setu e chom uzinou a-zav, e serr tiez a gomers. Dre-ze, niver ar vicherourien hag an implijidi dilabour ne ra nemed kreski. Lakaet int war an teil gand froudenn direzon eun toullad pennou skañv.

An dra-ze a zoñjan e-neus lakaet eun tamm plom e penn ar re a zo o ren gouarnamant Quebec. Deuet int da 'furraad. Lennet em-eus eur pennadig zo war ar gazetenn o-deus da genta paouezet da houlen digant ar Zaozon skriva toud o 'faperiou e galleg ; d'an eil n'eo ket ken kreñv enno ken ar c'hoant da weled ar rann-vro oh en em zistaga euz ar rest euz ar Hanada. O c'hoant a zo kentoh bremañ he gweled o chom stag outañ evid toud ar pez a zell ouz ar homers, an industri, al labour-douar, en eur gêr an ekonomiezh, hag an arme. Ne houlenont ket ken bremañ nemed ar 'frankiz politik. Prest int zoken da houzañv ma vije eur votadeg er Hanada a-bez war eur gonstitution nevez, ma ro homañ dezo ar frankiz-se.

Dond a raint a-benn marteze da gaoud ar pez a houlenont. Med an dra-ze ne raio ket e hello ar re a zo e penn gouarnamant Ottawa diluzia toud ar gudenn. Rag bez' ez eus c'hoaz eur rann-vro all, hini ar Holombi Britanik, hag he-deus c'hoant ivez en em zistaga euz ar rest euz ar Hanada. Homañ a zo kalz niverusoh enni ar zaonegerien eged ar gallegerien hag eul lodenn vad euz ar re-ze ne 'fel] ket dezo ken chom stag outañ.

Er re-ze n'eus ket muioh a volontez da en em gleved gand ar re all eged na'z eus e gallegerien rann-vro Quebec.

Gwelet am-eus an dra-mañ meur a wech.

Ar zaonegerien, dreist-oll, ne vez ket êz o digas da blega da gaozeal galleg, beza ma ouezont ober.

Me a oar ar zaonneg mad awalh. E lenn a ran ken koulz hag ar galleg. Evid kaozeal n'eo ket heñvel. Eun tamm poan em-mez awechou, rag n'em-eus

ket bet tro aliez da ober. Gouest on goulskoude da en em denna mad gantañ.


Med, en Alberta hag er Holombi Britanik, e reen espres van da veza heb gouzoud tamm zaonneg ebed, rag c'hoant em-meze da weled hag ar zaonegerien am-eze leh da houlen eun dra bennaq diganto, dreist-oll tud ar gompagnuneziou kirri-nij, a houzañve respont din e galleg. N'am-eus kavet kalz d'henn ober. Koulz lavared toud e reent evel ma n'o-dije ket bet desket ger galleg ebed hag e veze red din mond e zaonneg dezo ; goulskoude e ouien mad e rank kement implijad a zo dindan ar gouarnamant hag er gompagnuneziou braz gouzoud an diou yez ofisiel, ar galleg hag ar saonneg.

Med ne vez ket êz biskoaz lakaad ar Zaozon da zilezel an dispriz o-deus bet hag o-deus atao evid an dud estren, ar gallegerien evel ar re all. Hag an dispriz-se a zo brasoh c'hoaz er Holombi Britanik eged e Bro-Zaoz.

Pa 'z eus ken nebeud a volontez vad e-touez ar zaonegerien hag e-touez ar gallegerien, o-do poan a-leiz ar re a zo e penn ar Hanada evid o digas da en em gleved.

Lavared a heller goulskoude ne hello ket ar Hanada derhel da veza eur vro libr ma ne deu ket toud an dud a zo e-barz da en em unani. Ma ne en em glevont ket, ne zaleint ket pell da veza lonket gand ar Stadoù-Unanet. Dija ar re-mañ a zo krog mad o 'fao e rann-vro Quebec. N'ouzon ket ped tachenn vraz a zouar vag hag a goajou a zo fermet gand kevredigeziou chaserien, ped lenn ha ped rivier gand kevredigeziou pesketaerien euz kêriou braz evel New-York, Détroit, Boston. Kement zo ha ma 'h en em laka dija meur a hini da hrozmolad dre ma hellont ket ken mond da chaseal ha da besketa el leh ma dez c'hoant evel ma reent araog.

Ar Hanada a zo eur vro binvidig, med m'o-deus c'hoant ar Hanadianed da ganderhel da vev eüruz e kement a binvidigez, e rankint cheñch eun tamm o spered. Red e vo dezo dreist-oll kaoud ar volontez da ankounac'haad ar pez e-neus lakaet anezo gwechall da en em zevl an eil a-eneb egile, da en em gleved gwelloh ha da en em unani.



EUN OURZ

15) Pennad

On hent en Alberta hag er Holombi Britanik

Kaozeal a rin eun tammig muioh diwar-benn an Alberta hag ar Holombi Britanik eged diwar-benn rann-vro Quebec hag hini an Ontario.

Perag ? Muioh o-deus skoet va spered ha va daoulagad dre ma 'z eo uhelloc enno ar menezioù, kalz brasoc'h ar gwez er hoajou ha kalz flammoc'h liou an traou.

Med room da genta eun taol-lagad war an hent on-eus heuliet en diou rann-vro. Kalz eo bet diêsoh eged en Ontario hag e rann-vro Quebec.

Evid mond euz Montreal da Calgary, on-oc da ober eul lamm hir, eul lamm a 3.800 kilometr. Med e gwirionez on-oc bet pemp lamm da ober, rag ar harr-nij e-noa lakaet ahanom da ober eun tamm ar skolid-louarn, en eur gas ahanom dre Ottawa ha Toronto, en Ontario, Winnipeg, er Manitoba, ha Saskatoon, er Saskatchewan.

Chomet e oa a-sav pep hini euz ar hêriou-ze, med heb rei deom awalh a amzer da vond da daol eur zell warno. Setu e-noa lakaet ahanom da goll amzer a-leiz. Da nav eur on-oc kuitaet Montreal hag e oa ouspenn teir eur pa oam e Calgary. Med, er gêr-mañ e oam just e poent evid gelloud ober toud ar pez on-a da ober : fermi eun oto, mond beteg kêr (homañ a zo pemzeg pe ugent kilometr euz an aero-porz), treuzi toud anezi (ouspenn ugent kilometr) evid mond d'an otel on-oc lakaet derhel.

E Calgary, ne chomom nemed just da baseal an noz. En distro eo e chomim eur pennad, tri devez, eun tamm evid gweled kêr, med muioh evid mond da zelled ouz ar c'hoarioù a vo e-barz neuze, anvet "Stampede", brudet dre ar bed oll hag a gomañso just pa en em gavim en distro.

En devez war-lerh ez eom euz Calgary beteg Banff, e-kreiz ar menezioù Rohelleg, ar Rocky Mountains. Ar re-mañ on-bo anezo dirazom penn-da-benn an hent.

Kerkent ha ma kuitaom Calgary, emaint dirag on daoulagad. Pell emaint, tri-ugent pe zeg ha tri-ugent kilometr, med gweled a reom mad ar rehier begeg war o hern. En em zistaga a reont sonn ha net war an oabl glaz, kent net ha

ma lakaont da zoñjal emaint eno evel, war eur javed spontuz, dent eun aneaval mantruz. An erh en-dro dezo a zo teo. Kemeret a ra dindan heol melen ar mintin eul liou kaer kenañ, hini an aour ruz.

Banff n'eo nemed eun tamm kêrig a 3.000 den, en eun draoñienn ledan e kreiz ar menezioù, war bord ar ster Bow, ar ster a dreuz Calgary. Med eur gêrig vrag eo hag a vez touristed a-leiz e-barz, hañv-hoañv, en hañv evid pourmen ha pesketa, e-pad ar goañv evid c'hoari war an erh.

Euz Banff, e savom war-zu an hanternoz evid treuzi Park-Broadel Banff. Eno ez eom dre eun draoñienn ledan a-hed ar menezioù. Ar re-mañ a zo en daou du, uhel ha begeg ar reier warno ; a-blasou ez int goloet a erh hag a skorn teo. Kaer kenañ int da weled.

An hent a zo penn-da-benn e kreiz an draoñienn, evel eun troh ledan er hoad-pin hag epinet, stank, sonn hag uhel ar gwez ennañ. On has a ra goude, atao etre diou renkad menezioù ken uhel hag e-touez ar gwez beteg kêr Jasper dre ar Park Broadel e-neus kemeret ano ar gêr-mañ. Homañ a zo ivez eur gêrig vrag.

An daou bark Broadel-ze, hini Banff hag hini Jasper, ne reont e gwirionez nemed unan. N'eus distag ebet etrezo war bevar hant kilometr hed ha pevar-ugent kilometr lehed.

E Jasper e troom war-zu ar Huz-Heol, evid treuzi ar menezioù Rohelleg. Mond a reom da genta beteg eur gêriadenn anvet Tête-Jaune-Cache, en eur heulia, war gant kilometr pe dost, ar ster Frazer. Homañ n'eo c'hoaz eno nemed eur rivier pe gentoh eur froud vihan a bemzeg pe ugent metr lehed. Eno e kuitaom anezi, rag hi a dro war-zu an hanternoz.

Adaleg Tête-Jaune-Cache e tiskennom war-zu ar hreisteiz, war zeiz kant pemp kilometr, a-hed ar ster Thompson. An hent a heuil anezi daou pe dri hant metr uhelloc egeti, war gostez ar menez, rag an draoñienn a zo ken striz ha ma n'eus ket plas en traoñ nemed eviti.

Mond a reom evel-se dre eur gêr vihan anvet Kamloops (448 kilometr) beteg bourk Lytton (262 kilometr all). Eno e kavom adarre ar ster Frazer. Kemeret aon ganti o vond war-zu an hanternoz, war-zu eur yenienn spontuz, homañ a zo diskennet war-zu ar hreisteiz, en eur ober eun dro a nao hant kilometr. He zro war-zu an hanternoz e-neus lakaet anezi da greski. Bremañ ez eo eur ster vrag, eur froud vrag kentoh, rag mond a ra gand ar foeltr dre eun draoñienn striz kaer.

Ar ster Thomson, on-eus heuillet beteg Lytton a en em daol enni eno. Euz Lytton, ez eom a-hed an draoñienn, en eur weled dour ar ster, kalz izelloh egedom, o lammad euz an eil roh war eben, gwenn gand an eonenn.

Diskenn a reom evel-se beteg Vancouver, war bord ar Pasifik.

E Vancouver e chomom pevar devez da weled kêr hag ar vro tro-war-dro. Mond a reom zoken gand ar vag beteg kêr Victoria, kêr-benn enezenn vrag Vancouver hag ivez hini ar Holombi Britanik. Ar gêr-mañ eo penn pella on beaj er Hanada.

Pa guitaom Vancouver, emaoñ dija war hent an distro. Da genta e teuom eur pennad brao (350 kilometr) war-zu ar zav-Heol, a-hed frontier ar Stadou-Unanet, beteg kêr Penticton. Eno e troom war-zu an hanternoz, rag c'hoant on-eus mond da weled Park Broadel Revelstoke hag hini Glacier, araog mond adarre war-zu ar zav-Heol beteg daou Bark Broadel all, hini Yoho hag hini Kootenay.

En em gavet er Park-mañ, e tiskennom eun-tenn war-zu ar hreisteiz a-hed ar ster Kootenay hag a-hed ar menezioù Rohelleg, dre vourk Radium-Hot-Springs, e leh ma welom eur bern tud oh en em walhi hag o neu en eul lennig hag a zivoged an dour e-barz, rag dond a ra tomm euz an douar (28°-30°). Lavared a reer ez eo yahuz kenañ.


A-hed traoñienn ar ster Kootenay ez eus tost kement a vourkou ha dre amañ. N'eus ket ouspenn ugent pe dregont kilometr etre pep hini. Kalz muioc a zo da vihanna eged araog. Beteg-henn e ranken aliez ober 150 pe 200 kilometr araog gwelad eur gêriadenn pe eur gêr vihan.

Perag kement a vourkou dre amañ ? Abalamour ma 'z eo pinvidig ar vro. Kavoud a reer e-barz pe zour tomm, evel e Radium-Hot-Springs, hag a zach an douristed hag ar re glañv, pe vinou, evel en-dro da gêr Kimberley, e leh ma 'mañ brasa min plom ha zink a zo er bed.

Diskenn a reom evel-se war-zu ar hreisteiz beteg bourk Elko, tost da frontier ar Stadou-Unanet.

Adaleg eno ez eom adarre war-zu ar zav-Heol, war-zu Fort-Mac-Leod.

Med an hent a zo hir hag e rankom chom da loja en eun tamm koz-keriadenn anvet Windermere. Er gerriadenn-ze emaoñ adarre e kreiz ar menezioù



FORT-MAC-LEOD

Rohelleg. Ar motel a chomom ennañ a zo eur motel bihan brao, en eur bochad gwez, daou gilometr euz an tiez tosta ha pemp pe hweh kant metr nemed ken euz eul lenn kaer, al lenn Windermere. He oam ket gouest da goueza gwelloh, en eul leh ken trañkil, gand eur gwel dispar war al lenn hag ar meneziou uhel.

Er bourk ez eus eur hoz-tamm chapel goad, eur chapel anglikan. Ken bihan eo ha ma hell a-veh digemered 20 pe 30 den. Med beza ma 'z eo simpl ez eo dalhet kempenn, livet gwenn-kann.

N'eus forz pegen bihan eo, he-deus he istor. Tri-ugent pe zeg ha tri-ugent vloaz zo ne oa ket eno. En eur bourk all e oa, eur bourk eun tamm brasoh, deg pe zaouzeg kilometr pelloh war ar menez. Tud Windermere a ranke mond di d'an overenn.

Eun devez, pennou braz iliz anglikan ar vro a lakaas en o 'fenn kas ar chapel da gêr vihan Revelstoke, pemp kant kilometr ahano, war-zu an hanternoz. An dra, divizet evel-se ganto, a oe greet. Lakaet e oe ar paour-kêz chapel e tammou dirag tud Windermere sebezet, leun o halon a hlahar.

Hag e oe savet e Revelstoke

Med tud Windermere a blije o chapel dezo hag e-noa displijet dezo gwelad anezi o vond keid all outo. Divizoud a rejont mond d'he herhed hag he digas en-dro.

Eet da Revelstoke eun nozvez, e lakajont anezi a dammou d'o zro, e tigasjont anezi ganto, e savjont anezi en taol-mañ en o heriadenn, e l'eh ma 'mañ bremañ atao.

Euz Windermere, ez eom war-zu ar Zav-Heol, da Fort-Mac-Leod. En desped d'e ano, Ford-Mac-Leod n'eo ket ken eur ford. Bez' eo eur gêrig vrao a dri mil den, e-harz ar meneziou Rohelleg. Beza ma n'eo ket gwall goz, ez eo ar gêr gosa euz toud kreisteiz rann-vro an Alberta. He ano a zo deuet dezi abalamour ma ne oa eno da genta, er bloaz 1874, nemed eur ford savet gand ar horonal Mac-Leod, evid divenn a-eneb an Indianed an dud wenn a en em zalhe eno evid prena krehin anevaled gouez digand ar re-mañ.

Med buan e oad deuet da zevl tiez e-kichen ar fort.

Eur ford a zo eno atao. Med n'eo ket an hini koz eo. Hemañ a oa eur ford koad ha, deuet ar hoad da vreina ennañ, e oa eet da netra pell a oa.

An hini a zo bremañ a zo bet savet a-nevez zo, er memez leh gand an hini a oa gwechall hag heñvel-poch outañ. Toud emañ e koad evel hennez : ar mogerioù en-dro, an tourioù er herniel, ar hazarnioù, ar hambrou hag ar magazennou, greet toud gand korvou gwez pin, taillet a daolioù bouhal ha plantet en o 'fez en douar, an eil e-kichen egile, nemed en tourioù, el leh m'emaint lakaet a-hed an eil war egile.

An ano a Mac-Leod a zo bet roet dezañ abalamour ar horonal Mac-Leod, an hini e-noa lakaet sevel anezañ, a oa bet lazeta en eun emgann gand an Indianed.

Ar ford, e-giz m'ema, a zo eun dra gaer da weled hag e-barz ez eus eur muze leun a draou koz hag a ziskouez mad pegen kaled e veze gwechall buhez ar re a oa deuet eno da genta, war-dro ar bloaz 1870, pa veze ken diêz mond dre ar vro ha ken dañjeruz, keit all euz an dud all.


Goude Fort-Mac-Leod, e savom adarre war-zu an hanternoz evid distrei da Gâlgari.

Euz ar Ford beteg ar gêr-mañ, n'eus nemed 147 gilometr, a-bell ar berra pennad-hent on-bo bet da ober en eun devez e-pad on beaj.

An hent a zo eeun-tenn koulz lavared. Mond a ra dre ar blenenn, da genta a-hed douarou leton druz hag a zo enno loened lard a-leiz o peuri, ha goude, war hanter-kant pe dri-ugent kilometr, a-hed parkadou gwiniz kaer. Ne welom bourk ebed. E bord an hent, n'eus nemed, beb deg pe bemzeg kilometr, seiz pe eiz grignol houarn braz, rond, ledan hag uhel, an eil e-kichen egile, da lakaad greun da hed al ma vint taolet en treñ da vond beteg porz Vancouver, el leh ma vint kemeret gand ar vag. Linenn an hent-houarn a base just e-harz ar grignolou, a-hed an hent braz. Evid karga ar greun en treñ, n'eus da ober nemed digeri eun nor vihan war beb grignol hag ar greun a gouez outo o-unan er vagon.

Ugent pe dregont kilometr araog Calgary, on-eus da dreuzi eur hornbro euz ar re binvidika. Gweled a reom puñsou petrol en daou du d'an hent, n'ouzon ket pegement. Lavared a reer ez eus eno dindan an douar kement a betrol hag e toud an Arabi.

On beaj a echu e Calgary.



EUN ORIGINAL

Eno eo on-eus da gemered ar harr-nij evid distrei d'ar gêr. Med araog mond kuit, e chomom eno tri devez evid gweled ar c'hoariou braz a zo o vond da zigeri.

#### 16) Pennad

##### Ar menezioù Rohelleg. Park Broadel Banff hag hini Jasper

Tu ar Huz-Heol en Alberta a zo goloet penn-da-benn gand ar Menezioù Rohelleg, ar "Rocky Mountains". Ar re-mañ a zo eur renkad menezioù ha kompezennou uhel hag a ziskenn, war 5.000 kilometr, euz an Alaska, bro ar yenienn vraz hag ar skorn, dre toud ar Hanada hag ar Stadou-Unanet beteg ar Mexik. Menezioù uhel kenañ int, kalz uhelloc'h c'hoaz meur a hini anezo eged menezioù uhella an Alpou e Bro-Hall.

Ar "Mont-Blanc", an uhella er re-mañ, ne zav nemed beteg 4807 metr.

Ar menez "Logan", en Alberta, e-neus ouspenn 6 000 metr (6 050), ar menez "Saint-Elie" 5 486. Ar "Mont-Blanc" n'eo nemed eun tamm korrig en o hichenn.

Menezioù kaer kenañ int da weled, er Hanada hag er Stadou-Unanet.

N'o-deus ket kalz a dra euz an Alpou.

Da genta, abalamour ma'z int, da weled, izelloh egeto. Med, evid mond beteg enno, e vezer savet, pelle a vez dija, en daou du, war eur gompezenn uhel a hwezeg pe zeiteg kant metr.

D'an eil, ar reier, war o hern, ma z' int ken begeg, n'o-deus ket ar memez liou. Re an Alpou a zo griz. Re ar Menezioù Rohelleg a zo ruz ar beurvrasa anezo, ken ruz ha reier Ploumanac'h, Pa sko an heol warno, diouz ar mintin ha diouz an noz, ez eo eun dudi o gweled, rag kemered a reont neuze liou dispar eun aour burzuduz.

Ouspenn, ma 'z eo striz ha don an draoñiennoù en Alpou, er Menezioù Rohelleg ez int, er hontrol, ledan kenañ.

Etre Banff ha Jasper, meur a dra o-deus skoet va daoulagad ha va spered.

Da genta eul leh iskiz, anvet "Sunwapta Pass", hag a zo evel eun ode da dreuzi ar menez. Eno emañ etre diou renkad menezioù, evel araog, med kalz uhelloc'h, 2.000 metr uhelloc'h eged rez ar mor. An hent a rank tremen dre al leh-se, pa guita traoñiennoù ar ster Bow evid mond en hini ar ster Athabaska. Pa 'maom eno, ez eo diwezd dija. An heol ne zaleo ket da vond da guzad er penn all d'an draoñiennoù a zo dirazom. Med taol a ra c'hoaz eun tamm tan ha sklêrijenn, en daou du, war ar menezioù. Hini an tu deou, uhel ha sonn, a zo ar hoad pin warnañ koulz lavared beteg e gern. Ar gwez, stank, braz hag eeun, a ra war e gostez evel eun tapis teo gwer, eur gwer dispar, evel alaouret gand bannoù an heol skeduz.

Uhelloc'h, n'ouzon ket ped roh a zav war-zu an oabl o beg lemm evel dent eun heskenn vraz iskiz. Re all, en o-zouez a gemer furmou anevaled mantruz, hini eul leon, hini eur hâstor, hini eur hañval, pe hoaz hini eur manah divent lakaet gantañ e gapuchon war e benn.

Med, ma 'z eo kaer ar gwel en tu-ze, ez eo kaerroc'h c'hoaz en tu all, pe iskisoh marteze. N'eo ket heñvel na tost an traoù. Eno, war an dremmvel, glaz an oabl n'eo ket ken ken sklêr. Duaad a ra dija. Med en em zistaga a ra c'hoaz warnañ net beg eur menez kalz uhelloc'h eged ar re all, hini ar menez Athabaska, striz ha lemm evel penn eur gizell. Hemañ a zav eno, evel ma vije lorch ennañ, e 4.000 metr dreist toud ar re a zo en e gichenn. Med e vrud n'eo ket deuet dezañ euz an dra-ze. Deuet eo, dre ma 'z eus, war e gern hag en-dro dezañ, eur bern skorn spontuz hag a ne deuz ket biskoaz. Kement a skorn a zo warnañ ha ma tiskenn izel war e gosteriou. El leh ma 'maom o selled outañ, ez eo deuet evel eur ster, dre eur han striz, koulz lavared beteg an hent braz. A-veh ma 'mañ kant metr outañ.

Eno emañ er han evel eun teod hir teo.

El leh-se, beza ma 'z eo kaer, n'eus nemed eun ti braz, eun otel. Hanter-kant pe dri-ugent metr emañ, en eur bochad gwez pin, war eun tamm tosen, a-zioh an hent. Eun otel brao ha dalhet mad eo, a zaou estaj, koad-toud nemed an doenn vrik ruz. Kaer eo da weled war e dorgenn, e-touez ar gwez. Setu e tivizom chom da loja ennañ.

Beza ma 'z eo yen an amzer, ez eom da ober eun dro beteg an teod skorn.

Talvoud a ra ar boan mond beteg ennañ. Diwar an hent ne oa ket tost deom e weled mad.

Mantret e chomom pa en em gavom en e gichenn. Dirazom emañ evel eur roh vraz sonn koulz lavared, a bemzeg pe ugent metr uhelled hag a gant pe gant-hanter-kant metr lehed. Spontuz eo gweled anezañ, dreist-oll pa zoñjer ez a war zonnaad pell war-zu ar menez. Pebez bern skorn a zo eno !

Souezuz eo pegen net ha pegen sklêr eo ar skorn e-barz e kreiz. N'eus ket ennañ an disterra loustoni, an disterra grouanenn, zoken an disterra pik du. Ken glaz ha ken sklêr eo hag an dour e kreiz ar mor braz.

En daou du n'eo ket heñvel. Eno ez eo louz, du gand an tammou douar hag ar vein, rag ne baouez ket da ziskenn penn-da-benn ar han. Ne red ket, sur, evel an dour, med mond a ra heb ehan war-zu an traon, tamm ha tamm, goustadig, ken goustad ha ma ne weler ket anezañ o vond. Dre ma tiskenn e rakl bord ar menez, en daou du d'ar han, en eur ziskolpa eun tamm douar du amañ, eur pezh men braz ahont, en eur gas gantañ kement tra a gav war e hent. Metra ne hell herzel ouz e nerz. Toud an traou-ze a ya neuze gantañ beteg an traoñ, beteg al leh ma 'h en em laka da dreuzi. Hag e teuz eno, goustadig ivez, evel ma 'z eo diskennet hag, evel ma nije kollet toud e nerz, e laosk da goueza, an eil war-lerh egile, kement tra a zo deuet gantañ.

Gweled a reer an dour o tiwan dindannañ, en daou du hag e kreiz, dre dri doull braz ront evel bolzennoù eur pont. Ar vein hag an douar o koueza eno a deu da ober tamm ha tamm evel eur vogel ledan.

Diwezatoh, a-benn seiz pe eiz kant vloaz amañ, ma teufe d'ar skorn teuzi buan ha mond pell war e giz, an tamm moger a zo eno bremañ a zalho marteze an dour neuze hag a rayo eul lenn vihan heñvel ouz ar re ken kaer on-eus gwelet dija ken niveruz dre ar vro.

Red eo lavared eur gêr diwarbenn al lennoù bihan-ze.

Heñvel awalh int ouz lennoù bihan ar Pireneou, en o liou da vihanna, rag brasoh eo o ment. Bez' o-deus war-dro eiz pe zeg kilometr tro. Toud emaint, evel ar re-ze, e-harz menezioù uhel. Toud eo bet dalhet an dour enno, dour hag a deu euz an erh hag ar skorn o teuzi, gand ar vein hag an douar bet treinet ha berniet gwechall-goz, ne oar den pegeit zo, goude ma oa bet yenienn klaz brasoh eged bremañ, gand ar skorn braz a oa bet neuze,

ha laosket gantañ war-e-lerh, pa oa deuet tomder awalh d'e lakaad da vond war e giz.

Ar haerra euz ar re on-eus gwelet eo an hini a zo bet anvet "Lake Louise" hag a zo e-harz ar "Victoria Glacier", seiz pe eiz kilometr ha tregont euz Banff. Ar menez-mañ a zav e gern beteg tri mil seiz kant metr hag a chom erh ha skorn warnañ e-doug ar bloaz. Ober a ra koulz lavared toud an dro d'al lenn beteg ar chaoser a zaou pe dri gilometr a zalh an dour.

P'emaom eno, ez euz warnañ eur gwiskad mad a erh gwenn, kouezet e-pad an noz, war eur bern skorn glaz deg pe ugent gwech teooh. Gand an erh gwenn hag ar skorn glaz d'an neh, en-dro d'ar reier begeh ruz en tu a sko an heol warnañ, ha ruz-du e tu an disheol, gand, izelloh, ar gwez pin kaer, glaz-du o beg, hag a ziskenn adaleg ar skorn beteg an dour, ar menez a ra, en-dro d'al lenn, evel eur stern dispar en-dro d'eur mên presiuz. Rag en traoñ, an dour a zo glaz, pe gentoh glaz-gwer, glaz-gwer eur mên safir euz ar re gaerra. Ken trankeil ha ken sklêr eo an dour ha ma weler warnañ ken net ha ma 'z eo posubl toud an traou a zo en-dro : ar reier, an erh, ar skorn, ar gwez, an tammou koumoul zoken en oabl glaz, alaouret gand bannou melen-aour heol ar mintin. Eun dudi ! Biskoaz n'eus bet dirag va daoulagad gwel ken kaer !

Chom a reom pell da zelled, heb gelloud distaga on daoulagad euz al lenn hag euz ar menez.

Med neuze, a-greiz-toud, e hoarvez dirazom eun dra ken iskiz all. Kleved a reom e neh ar menez eur strakadenn spontuz. Eur strakadenn verr ha seh, deg gwech kreñvoh eged tenn eur hanol braz, pa vezer en e-gichen.

Ar strakadenn a zo lakaet da veza spontusoh c'hoaz gand an enkleo a ya euz an eil tu d'ar menez d'egile. Gouzoud a reer pegen skrijuz e vez an dalmou kurun en draoñiennoù etre ar menezioù. Mad, an taol-man a zo skrijusoh eged eun dalm gurun.

En em houlen a reom petra a zo en em gavet, petra e-neus greet ar strakadenn-ze, rag n'eus tamm arne ebed ; an heol a lugern splan en eun oabl a n'eus warnañ nemed eur goumoulenn wenn bihan bennag ; lakaad a ra zoken eun domder vad da goueza warnom.

Med, koulz lavared kerkent ha ma 'z eo echu ar strakadenn genta, e teu eun all, kreñvoh c'hoaz, hag e welom o tistana en eun taol-kont diouz neh ar menez eur bern skorn iskiz, a gant pe zaou hant metr hed hag a zaou-ugent pe hanter-kant teoder. Diroll a ra d'an traoñ, en eur darza e n'ouzon ket ped mil tamm war ar rehier a zo izelloh, en eur ziskar kement gwezenn a en em gav gantañ hag ez a da goueza el lenn. En homañ, an dour a strink uhel en êr hag a zav e gwagennou mantruz war-zu ennom. Med, pell araog n'o-deus tostaet ouzom, ar re-mañ a zo koazet, hag en on tu a-veh ma sav eur rid bennag.

Diou strakadenn ken spontuz, eur bern skorn ken braz o tiroll ken buan d'an traoñ, oh ober kement a zafar en-dro dezañ, biskoaz n'on-nije soñjet en em gavoud eno dirag traou ken iskiz ha ken kaer asamblez.

Med eun dra souezuz a weler c'hoaz er Menezioù Rohelleg hag a ne gaver ket aliez er menezioù uhel : an draoñiennoù etre ar menezioù a zo traoñiennoù ledan. En daou du ez eus eur renkad menezioù sonn, begeg ar rehier war o hern. An draoñienn a ya pell, 100 pe 150 kilometr, gand ar memez lehed atao, gand ar menez, e peb tu, oh ober dezi evel eur garid uhel penn-da-benn. Etre Banff ha Jasper, an hent a ya dre greiz traoñienn ar ster Bow en eur ober eun troh ledan er hoad pin, war 218 kilometr. He guita ket anezi nemed war driweh pe ugent kilometr, pa rank sevel betek ar Sunwapta Pass, araog diskenn en tu all, da genta e traoñienn ar ster Sunwapta ha goude en hini ar ster Athabaska. En draoñienn-mañ eh en em gav eun dra souezuz awalh pa dostaer euz Jasper. Eno an draoñienn a zo ledan kemañ hag ar ster a gemer koulz lavared toud he lehed. An dour e-barz, ken ledan eo, n'e-neus ket kalz a zonder hag ez eo bet lakaet an hent da vond dre greiz ar ster war eur chaosera a eur metr pe zaou a uhelled. Marteze e reer evel-se seiz pe eiz kilometr. Plijaduruz awalh eo mond eno gand an dour o redeg en daou du war an trez melen-rouz. Ankounac'haad a reer neuze eur pennad selled ouz ar rehier war ar menez en daou du ha war ar gwez er hoajou don. Med ar re-mañ ne zaleer ket d'o havoud adarre. Prest goude beza treuzet an Athabaska, on-eus tro a-greiz-toud da weled e-touez ar gwez e bord an hent eur pez ourz du braz o chom a-zav da zelled ouzom o paseal. Ni a chom a-zav ivez kerkent. Med heñ, sur, n'eo ket euz an ourzed-se hag a deu da houlenn boued digand an dud, rag ne ra nemed rei

deom eun taol-lagad, eun taol-lagad disprizuz, araog trei buan e benn-adreñv deom, heb respet ebed, ha mond d'ar haloup dindan ar gwez braz e donder ar hoad.

Rag traoñiennoù ledan ar Menezioù Rohelleg a zo goloet a goajou penn-da-benn, koajou stank ha kaer ar gwez enno. En traoñ, war doud o lehed, ha, war 5 pe 6 kant metr war gostez ar menezioù, ez eus gwez a beb seurt : peupli, dero, bezo, skao-grah mesket gand ar gwez pin, ar sapr hag an epinet. Uhelloh, ha betek an erh, ne zav ket ken nemd pin ha sapr.

E peb traoñienn ez eus ivez eur ster vraz, trankil awalh an dour e-barz, war bennadou hir a-wechou, hag a en em laka a-greiz-toud da benn-folli e lammou-dour iskiz, evel an hini a gaver war ar ster Athabaska, pa deu d'he traoñienn strisaad. Eno, paket etre diou roh sonn, an dour a zo spontuz pegement a gas a zo gantañ o vond da en em daol, gwenn gand an eonenn, ugent metr izelloh, gand eur harnach gouest da vouzara peb den.

Er Menezioù Rohelleg ez eo souezuz toud an traou da weled. Ar rehier war gern ar menezioù, lemm o beg ar bevrvasa anezo hag o zroad o yena en erh hager skorn. Lod anezo a gemer, er hontrou, furmou anevaled pe draou iskiz : furm eul leon gourvezet pe hini eun olifant, furm eur habell-touseg braz pe hini eun tour uhel. Ar sterioù, hag a vez uhel an dour enno diwezad en eun hañv berr hag abred adarre en eun nevez-amzer berroh c'hoaz, a zo mantruz pegement a vuhez a vez enno (samoned ha luzed a vilierou). Eno ez eus eur baradoz evid ar basketaerien. Ha d'ar fin, ar hoajou, ken stank, ken kaer, ken eun betek ar beg ar gwez enno, kement a 'fleur enno, a beb seurt ment, a beb seurt liou, a beb seurt furm, ha kement a anevaled iskiz, re hag a n'o-deus aon ebed ken rag an dud.

#### 17) Pennad

#### Menezioù ar Holombi Britanik

Treuzet ganeom ar Menezioù Rohelleg, emao er Holombi Britanik. Eno, betek ar mor Pasifik, betek kêr Vancouver, ne guitaom ket ar menezioù. Penn-



da-benn, n'eus nemed menezioù, hag atao menezioù, med eun tamm izelloh eged ar Menezioù Rohelleg.

En o-zouez n'eus hini ebed uhelloh eged 4.000 metr. An hini uhella euz ar re a welom, ar menez Robson, n'e-neus ket gelllet sevel dreist 3.953 m. Ar bevrvasa euz ar re all a zo etre 3.000 ha 3.600 metr. An dra-ze ne vir ket outo d'on lakaad meur a wech da chom sebezet dirazo.

N'eo ket tost dezo beza heñvel ouz ar Menezioù Rohelleg. Kalz eo sonnoh an traou ganto hag an draoñiennoù etrezo zo kalz strisoh ha kalz donnoh. Euz Jasper betek Vancouver, ez eus 867 kilometr. Mad, war geid all, an hent ne ra nemed heulia teir draoñienn, med traoñiennoù striz kenañ : da genta, hini ar ster Frazer, war zeg ha pevar-ugent pe gant kilometr, araoz ma teu dezi kemered he lañs war-zu an hanternoz ; goude hini ar ster Thomson, war 700 kilometr, betek bourk Lytton ; hag, evid echui, adaleg eno, hini ar ster Frazer, a gavom adarre eur wech all.

An deir draoñienn-ze a zo ken striz ha ma n'eus plas enno, d'an traoñ, nemed just evid ar ster. Homañ a waler anezi diwar an hent braz a zo daou pe dri hant metr uhelloh, bet taillet gand mil boan penn-da-benn e kostez ar menez. An dour er ster a zo gwenn gand an eonenn. Diskenn a ra a-benn kas. Strinka a ra uhel en êr war ar rehier braz a en em gav gantañ war e hent. Trej a ra en-dro dezo. Ne vez biskoaz e peoh ; atao e vez eur fulor spontuz ennañ. Ne vije gouest bag ebed da vond warnañ. Ar zamoned soken, ken kreñv goulskoude, o-dez mil boan o vond a-eneb dezañ war-zu an neh d'al lehiou ma vezont boazet da vond da daol o greun. A-leiz anezo ne hellont ket. A-nevez zo, evid rei dezo eun tamm sikour, ez eus bet lakaet e meur a blas skalierou, pe skeulioù, da drehi dezo eun tamm kas an dour.

E traoñiennoù ken don ha ken striz, etre menezioù ken uhel ha ken sonn, n'eo ket tost e vije ken flamm al liou war an traou, war ar rehier ha war ar gwez, ha ma vez e traoñiennoù ledan ar Menezioù Rohelleg. An heol ne hell ket diskenn enno biskoaz. Ouspenn e vez atao warno eur vrumenn dano hag a laka war doud an traou eun espes gouel hag a ro dezo oll eul liou teñval glaz-du. Kaer awalh eo goulskoude ar vro da weled, med trist eo eun tamm.



HENT-HOUARN ER MENEZIOU

E traoñienn ar ster Thomson hag en hini ar ster Frazer ez eus, e peb tu d'ar ster, eun tammig uhelloh egeti, eun hent-houarn gand eul linenn nemed ken. An daou hent-houarn n'int ket d'ar memez kompagnunez.

Eur boan spontuz a oa bet, tost da gant vloaz zo, o lakaad an diou linenn da vond a-hed ar ster ha muioc'h c'hoaz o lakad anezo da dreuzi ar menezioù, pa veze red. Poan gand ar rehier ha gand an erh. Eun devez e oe lazet 60 den en eun taol gand an erh o koueza en e boull diwar ar menez. Kement a boan ha kement a zañjer ma teuas eur poent hag a ne felle ket ken da vicherourien ar vro kenderhel da labourad da ober an hent-houarn. Ranket e oe goulenn Chinaed da zond da echui anezo.

Eur skwer mad a zo da ziskouez pegen kaled e oa bet dond a-benn da lakaad an hent-houarn er vro. En eul leh anvet "Rogers-Pass", eun espes ode pe riboul etre daou verez uhel, n'emaer ket nemed 1382 metr uhelloh eged rez ar mor.

An dra-ze n'eo ket gwall uhel (da weled da vihanna) hag eur wech paseet eno, emaeer en tu all d'ar menez ha n'eus ket ken da ober nemed diskenn.

Med, ar pant da vond beteg eno a zo sonn spontuz, re zonn d'an hent-houarn, dreist-oil da vond war-eeun. Setu e oe red ober d'al linenn, evid gelloud he lakaad da zevel, trei evel neudenn eur viñs. Evid-ze, e oe dav kleuza dindan ar menez, dindan ar memez menez, daou dunel war bevar gilometr eiz kant nemed ken, daou dunel berr, ken berr ha pa vez penn an treñv o tond er-mêz en eun tu, e vez pell c'hoaz e lost da vond dindan an douar. En tunel izella, ez eus 1,62 dre gant a bant gand al linenn hag 1,66 dre gant en uhella.

Pa vez eno, o vond gand ar zao, eun treñ marhadourez, unan euz ar re a vez enno kant bagon hag o-dez eur hilometr hed pe ouspenn, e weler pemp marh-houarn o sacha anezañ. Med arabad eo soñjal ez afe buan ganto. He ya ket buannoc'h eged eun den d'ar paz. Red e vez neuze chom eur pennad war an hent a zo hanter-kant metr uhelloh, war gostez ar menez, da zelled outañ o poania da ober e zioù zro dindan ar menez ha da zevel goude war ar pant. Ar gwel a dalv ar boan. Tud a-leiz a vez o sellad hag a vez braz o 'flijadur.

An treñ, gand e bemp marh-houarn ruz-flamm, gand e wagonioù a beb seurt liou, ruz, glaz, melen, du, gwenn, ken flamm, a zav goustadig, goustadig. Poania a ra, evel eur preñv braz marelet, da vond war-raog. Kaer e-neus goulskoude, e chom da dreina. Med ne goll ket e basianted hag e teu a-benn da zevel d'an neh.

Menezioù ar Holombi Britanik a zo ken sonn a-leiz anezo ha ma n'eo ket ral gweled anezo a-wechou o koueza en o 'foull. Ya ! O koueza en o 'foull !

Hope ha Princeton a zo diou gêr vihan, an hini genta a 3.000 den, an eil a 2.000, e kreisteiz ar Holombi Britanik, tost da 'frontier ar Stadou-Unanet. Etrezo ez eus 134 kilometr. Bremañ n'eus bourk ebed etrezo. Gwechall goulskoude e oa unan, 16 kilometr euz Hope. Med euz ar bourk-se, ne chom netra ebed ken, da vihanna a wel d'an dud. An hent braz da vond da Princeton a zo eun hent koz, greet mad, med striz awalh ha tro a-leiz gantañ. A-greiz-toud, el leh ma komañse unan euz an droioù hirra, n'eus hent koz ebed ken. Mond a ra da goll dindan eur bern mein pe atred a zaou-ugent pe hanter-kant metr uhelled hag a holo toud an douar dirazom, war doud lehed an draoñienn. Med kavoud a reom eur pennad hent nevez ledan hag a zav eeun-tenn war ar bern mein gand eur zao sonn. Petra a gav deoh eo ar bern mein-ze a base an hent nevez warnañ ? Mad, n'eo netra nemed an hanter euz ar menez a zo c'hoaz e hanter all en he zav en tu dehou, begeg he hern, 600 metr uhelloh eged an draoñienn, ar Johnson's Peak. Hemañ a zo bremañ dirazom evel eur vengleuz mein ruz vraz digor a-wel d'an oïl. Med e gwirionez n'eus mengleuz ebed eno. N'eus ket bet hini ebed zoken biskoaz.

Trizeg vloaz zo e oa eno eur bourk, leun a vuhez ennañ, e-harz ar menez.

Med, d'an nao a viz genver 1965, e oa deuet d'an hanter euz ar menez difaragoulla ha koueza en e boull en eun taol-kont war ar bourk ha war doud an dud a oa o chom e-barz. Ar vein a zo eno atao e-giz ma oant, pa oant kouezet, war an hent koz, war an tiez ha war an dud, goloet toud eno beteg fin ar bed.

Ar Hanada a zo eur vro gaer, med eur bro houez hag a vez aliez garo ar vuhez e-barz.

18) Pennad

Vancouver

Vancouver, war bord ar mor Pasifik, a zo, gand San-Francisco (er Stadou-Unanet), unan euz ar haerra kêriou a zo er bed hag unan euz ar brasa perzier-mor.

Bez' eo dija eur gêr vraz, peogwir ez eus 900.000 den o chom e-barz.

Goulskoude n'eo ket eur gêr goz. N'eus ket kant vloaz c'hoaz, er bloaz 1886, ne oa nemed eur hoz-tamm kêrig a 2.000 den. D'ar poent-se ne oa e-barz da lakaad an dud da veva nemed an heskennerez. Abaoe ez eo deuet da veza unan euz kêriou pinvidika ar Hanada, dre an heskennerez atao, sur, med ivez dre gomerz ar hoad da ober paper, dre gomerz ar gwiniz, dre ar besketerez ha dre ma 'z eus bet kavet en-dro dezi dre ar vro eun niver braz a vinou aour, arhant, kouevr, plom, soufr, nickel ha meur a dra all c'hoaz.

Ar gêr a zo en em skignet e penn aber ar ster Frazer, e bord eul lenn-vor vraz, etrezi hag eur menez uhel e peb tu.

Ledet eo war deir dachenn vraz distag an eil euz eben. An hini greiz a zo etre eur wazenn-vor ledan, en tu dehou, pa zeller ouz ar mor, hag ar ster Frazer, en tu kleiz.

An diou all a zo, unan e peb tu da honnez, hini an tu dehou, etre ar wazenn-vor hag ar menez ; hini an tu kleiz, etre ar ster Frazer hag ar menez all.

Pepini euz an teir dachenn-ze he-deus war-dro daou-ugent kilometr hed ha deg pe zaouzeg lehed.

Vancouver a zo eur gêr vraz hag eur gêr gaer. Med ma 'z eo kaer, n'eo ket abalamour ma 'z eus tiez kaer e-barz eo. Re a douriou, a diez a hanter-kant pe dri-ugent estaj, a zo e-barz. Ar gêr goz a zo bihan ha kollet en o zouez.

War ar poent-se emañ pell war-lerh San-Francisco. Med, gwir eo, San-Francisco a zo kalz kosoh.

Vancouver, ma'z eo kaer eo, da genta, abalamour ma 'z eus en daou du dezi menezioù uhel, evel evid he divenn. Pa oam eno, da 'fin miz even (26-29), e oa c'hoaz teo an erh warno, beza ma oa brao ha tomm an amzer.

D'an eil, abalamour ma 'z eus dirazi eul lenn-vor vraz, kalz brasoh eged hini Brest ha ma 'z eo treuzet eul lodenn anezi gand eur wazenn-vor ledan hag a ya pell en douar, etre ar menezioù, evel eur ster vraz.

D'an trede, abalamour ma'h en em daol el lenn-vor, eun tamm araog kêr, ar ster vraz Frazer. Homañ, pa en em gav eno, he-deus dija redet war 1300 kilometr dre veneziou an Alberta hag ar Holombi Britanik. Treuzet he-deus ar rann-vro-mañ euz an eil tu d'egile.


Da bevare, abalamour ma 'z eus e-barz eur porz-mor braz, asamblez porz a gomerz ha porz a vrezel, leun atao a vagoù a beb seurt ment hag a beb seurt liou, deuet euz kement bro a zo er bed. Pa oam eno e oa, war al lenn-vor, triweh pe ugent bag a zaou-ugent pe hanter-kant mil tonell o hortoz o zro da vond er porz da garga ed da gas d'ar Rusi.

D'ar fin, abalamour ma 'z eus e kêr hag en-dro da gêr, parkou braz euz ar re gaerra.

Ar brasa haq ar haerra a-bell, ar "Stanley Park", a zo e gwirionez eur hoad braz, bet dalhet en etad ma oa gwechall. Eun hent braz a ra an dro dezañ, etre ar gwez hag al lenn-vor. Eno e heller gweled gwez sapr ha gwez sedr spontuz pegen braz int. A-leiz anezo o-deus ouspenn kant metr beteg ar beg ha pemzeg pe ugent metr tro a-rez an douar. Tost int ken uhel hag ar gwez "sequoia" a gaver er Haliforni, er Stadou-Unanet, seiz pe eiz kant kilometr izelloh war-zù ar hreisteiz.

Meur a wech om bet o pourmen er park-se ha beb tro e kavem eun dudi gweled eno, dindan an oabl glaz hag an heol o lugern, ar gwez-se ken teo, ken uhel, ken yah ha ken sonn. Pegement a draou o-deus gwelet ar jeanted koz-se !

Eun dra all souezuz a zo er "Stanley Park". War eun dachenn vraz dizolo, touzet brao ar yeot warni, tost d'ar hoad, tost d'ar gwez, ez eus



EUR BIZON

nao pe zeg pilier braz, uhel ha teo (weez en o 'fez), plantet eno en eur renkad, seiz pe eiz paz an eil euz egile, bet kizellet warno, gand arzourien indian euz ar vro, pennou ered (egled), pennou arzed (ourzed) ha kastored mesket ganto pennou tud. Toud ar pennou-ze a zo livet gwenn, ruz ha du. Iskiz int da weled, ha kaer, beza ma 'zint bet kizellet groz.

Arzourien indian a zo c'hoaz hag a oar labourad evel ma ree gwechall o zud koz. Rag bez' ez eus c'hoaz eun toullad brao a Indianed dre ar vro hag a-leiz anezo a fell dezo kenderhel da veva e-giz ma ree an Indianed gwechall.

Gouarnamant ar Hanada e-neus roet dezo tachadou douar anvet "rezerv", evel er Stadou-Unanet, hag a hellont chom da veva enno, m'o-deus c'hoant.

Ar heurvrasa euz ar re a chom eno a denn o bevañs euz ar besketaerez. Pesketa a reont dreist-oll ar zamoned a zo berniou anezo partoud dre ar vro, er mor hag er steriou. Lod all a vev o 'fermi o douar da diez a gomerz pe da dud hag o-deus c'hoant tremen o amzer vag o c'hoari "golf". Ar re anezo a fell dezo kuitaad ar "rezerv" a ya da labourad e kêr e-giz micherourien, pe war ar studi, evel an duñ wenn, evid beza medisined, alvokaded, ijinourien hag all... Lavared a reer ez eus 40.000 e kêr Vancouver. Meur a hini anezo, goude m'o-dez echuet o studi a zistro da veva e-touez o rummad.

Kement skeudenn labous, kement skeudenn aneval a zo bet kizellet war ar pilierou koad, a zo bet greet evid enori, dre al al labous pe an aneval, eur 'famill pe eur rummad Indianed. Rag ar re-mañ a zo o hredenn ez eo diskennet o famill pe o rummad euz al labous pe an aneval-ze.

Rummad an Indianed Tsootsuna a ziskenn euz an er (egl) braz anvet ganto "Kun-Kware-Kuleggi", da lavared eo "al labous-kurun". An egl-ze a vez atao e skeudenn, digor e ziouskell gantañ, war beg pilier ar rummad.

Rummad an Indianed Walibui a deu euz an arz griz, ken skrijuz, an hini a vez greet outañ e saozneg ar "grizzly". Setu e vez atao penn an arz-se war beg o filier, hag aliez lakaet skeudenn penn an arz war skeudenn korv eun den.

Diêz awalh e vez a-wechou gouzoud mad skeudenn pe seurt labous pe seurt aneval a vez kizellet war ar pilierou. Rag gwall hroz e vezont greet aliez. An arzourien o-deus kizellet anezo zo tud dornet mad ; med o

c'hoant n'eo ket da ober al labous pe an aneval just evel ma weler anezañ bemdez dirag an daoulagad ; kentoh eo da ober euz pepini anezo arouez (symbol) peb rummad. Eun tamm a reont evel ma ree gwechall dre amañ an arzourien a ree arouezioù pe ardamezou ar familhou nobl. Med, memez kizellet groz, e vezont kaer da weled, dreist-oll gand al liou flamm a vez warno.

Vancouver a zo ivez eur gêr iskiz, dre ma 'z eo eun tamm heñvel ouz tour Babel gwechall-goz. Pa vezer en eur ru vraz hag a vez tud a-leiz enni, e lavarfed e weler eno tud euz ar bed oll : re wenn, re zu, re hanter-zu, re velen, re ruz, hag e klever kaozeal kement yez a zo er bed. Klevet a reer n'ouzon ket ped langaj disheñvel.

War an 900.000 den a zo o chom e kêr pe en-dro da gêr, e lavarer ez eus 40.000 Indian, med Indianed euz ar vro, ar re a oa o zud eno pell a oa arag ma oa deuet ar re wenn da laerez o douar diganto. Gweled a reer meur à hini, hag o anaoud a reer mad, beza ma vezont gwisket evel an dud all, gand o 'fas ront, o liou (hini ar hwevr ruz) hag o bleo du pe gentoh glaz-du (tenna a ra da liou diouaskell eur vran).

Bez' ez eus ivez war-dro 50.000 galleg, lod anezo, eul lodenn vihan, deuet euz Bro-Hall, ar re all euz rann-vro Kebek. Eun devez, goude lein, e oa tomm kenañ an amzer. Savet e oa sehed ganeom hag e oam eet da glask eur banne d'ar henta kafe on-oa kavet. Eno e teu da zervicha ahanom eur plah yaouank faro, war-dro ugent vloaz, brun, eun êr a-zoare dezi. Souezet eo o klevet ahanom o kaozeal galleg ha laouen ivez.

"Euz pe leh oh ?" e houlenn diganeom e galleg, eur galleg disheñvel ouz hini Quebec. "Euz Bro-Hall", a lavarom dezi hag ez eo laouennoh c'hoaz o klevet an dra-ze. "A ! Me, emezi, a zo ivez va zud euz Bro-Hall. Euz kostez Toulouse. Va-unan ez ont bet eno warlene o weled va hendirvi. Plijadur a-leiz em-eus bet oh ober va zro". Hag e chom eur pennad brao da gonta kaoziou ganeom. Chomet e vije zoken pelloh ma ne vije ket deuet ar mestr da lavared dezi e oa c'hoaz tud da zervicha.

Bez' ez eus ivez war-dro 40.000 Indian, med ar re-mañ re deuet euz an Indez, en Azi. Ar bevrvasa anezo, hervez ma lavarer, a zo en em lakaet da zerhel restorantou hag ispisirioù. Med n'int ket gwelet mad gand ar Hanadianed. Kement a gas a zo outo e Vancouver hag e Toronto. Perag ? Den ebed ne oar re. Marteze abalamour ma talhont d'o gwiskamant ha d'o gizioù. N'eo ket mad e neb leh klask beza disheñvel ouz ar re all.

Bez'ez eus c'hoaz 30.000 Italian, deuet eun toullad brao anezo da glask labour tregont vloaz bennag zo e-giz mañsonerien.

Bez'ez eus 30.000 Chinaad, ar bevrvasa bugale vihan ar re a oa deuet er vro, da hanter ar hantved diweza, da labourad war an hent-houarn, pa ne oed ket ken gouest da lakaad tud ar vro da ober.

Bez'ez eus ivez war-dro 20.000 Japaned, deuet arag ar brezel diweza. Ar re-mañ, kerkent ha ma oa savet ar brezel, ne oe ket re vraz o stad. Greet e oe dezo kuitaad o ziez da vond da veza e kampou braz, e kreiz menezioù ar rann-vro. Med bremañ e lavarer ez int deuet da veza Kanadianed evel an estrañjourien all.

Bez'ez eus zoken eun toullad Gresianed, war-dro 12.000, hag eur morian bennag.

An dra-ze a ra rummadoù tud a-leiz. Tud hag a zo diêz lakaad anezo da en em ober ouz ar vro. Chom a reont heb en em veska gand ar re a zo en-dro dezo. Beva a reont peb rummad en e garter en eur zerhel mad d'o yez, d'o gizioù ha d'o relijion.

Indianed, re ar vro hag ar re deuet euz an Indez, Gallegerien a Vro-Hall ha re rann-vro Quebec, Italianed, Chinaed, Japaned, Gresianed ha morianed a glask chom etrezo, heb darempred gwirion ebed gand ar re all. A-veh ma weler ar vugale oh en em veska eun tamm er skolioù.

Lavaret ez eus bet deom ez eus Gallaoued, en em gavet e Vancouver er bloaz 1914, pevar bloaz ha tri-ugent zo, eet da chom e karter Maillardville, hini ar gallegerien, o labourad en eur vilin da heskennad gwez, hag a n'o-deus ket abaoe klasket deski eur ger saozneg, evel pa ne fellfe ket dezo zoken kaoud tamm kaoze ebed gand ar Zaozon. Poan e vez o kredi. Gwir eo goulskoude.

Al lodenn vrasa a-bell euz tud kêr (67 %) a zo Saozon, pe gentoh a oa Saozon o zud koz. Ar Zaozon-ze a zalh ivez stard d'ar zaonneg ha da hizioù Bro-Zaoz. Ober a reont evel ma ra partoud ar Zaozon dre ar bed. N'o-deus nemed dispriz evid ar re all, an estrañjourien, ha zoken evid tud rann-vro Quebec. Ken braz eo an dispriz-se en g'halon ma 'z eo savet kreñv e meur a hini ar c'hoant da weled ar Holombi, o rann-vro, oh en em zistaga euz ar rest euz ar Hanada. An dra-ze marteze eo a ra e vez gwelet aliesoh

e Vancouver hag e Victoria drapo Bro-Zaoz eged hini ar Hanada.

Ne hellan ket kaozeal diwar-benn Vancouver heb konta eun dra blijuz c'hoarvezet qaneom eno en devez kenta.

Digouezet e oam en otel d'ar zul vintin, war-dro unneg eur. An otel, eur motel kentoh, a oa eur motel brao e kreiz kêr.

Eun hanter-eur goude ma 'z om en em gavet emaoom o tebri on lein e restaurant ar motel. Hemañ n'eo ket braz. An daoliou er zal a zo taoliou bihan ha tost, re dost, an eil d'eben.

N'emaom ket êz tamm ebed.

En on hichenn, ouz an daol dosta, ez eus eur houblad tud etre pemp bloaz ha daou-ugent hag hanter-kant vloaz. Echu eo o 'fred ganto pa en em gavom.

Chom a reont ouz taol goulskoude. Ar vaouez, hen gweled mad a ran, a zelaou pe a glask selaou ar pez a lavarom.

Kerkent ha m'on-eus echu da zebri, e tro war-zu ennon hag e lavar din : "Gallaoued oh, a gredan, aotrou" - "Ya, a respontan dezi, Gallaoued om. Ne en em dromplit ket. Gallaoued hag e-neus ket pell emaint amañ. N'eus nemed eun eur c'hoaz abaoe ma 'maom e Vancouver." - "Mad, emezi, kontant om on-daou, va gwaz ha me, o weled ahanoh. Me a zo Amerikanez, med va mamm-goz a oa euz Bro-Hall. Euz Nancy e oa. Deuet e oa d'ar Stadou-Unanet da 'fin ar hantved diweza. Bet om zoken on-daou, daou vloaz zo e Bro-Hall o weled eun dintin am-eus c'hoaz eno ha kendirvi. Plijadur a-leiz on-oa bet oh ober on tro, beza ma ne ouzon ket, me, kalz a halleg ha va gwaz tamm ebed.

O chom emaoe e Seattle, er Stadou-Unanet, 300 kilometr ahalenn. C'hoant on-eus beza er gêr emberr. Med, ma karit, araog mond kuit, ez aim da ziskouez deoh an traou kaerra ho-po da weled e kêr Vancouver en deveziou a zeu.

Er mod-se, ne golloh tamm amzer ebed o klask anezo oh unan hag e helloh gweled kalz muioh a draou.

Va gwaz a anavez mad Vancouver. Beza ma 'z eo Amerikan pell zo, ez eo ganet amañ. Tremenet e-neus zoken amañ toud e yaouankiz. Ouspenn e plij dezañ dond da fin ar zizun beteg amañ evel m'on-eus greet en taol-mañ.

Plijoud a rafe dezañ diskouez ar gêr deoh".

An dra-ze a zo kinniget deom en eur feson ken simpl, ken seven ha ken c'hweg ha ma n'om ket zoken estonet ha ma 'z eom ganto en o oto heb an disterra diegi.

N'eo ket nemed eun eur pa guitaom ar restaurant. Med tost da hweh eur-hanter eo pa zigasant ahanom d'ar motel en distro. Pemp eur-hanter on-eus tremenet ganto ha n'eo ket bet tost deom beza inouet ganto. Lakaet o-deus ahanom da vond ha da zond dre gêr, euz an eil korn d'egile, da daol eur zell war gement tra a dalv ar boan : kreiz-kêr, bord ar mor, war zaou-ugent pe hanter-kant kilometr, ar Parkou braz, tro ar Stanley Park (17 kilometr), ar Skol-Veur... hag all... Evid echui o-deus lakaet ahanom da chom a-zav e kreiz-kêr, war bord eun trotouar ledan, dirag eun orolaj vraz iskiz. Ne zivinfeg ket perag ? Mad, abalamour ma 'z a en-dro, n'eo ket dre boueziou pouner eo, na dre eur resort, na dre elektrisite. Mond a ra en-dro dre êzenn-domm, evel marh du an treñ gwehall, med eun êzenn-domm hag a deu euz an douar. Merka a ra an eur, an devez, ar bloaz, plas an douar o trei en-dro d'an heol, tro al loar en-dro d'an douar, he hresk hag he digresk, ha n'ouzon ket ped tra all c'hoaz. Med ar souezusa marteze eo gweled anezi o vond en-dro. Gweled a reer toud he diabarz, rag n'eus nemed gwer warni. Setu e heller gouzoud petra a ra kement rod danteg ha kement tra all a zo e-barz. Hag e vez tud a-leiz, me lavar deoh, o selled outi.

Warhoaz hag en deveziou war-lerh, e vo êz deom distrei da zelled kalz gweloh ouz toud an traou bet diskouezet deom dija gand an daou Amerikan.

Distro d'ar motel, e kemerom eur banne te ganto ha, pa guitaont ahanom, on-eus greet mad anaoudegez ganto. Tud a-zoare int, tud hegarad int ivez. Kalz a blijadur on-eus bet ganto.

Eur chañs vraz eo bet evidom beza en em gavet ganto.

Heñ e-neus eur garg uhel en eun ti-asurañs braz e Seattle. Diskenn a ra ivez euz eur familh saoz anavezet pell zo. Beza ma 'z eo Robins e ano, ez eo euz familh ar habiten war-vor saoz, brudet dre ar bed oll, ar habiten Stanley, an hini a oa deuet da genta, en driwehved kantved, beteg Vancouver. Lorch a oa ennañ o tiskouez deom, er Stanley Park, an daolenn arem a zo merket

warni ano ar habiten, an devez hag ar bloaz ma noa lakaet e vagou da zouara eno, hag a vez zoken savet bemdez drapo Bro-Zaoz en he hichenn ouz ar wern, en e enor.

Noz eo dija pell zo pa gemeront hent Seattle hag o-deus c'hoaz tri hant kilometr da ober araog beza er gêr.

Med n'eo ket echu an istor.

En devez war-lerh, da lun da noz, da zeg eur, e klevan a-greiz-toud an telefon o son war va zaol-noz. "Petra ar foeltr an dra-mañ ? a zoñjan. Den ebed ne oar e pe leh emañ. Piou-ta a hell klask telefoni din ? D'an eur-ze dreist-oil !" Lavared a ran d'an den a zo o veilla war ar stantard e tle beza en em fāziet. "O! Ket, emezañ. C'hwi, aotrou, eo emañ o houlenn".

Setu e hortozan ma kaozeo an hini a zo er penn all d'al linenn. Nieuze em-eus ar zouezenn da glevet anezañ o lavared : "Amañ unan hag a halv ahanoh a-bell, euz Seattle." Kompren a ran dioustu. Edward Robins eo, laouen an traou gantañ ; c'hoant dezañ da houzoud petra on-eus greet hizio ha bet on-eus plijadur a-leiz o haloupad kêr. Hag e chomom eur pennad brao da gaozeal evel daou gamarad koz.

#### 19) Pennad

#### Enezenn Vancouver

Enezenn Vancouver a zo eun enezenn vraz. Striz eo, med hir kenañ. Ma n'he-deus nemed etre tri-ugent ha deg ha tri-ugent kilometr lehed, he-deus ouspenn pevar hant kilometr hed. Mond a ra euz ar gevred war-zu ar walarn, a-hed an douar braz, a-hed ar rann-vro. He hreisteiz a ziskenn kalz izelloh eged ar frontier etre ar Hanada hag ar Stadou-Unanet, dirag stad Washington ha dirag ar wazenn-vor anvet "Puget Sound" a zo porz-mor Seattle warni.

Kêr Victoria a zo kêr-benn an enezenn hag ivez kêr-benn ar rann-vro, ar Holombi Britanik. E kreisteiz an enezenn emañ, dirag Vancouver. Etre an diou gêr ez eus war-dro daou-ugent kilometr mor.

Eur vag a zo da vond euz an eil d'eben, war eeun. Med ar vag-se a zo hini an dud preset, ar re o-deus aferiou da gas da benn, en enezenn pe e Vancouver. Med ni n'eus netra o lakaad pres warnom hag e kemerom eur vag all, unan hag a ra deom douara eur pennad brao euz Victoria, eun tregont kilometr bennag.

Ar vag a zo eur vag gaer, heñvel awalh ouz ar "Prince de Cornouaille" e Rosko. Ne ya ket buan. Eüruzamant, rag evel-se e ro amzer deom da zelled mad ouz an enezennou bihan a zo n'ouzon ket ped anezo en daou du, kaerroh an eil eged eben.

Evid ober an dro en enezenn, ez eo red konta eun devez mad. Ni on-oa ranket kuitaad on motel da hweh eur diouz ar mintin hag e oa deg eur noz pa oam distro.

Ar vag a laka eun eur-hanter da vond beteg an enezenn.

Med araog, dre ma ne ya ket euz porz braz Vancouver, e ranker kemered eun otobuz da vond beteg eur porz bihan greet espres eviti, anvet Tsannvasser. 38 kilometr euz kreiz Vancouver. En enezen, e-leh mond beteg Victoria, ez a ivez da zouara en eur porz bihan all, anvet Swartz Bay. Ahano e vez adarre da gemered-an otobuz da vond da Victoria.

Pa oam c'hoaz en Alberta, war hent Vancouver, meur a hini e-noa lavaret deom : "War ar pevar devez ho-peus soñj chom er ger-ze e hellit beza sur da gaoud tri deveziad glao hag er pevar amzer deñval. Ne weloh ket an heol tra ma veoh eno".

Mad, kredi a ranker e oam gwelet mad gand mestr an amzer, rag e-pad on pevar devez, n'on eus ket bet eur banne glao. Lavared a rankan goulskoude ne oa ket feson vad tamm ebed gand an arizer, diouz ar mintin en devez kenta. Goloet e oa. Eun tamm aillenn a ree zoken hag a ne oa ket a gelou mad ganti, da vihanna evid an devez-se.

Med, kerkent ha m'on-oa echu on lein, on-oa gwelet an heol o tigeri e lagad laouen ha, prest goude, emañ e-unan war an oabl glaz, o rei deom sklêrijenn skeduz ha tommer vad.

Mond da enezenn Vancouver a zo eur skol vad a basianted. Koll a reer amzer a-leiz o hedal. Gedal a ranker, da genta e gar an otobuziou. Gedal a ranker goude adarre er porz, araog sevel er vag hag araog he gweled o vond kuit.

Med, eur wech ma vez lohet, pa vez brao an amzer, e vezer digollet mad euz ar basianted a vez ranket kaoud. Eun dudi eo neuze treuzi ar mor etre Vancouver hag an enezenn, pa vezer o vond ha kement pa vezer o tistrei, beza ma ne vez ket heñvel tamm ebed an traou. Pa 'maom, ni, o vond, n'eus ket eur goumoulenn war an amzer. N'eus tamm avel ebed zoken. N'eus nemed just an êzenn a ra ar vag o vond war-raog. Ar mor n'eus ket eur rid warnañ. Glaz arhantet eo hag e lugern dindan an heol evel eur melezeur divent. Eur melezeur hag a deu, beb tri pe bevar gilometr, a-wechou nebeutoh, eun enezenn vihan da lakaad warnañ, sklêr ha net, he skeudenn hag hini ar gwez kaer a zo warni. N'ouzon ket ped kant, ped milier marteze, a enezennou brao a zo eno.

Ar re vrasa n'o-deus ket ouspenn daou pe dri gilometr tro. Ar re vihan n'int pepini anezo nemed eur roh vraz hag a zo warni just douar awalh da lakaad da zevel eur bochad gwez stank hag uhel.

Hini ebed euz an enezennou-ze ne zav gwall uhel diwar ar mor, pemzeg pe ugent metr d'ar muia toud. En-dro dezo, etre an dour hag an douar, n'eus nemed eur riblenn striz, a zaou pe dri metr, a reier griz. N'eus aod trêz ebed e neb leh, evel ma ne vije mare ebed. Med n'eus hini ebed dizolo ha noaz evel ma vez toud an enezennou bihan dre amañ. Toud int goloet a wez pin hag a wez sapr stank hag uhel hag a ziskenn betek ar reier.

Beb an amzer, war unan bennag, e weler, hanter guzet dindan ar gwez, toenn ruz ti eur pesketaer, eur vag vihan éoriet dirazañ.

Unneg eur eo dija pa en em gav ar vag e porz bihan Swartz-Bay.

Eno araog diskenn euz ar vag e savom adarre en otobuz e-noa digaset ahanom d'ar porz all. Heñ eo a gaso ahanom betek Victoria, tregont hilometr pelloh.

N'on-eus ket da glemm abalamour ma rankom kemered an otobuz.

Ma oa kaer ar mor araog, amañ ar mēz a zo ken kaer gand an torgennou uhel goloet a goajou don.

En enezenn, war bevar hant hanter-kant kilometr, euz ar hreisteiz betek an hanternoz, goude an torgennou a zo amañ betek Victoria, n'eus nemed menezioù uhel a zaou vil pe zaou vil tri hant metr. Ar re-mañ, pa

'maom eno, a zo c'hoaz teo an erh warno. O hostezioù a zo goloet a goajou.

N'eus ket koulz lavared e-barz na douar izel na douar-labour.

Pinvidigez an enezenn a deu da genta euz ar besketareez (ar zamoned a zo spontuz pegen niveruz int er mor, en-dro, hag er rivierou ; kement hag ar zardined dre amañ), d'an eil euz komerz ar hoad. A-hend-all, ne deu arhant ebed nemed an hini a zigas an douristed. Med ar re-mañ a vez a-leiz outo.

An otobuz ne ya ket war-eeun betek Victoria. War-dro deg kilometr goude porz Swartz-Bay, e chom a-zav, war ar mēz, dirag antre eur jardin braz brudet, anvet "Butchart Gardens".

Eur wech antreet, emañ dirag eur maner braz, med simpl ha brao kenañ, heñvel awalh ouz ar manerioù a veze savet e Bro-Zaoz da 'fin ar hantved diweza.

En-dro d'ar maner ez eus, a lavarer, kant devez-arad douar, toud en eun tamm.

Dindan ar jardin, n'eus nemed eul lodenn vihan anezo, ugent devez-arad. Med an ugent devez arad-se a dalv bremañ o-unan kalz muioh eged toud ar re all. Ar jardin a zo bet greet enno a zo eur jardin dispar. Dispar, da genta, dre ma 'mañ en eul leh hag a ne vezer ket boazet peurliesad da weled na gwez na fleur. Rag bez 'emañ en eur vengleuz goz dilezet.

An douar en-dro d'ar maner n'eo ket douar mad. N'eo ket tost dezañ beza zoken. War an torgennou sonn a zo eno, ne hell chom nemed an douar dalhet gand grizioù ar gwez. Prenet e oant bet marhad mad kenañ, da fin ar hantved diweza, gand eun den anvet Robert Butchart. Heb hen gouzoud re, hemañ en-oa greet eno eun afer euz ar re wella. Rag kavet en-oa goude, en e zouar treud, eur vengleuz mein-raz da ober simant. Homañ he-doa lakaet anezañ da zond da veza pinvidig-mor.

Med, eur wech tennet toud ar vein, toud ar vuhez a lakae eno ar vengleuzierien a yeas kuit ganto. Hag ar maner hag an douarou, evel kollet keid-all euz an tiegezioù all, a lakaas eun dristidigez spontuz da zevel e kalon Robert Butchart hag en hini e hwreg. Ken kizidig e oant deuet da veza ha ma ne oant ket gouest da houzañv pelloh gweled stad truezuz ar vengleuz eet da fall. Hag e oa savet enno ar c'hoant da lakaad ober eno eur jardin braz awalh da guzad toud an toull divalo chomet war-lerh ar

vengleuzierien, toud an traou drastet, toud ar vein fall laosket eno, an atred hag an douar treud.

An ide a oa eun ide vad, rag ugent devez-arad ar vengleuz a ree evel eun draonienn striz goudoret mad gand ar renkad torgennou uhel, goloet a wez braz, a oa e peb tu.

Ouspenn, an dour ne vanke ket. Hemañ, evid en em lakad da redeg, ne houlenne netra nemed eur pomp kreñv awalh da zevel anezañ, hag, evid lakaad an traou da zond druz, nemed eun tamm douar mad.

Ar berniou mein fall, ar berniou atred a oe kompezet. Douar mad a oe digaset warno.

Eur pomp greñv a oe lakaet da vond en-dro. Plantet e oe fleur ha gwez a beb seurt, re ar broiou klouar, re ar broiou tomm, re hag a deu en douar druz, re hag a blij dezo sabr dizeh an dezert, re hag a houlenne disheol ar hoajou ha re hag a rank beza dindan eun heol bero. N'ouzon ket ped seurt a zo evel-se eno. Ar pezh a ouzon eo e kaver eno kaerra fleur ha kaerra gwez a zo dre ar bed.

Ni a oa eno da 'fin miz even (d'ar 27), da boent gwella ar bloaz evid ar fleur, d'ar poent ma vezont en o haerra gwiskamant. N'on ket gouest da lavared pegement a blijadur on-oa o weled dirag on daoulagad eun tapiz marelet ken dudiuz.

Dindan an oabl glaz hag an heol tomm, gand ar hoajou, nevez an deliou enno war ar gwez, en-dro deom, gand an dour red o kana en on hichenn, amañ hag a-hont, ma ne vije ket bet kement a dud e-barz, toud ar re a oa er vag (pemp pe hweh kant da nebeuta) dreist-oll eur hant bennag a Japaned hag a oa kement a ragach ganto ha gand toud ar re all asamblez, on-nije kredet, êz awalh, beza digouezet en eur baradoz burzuduz.

Iskiz eo pegement a ijin a zo bet red kaoud eno evid kempenn an douar e-giz ma 'z eo bet greet hag evid lakaad kement a fleur hag a blant all da zond ken druz ha ken kaer.

N'emaint ket e karreou pe e kelhioù ingal evel aliez e jardrinou Bro-Hall. Bez' emaint, kentoh, eun tamm diskempenn da weled, evel e jardrinou Bro-Zaoz. Amañ, war eun dachenn yeot glaz, eun tamm war-ziribin, ez eus eur renkad ledan a fleur bihan glaz brao, ar re a vez greet outo daoulagad ar

Werhez (e galleg : Myosotis). A-hont, dirazo, deg pe zaouzeg paz pelloh, war-zu an traoñ, ez eus, en eun tu, tulipez melen ha ruz, en tu all, jenoflez hag a denn war ar ruz. Meur a dachenn a zo evel ar re-ze gand fleur ken kaer, evel ar re a reer outo e galleñ "bégonia". E meur a blas, war gostez ar vengleuz ez eo chomet sonn ar rehier, ken sonn ha mogerioù uhel (pempzeg pe ugent metr da nebeuta). Warno e sav ilio ha koz-gwinienn ken druz ha ken kaer ha ma n'em-eus ket biskoaz gwelet e neb leh heñvel outo.

Fleur a gwez a zo bet lakaet er plas ar gwella evid o diskouez en o haerra.

Lod zo stank, bochad amañ, bochad a-hont.

Lod zo renket e pengennou bihan, disheñvel an eil ouz egile.

Lod zo war dammou douar kompez.

Lod zo war dorgennou bihan.

Lod zo en disheol, dindan gwez braz skao-grah pe evleh.

Lod, er hontrol, zo en eul leh heb disheol ebed, dindan eun heol hag a sko warno kaled.

Lod zo e douar doureg.

Lod zo e sabr seh evel hini an dezert.

Lod zo, unan amañ, unan a-hont, o klask lakaad o gwrizioù da vond don en eur faout striz etre daou ven braz.

Toud ez eus greet eun ale vihan da vond beteg enno.

Chom a rafem eno da zelled ouz ar fleur n'ouzon ket pegeid c'hoaz. Med red eo deom adarre kemered an otobuz da vond da Victoria. Pa zavom e-barz ez om evel eun tamm mezo, leun on daoulagad gand n'ouzon ket ped liou kaer hag on 'fri gand n'ouzon ket ped seurt c'hwez-vad.

Dirag va daoulagad n'eus bet biskoaz jardrin ken braz, dalhet ken koulz, ken kaer, en eul leh ken dudiuz.

Pa en em gavom e Victoria e chomom mantret o weled pegen kaer eo.

N'eo ket goulskoude eur gêr gwall vraz. N'eus e-barz nemed daou hant mil den, just kement hag e Brest.



EUN TOTEM

Med an dra-ze a ra ivez just an hanter euz tud an enezenn. Homañ a zo braz, med n'eus ket koulz lavared a dud o chom e-barz hag ar re a zo a zo toud e bord ar mor. Ar bevrvasa zoken a zo e kreisteiz an enezenn. Den ebed ne hell mond da chom e kreiz ; ar menezioù a zo re uhel.

Victoria n'eo ket, evel Toronto, Montreal ha Vancouver, divaloet gand tiez uhel, tourioù a hanter-kant pe dri-ugent estaj. N'eus hini ebed e-barz. Tiez nevez a zo goulskoude, med ar re uhella n'o-deus ket ouspenn seiz pe eiz estaj ha n'eus hini ebed e kreiz kêr, nag en-dro d'ar porz.

Eno, an tiez a zo tiez brao, tiez koz bet savet eul lodenn anezou gand brik ruz hag a oa bet ranket lakaad o digas euz Bro-Zaoz gand ar vag. Ar re all a zo e mein griz ar vro. Toud, ar re-mañ evel ar re-ze, o-deus furm tiez ar hantved diweza e Bro-Zaoz. War meur a hini zoken ez eus bet lakaet plant glaz (ilio pe goz-gwinienn) da zevel ouz an dalbenn, evel ma weler ivez e Bro-Zaoz. Lavared a rafed ar Zaozon, n'eus forz pegen troet e vezont da vond pell euz o bro, a rank kaoud atao en o bro nevez, evid en ober outi, toud an traoù o-deus laosket war o lersh en eur vond kuit, o yez, o gizioù ha zoken o ziez.

An tiez kaerra e penn ar porz-mor, hag en daou du dezañ, eo tiez ar gouarnamant hag an otelioù braz. An hini kaerra toud eo an "Empress Hotel" ("Otel an Impalaerez"). Henez a zo eno, evel eur palez braz, gand eun dalbenn brik ruz, hir hag uhel, goloet euz an traoñ beteg an neh, gand delioù nevez, ledan ha glaz, eur hoz-gwinienn. Saliou traoñ an otel, braz mantruz, a vez atao leun a douristed deuet, sur, da gemered eur banne, rag an amzer dorm a laka buan ar zehed da zond, med surroh c'hoaz, evid chom eur pennad da zelled outo, ken kaer int.

Parkoù braz kaer a zo ivez e kêr hag en-dro da gêr.

En hini brasa, tost d'ar porz, ez eus e-kichen ar muze Indian, pevar pe bemp pilier teo hag uhel, gwez en o 'fez, hag a zo warno, evel war ar re on-oa gwelet dija e Vancouver, kizellet ha livet gand Indianed ar vro, pennou laboused, pennou anevaled ha pennou tud mesket.

Med amañ ez eo kalz uhelloc'h ar pilieroù, kalz teooh ha kalz kaerroh warno ar pennou kizellet.

E kêr e teu deom mond en eur vagazenn da brena kartennoù-post. Evid just, e kaozeom galleg, beza ma ne glevom nemed saozneg en-dro deom.

A-greiz-toud e welom o tostaad ouzom eun tamm maouez vihan deo, war-dro daou-ugent vloaz, eun tok hag eur vantell gwer ganti.

Mousc'hoarzin a ra dre ma tosta. "Homañ, a zōñjan, a entent ar pezh a lavarom hag he-deus c'hoant kaozeal galleg ganeom". Goulenn a ran diganti : "Daoust hag euz Bro-Hall oh, intron ?" - "N'on ket, emezi. O chom emañ e Victoria, med gouzoud a ran mad ar galleg hag em-eus bet plijadur o klevet ganeoh galleg Bro-Hall". Red eo din lavared e teu ganti ken koulz ar galleg ha ganeom-ni, med he aksant n'eo ket tost dezañ beza on hini. He hini a zo hini tud rann-vro Kebek. "Ar galleg, emezi, am-eus desket er skol e Quebec. Va zud o-doa kaset ahanon di pa oan yaouank".

Plijadur on-eus o kaozeal ganti hag e chom eur pennad brao da gonta kaoziou ganeom. Lavared a ra deom dreist-oll e vez kalz gwelloc'h an amzer amañ en enezenn, eged en-dro da gêr Vancouver, en tu all d'ar mor. Kalz e vez tomoh ha sehoh. Hag e rankan kredi ez eo gwir, rag, pa 'z eom goude d'ar Parkou Broadel braz, ez om souezet o weled ez eo kraz ar yeot partoud. Rostet int toud hag eet da netra, evel amañ e Breiz, daou vloaz zo (e 1976), pa oa bet ar zehor vraz, pa 'z int c'hoaz druz ha glaz e Parkou Vancouver.

En distro, diouz an noz, ar mor a zo kaer atao, ken kaer ha diouz ar mintin. Med kalz eo disheñvel. An heol zo izel dija war an dremmwel. Melenaet eo hag an oabl a en em laka da ruzia en-dro dezañ. An dour e-neus kollet sked ar glaz-arhantet a oa warnañ neuze. Glaz-du eo bremañ. N'eo ket ken laouen ken. An enezennou bihan en daou du d'ar vag a gomañs dua ivez, dreist-oll e tu an disheol. Lavared a rafed emañ ar vuhez o vond kuit outo evid an noz.

An êr a zo freskaet. Beb an amzer zoken e teu eun tamm taol-avel pud awalh da lakaad ahanom da skrija.

Er vro-ze ez eer buan euz an domder d'ar yenienn.

Med ar haerra a zo dirazom a-greiz-toud pa guitaom an enezennou diweza, pa zigor dirazom ar mor ledan. Dreist hemañ, e welom neuze douar braz ar Hanada ha kêr Vancouver, en tu kleiz, war-zu ar zav-heol. En tu dehou, ez eus eun tamm war-zu ar hreisteiz, eur horn euz stad Washington, er Stadou-Unanet. Eno, pell dirazom, eh en em zistag, net, uhel kenañ war

an dremmwel, evel eur vrennigenn vraz spontuz, ar menez Rainier. Hemañ a zav e 4 392 metr, a-zioh kêr Seattle. Diêz eo gwelet kaeroh tra. Toud ar menez, toud ar vrennigenn braz, a zo gwenn gand an erh hag ar skorn. Bannou melen-ruz an heol o vond da guzad a deu da skei war ar re-mañ hag a ro dezo a-blasou liou eur c'hev'r ruz dispar hag a laka warno a-blasou all da lugerni milierou a steredennou iskiz. Ar gwel-ze a chomo pell dirag va daoulagad, goude ma vin distroet d'ar gêr.

Pa zistroom d'on motel e Vancouver, ez eo dija deg eur. An noz a zo deuet eur pennad brao zo. Mall eo ganeom mond d'on gwele, rag skuiz om. N'on-eus bet tamm repoz ebet koulz lavared e-pad an devez, nemed war ar vag. Med kontant om. Ar gwella devez on-eus bet er Hanada.

## 20) Pennad

### Calgary, en Alberta. Goueliou braz Calgary

D'ar zeiz a viz gouere, goude beza treuzet eur wech all ar menezioù Rohelleg, en eur vond a-hed frontier ar Stadou-Unanet, emañ distro da Calgary.

En devez araog e oam chomet da loja en eur gêrig a 3 000 den, anvet Fort-Mac-Leod, kosa kêr an Alberta. Eno, on-oa tremenet an hanter-devez goude lein o vond da zelled ouz eur ford koad kaer, greet gand gwez teo hag hir, lakaet an eil war eben en o 'fez. Med ar ford a zo eno bremañ n'eo ket an hini koz eo. Henez a zo eet da fall pell zo. An hini on-eus gwelet a zo bet savet a-nevez zo, heñvel-poch ouz an hini kenta. Hemañ a oa bet savet ouspenn kant vloaz zo, er bloaz 1874, evid divenn a-eneb an Indianed, ar re a deve di da brena diganto krehin loened gouez.

Ar gêr a oa bet savet tamm ha tamm en-dro d'ar ford.

N'emañ nemed 147 kilometr euz Calgary. Setu emañ abred en homañ : war-dro deg eur.

An hent etre Fort-Mac-Leod ha Calgary a zo kompez penn-da-benn hag eeun-tenn.

En eur zond, en daou du, war ar blenenn heb fin en tu dehou hag a ya da goll en tu kleiz, pell war an dremmwel, en eur vorenn hiaz tano, er

Menezioù Rohelleg, ne welom nemed daou dra : da genta, war dost da gant kilometr, parkadou gwiniz prest an ed da zehi enno ; ha, goude, e-touez ar gwiniz n'ouzon ket ped puñs petrol, ar pomp o vond en-dro warno, o sevel hag o lakaad da zisken ingal, heb ehan ebed, he 'fenn hag he lost, evel eun aneval mantruz.

E Calgary eo eh echu on beaj. Eno eo on-eus da renta an oto. Eno eo on-eus da gemered ar harr-nij, d'an deg, evid distrei da Bariz.

Med, etre ar zeiz hag an-deg, e chom ganeom daou zevez-hanter. E-pad an amzer-ze, on-eus lakaet en on spered mond da weled kement ha ma hellom euz ar c'hoariou a zo da veza e Calgary e-pad eil sizun miz gouere hag a bado beteg an driweh.

Calgary a zo eur gêr vraz dija, beza ma n'eus c'hoaz nemed pevar bloaz ha kant abaoe ma oa bet savet an ti kenta war an dachenn ma 'mañ hi warni bremañ.

400 000 den a zo o chom e-barz.

Eur gêr eo hag a zo kresket koulz lavared en eun taol-kont kerkent ha ma oe kavet glaou, petrol ha gas en-dro dezi.

Deuet eo zoken da veza kêr-benn ar petrol er Hanada, rag ne baouezer ket da gavoud puñsou nevez tro-war-dro. E-pad an teir zizun on-eus tremenet en Alberta hag er Holombi Britanik, n'eus ket bet eun devez ha n'em-mije ket lennet war ar gazetenn e oe kavet eur puñs nevez bennag en-dro d'ar gêr.

Kement ez eus ha ma lavarar dija ez eus dre eno kement a betrol hag e toud an Arabi.

Calgary a zo war eur gompezenn uhel a 1200 metr, e-harz ar Menezioù Rohelleg, en daou du d'ar ster Bow, ar ster on-eus kavet dija e Banff.

Evel toud kêriou nevez an Amerik, ez eo en em skignet war eun dachenn ledan a dregont kilometr hed hag a bemp kilometr warn-ugent lehed, gand ruiou eeun-tenn ha, beza ma ne vank ket an douar goullo tro-war-dro, tiez uhel, touriou a dregont pe zaou-ugent estaj, a-leiz.

Abalamour da-ze n'eo ket eur gêr vrao.

Med, ni, n'om ket distroet di evid gweled kêr. Deuet om kentoh da weled ar goueliou braz, brudet dre ar bed oll a zo da veza e-pad deg devez,

ar re a vez greet outo ar "Stampede" (lavared e saozneg : "Stèmm-pid").

Kement eo brudet ar goueliou-ze ha ma sachont e kêr, e-pad deg devez, ouspenn eur milion a dud, re hag a deu dreist-oll euz rann-vroioù all ar Hanada hag euz ar Stadou-Uhanet.

Talvoud a ra ar hoan chom da zelled outo. N'eus, dre amañ, netra ebed par dezo. Calgary, e-pad an deg devez-se, a vez kement a fourgas e-barz hag a vout a vez en eur gestenn wenan pa vez tost d'an hed mond er-mêz outi. Kement a dud a vez e-barz ha ma vez poan o vale e kreiz-kêr, beza ma 'z eo ledan kenañ ar ruiou. War an deiz, ne hell oto ebed mond dre ar ruiou brasa.

Med muioc'h a boan e vez c'hoaz o kavoud plas da loja.

Lavared e oa bet deom e oa red deom lakaad derhel on hramb en o tel hag on plas da vond da weled ar c'hoariou, da vihanna tri miz araog.

Heuliet on-oa an ali ha brao e oa bet deom beza greet.

Eun dra a zo hag a sko dioustu an daoulagad en devezioù araog ha pa gomañs ar c'hoariou : koulz lavared toud an dud e Calgary, tud kêr hag ar re all, ar re goz evel ar re yaouank, ar merhed evel ar baotred, a vez ganto war o 'fenn eun tok ledan melen-hriz, an hini a vez bemdez, war ar mêz, war o 'fenn, gand paotred-saout ar Hanada hag ar Stadou-Uhanet, ar baotred a vez greet outo e saozneg : "Cow-boys" (da lavared eo : paotred-saout).

Perag ? Abalamour ma 'z eo ar "Stampede", c'hoariou Calgary, c'hoariou paotred-saout ar vro. Er vro e vez savet loened-korn ha kezeg a-leiz, aliez 2 vil pe 3 mil er menez tiegezh.

E-pad an deg devez gouel, d'ar baotred-saout eo e ya toud an enor ha dezo nemed ken. Er c'hoariou, ne vez den all ebed nemeto. War-zu enno e tro daoulagad an dud, rag int-i eo a vez ar c'hoarierien hag ar championed.

E kêr, pell araog ar goueliou hag e-doug ma padont, ne gléver ano nemed diwar-benn ar c'hoariou. An dud a vez sod ganto. War ar gazetennou, ne vez kaoz nemed diwar o 'fenn. Ne baouezont ket da lavared ha da azlavared : "C'hoariou Calgary a zo brasa ha kaerra re a zo er bed en amzer-vreanañ". War ar poent-se, ar Hanadianed, eun tamm evel an Amerikaned, a zo heñvel awalh ouz tud Kreisteiz Bro-Hall : ne hinont ket da rei meuleudi da drano o bro.

Ar goueliou a gomañs d'ar zul vintin, da zeg eur, gand ar pez a vez anvet eno eur "Parade" (lavaret : pe'reid). Homañ a zo eun defile, eun espes prosesion, gand tud dihezit ha beb seurt kirri kempennet, fichet warno fleur ha beb seurt traou all, dre ruiou braz Calgary. Eun defile heñvel awalh ouz ar re a vez, e Breiz hag e Bro-Hall, e meur a gêr, da zeiz Meurlarjez pe da hanter ar Horaiz, med heb maskou ha pennou braz farsuz. E-barz, an dud, re yaouank dreist-oll, a vez kentoh gwisket e-giz ma veze gwechall o zud koz, pa oant deuet d'an Amerik.

Eur bern tud a vez en defile hag eur bern kirri, re dre dan ha re all kezeg o treina anezo, toud goloet a fleur a beb seurt liou.

An defile on-eus gwelet, ni, a lavarer e oa ennañ ouspenn pevar mil den. Ha kredi a heller e oa gwir, rag tud ha kirri n'o-doa ket paouezet da dremen dirag on daoulagad e-pad div eur-hanter.

En defile, er "parade", ouspenn ar re a oa er hirri, e oa re all aleiz war varh, dreist-oll 6 bandenn Indianed, eun tregont bennag e pephini. Ar re-mañ eo a denne ar muia warno daoulagad ar re a oa o selled, rag gwisket kaer e oant, evel ma vezont d'o festou braz, evel ma veze o zud koz en o raog.

E peb bandenn, ar wazed a deue da genta. Iskiz e oa o gweled, war gein o hezeg briz, yell ha gwenn, gand o zog plû êgl gwenn ha du war o 'fenn, o chupenn, lerennou striz a-zistribill ouz o mañchou, hag o bragou ler griz. Mond a reent, eun doare brao dezo, sonn o hein hag o 'fenn, o daoulagad eeun-tenn dirazo, heb eur zell d'an dud a oa en daou du d'ar ru.

War o lerh, ar merhed yaouank a deue en eur hamion braz, tost dezo. beza kuzet dindan ar fleur, o bleo du trohet berr, dalhet stard war o 'fenn gand eul lerenn-dal ledan, warni tresadennoù melen, glaz ha ruz ; ganto toud, eul lostenn ler a beb seurt liou, hir beteg an douar.

Peb bandenn Indianed, e-touez ar re all, a ree evel eun daolenn kalz kaeroh egeto.

Toud ar "parade", tud, loened ha kirri, a oa eun dudi he gweled dindan an oabl glaz ha sked an heol.

Ar re a oa o selled, en daou du d'ar ru, ne hellent ket mired da stlakal o daouarn dre ma pasee dirazo.

Lavared a reed e oa ouspenn 200 000 den a-hed ar ruiou a yee ar "parade" drezo.

En he 'fenn, evid digeri ar goueliou, ez ee, war varh, kenta ministr ar Hanada, an aotrou Trudeau. Mond a ree laouen, o rei eur zell e peb tu dre ma yee, oh ober beb an amzer eun tamm jestr gand e zorn, kontant ouz e weled, euz an enor a oa greet dezañ ha kontant ivez, sur, da en em ziskouez d'an dud, da rei deo da houzoud ez eo c'hoaz, en desped d'e oad (war-dro tri-ugent vloaz), eur paotr kaer.

Med an traou plijusa euz ar goueliou n'eo ket er "parade" eo emaint.

Bez' emaint er c'hoariou a vez bemdez, goude lein ha goude koan, war ar blasenn greet espres evito e kêr.

Homañ a zo eur blasenn vraz ront, heñvel ouz an hini a gaver er Spagn, er hêriou braz, hag a vez greet enni redadegou taroed. Med homañ a zo kalz brasoh eged na vez honnez.

Evel er Spagn, ez eus en-dro, en diavêz, eur voger uhel kenañ hag, e-barz, eur voger all kalz izelloh. Etrezo ez eus, marteze tregont metr ha, d'an neh, evel en eur sirk, pazennou d'an dud da azeza. Dindan ar pazennou, ez eus kreier da lakaad al loened a vez ezomm outo evid ar c'hoariou, kezeg, liou bihan, saout, taroed ha zoken taroed gouez, da hedat o zro da vond war ar blasenn.

En nozvez genta ma oam e Calgary, e oa bet tan-gwall en eul lodenn euz ar hreier hag e oa bet zoken deuet 12 pe 15 marh.

En-dro d'ar blasenn-ze, ez eus eur blasenn all, eur voger ivez en-dro dezi, kalz brasoh, ugent gwech marteze plas-foar Landivizio. War homañ, e kaver leun a hoarielloù braz, kezeg koad, otojou bihan hag all, toud ar c'hoarielloù a weler evid ar re yaouank e foar Sant Vaze Landi, da fin miz gwengolo, pe da 'foar-an-neh Montroulez, da viz here.

Ar c'hoariou braz, ar re a zach an dud e kêr eo ar re a vez war ar blasenn genta. Ar re-ze eo ar re a vez greet outo, e Calgary evel er Stadoù-Unanet, "rodeos". Ar ger "rodeo" a dle beza anavezet mad awalh dija, rag ar sinema hag an television a ziskouez aliez awalh eur rodeo bennag er Stadoù-Unanet pe er Hanada. Med gweled unan er sinema hag e weled e gwirionez n'eo ket ar memez tra. Skeudennou ar sinema, n'eus forz pegen kaer e vezont, n'o-

dez ket biskoaz na buhez na nerz an traou a weler war ar plas, gand an daoulagad.

Er c'hoariou-ze, ne vez dirag an dud nemed loened, loened-korn ha kezeg, ha paotred tuabl war o zro.

Ar baotred a zo toud paotred yaouank diwar ar miz, paotred-saout, ar re a vez greet outo e saozneg "cow-boys", paotred hag a base toud o amzer en tiegeziou braz, war varh, oh ober war-dro ar zaout hag ar hezeg hag o tiwall anezo pa vez red.

Meur a c'hoari a vez, toud ken diêz, toud ken dañjeruz, hag ivez ken farsuz an eil hag egile, c'hoariou hag a ne heller ket tricha enno.

Er c'hoari kenta ar baotred o-dez daou dra da ober : da genta, klask chom da nebeuta eiz segondenn, heb dibr na kabestr, gand eul lerenn nemed ken lakaet stard en-dro d'e gorv, war gein eur marh direiz, hanter-houez kentoh, ha goude war gein eur marh gouez.

Ar beurrvasa anezo a vez taolet d'an douar pell araog an eiz segondenn.

En eil c'hoari e vez daou dra all : e-lerh kaoud da chom war gein eur marh, e vez da glask derhel e-pad ar memez amzer, da genta, war gein eun taro hanter-houez, ha goude, war gein eun taro gouez, eur "bison", unan euz kreñva anevaled a zo er bed, a zo ennañ tost da zaou vil lur bouez hag a zo gouest, gand eur zell a-dreuz euz e lagad hanter-guzet dindan bleo hir rodellet e benn, da lakaad da grena gand ar spont kourajusa den a zo er bed.

Pe varh, pe dero, hanter-houez pe houez e vez, evid antreal war ar blasenn, e vez greet dezañ mond dre eur riboul striz. Eno, e vez dalhet eur pennad, just amzer d'e gavalier da ober eul lamm war e gein. A-hend-all hemañ ne hellfe ket biskoaz mond a-haoliad warnañ. Ar marh pe an taro, kerkent ha ma vez libr, er-miz euz ar riboul, war ar blasenn, a ya sod o santoud ar paotr war e gein. Ne baouez ket neuze da 'fringal, da rual, da drei ha da zistrei, da zevel sonn en er war e dreid a-dreñv, war e dreid araog, da lammad uhella ma hell en eur dorta e gein, en eur wihad heb ehan, kement a 'fulor a vez ennañ.

Ar paotr, krog mort el lerenn a zo dirazañ, gand eun dorn nemed ken, a glask derhel gwella ma hell.

Med, peurvua an abadenn ne bad ket pell. Koulz lavared toud ar gavalieren a vez taolet da ruilla d'an douar, a-benn diou pe deir segondenn en desped d'eo imor da chom war gein an aneval. Beb an amzer zoken, e vez unan hennag hag a ne vez ket gouest da zevel. Red e vez dond d'e gerhed gand ar hravaz. Brao dezañ, ma oa war gein eun taro gouez, ma ne oa ket deuet hemañ da labourad e gorv dezañ a daoliou korn, d'e doulgova pe d'e 'frigasa dindan e bao.

Med plijadur ar re a vez o selled, marteze hanter-kant mil den, a vez brasoh c'hoaz neuze, hag e vez ganto eur c'hoarz hag eur choloni spontuz. N'o-dez truez ebet euz ar paour-kêz den mahagnet. Ne deu ket dezo zoken soñjal e-neus bet poan. Kalon an den a deu buan da galedi, dreist-oil pa vez re êz e vuhez ha pa hoarvez gantañ beza e-touez tud all.

Il'on ket gouest da gonta toud ar c'hoariou a heller gwelad eno. Ne gomzin nemed diwar-benn daou pe dri all.

En unan e weler daou baotr o vond d'ar haloup, war varh, war lerh eun taro yaouank hanter-houez, eur pennad mad a hini dija, en e liberte war ar blasenn evid klask e baka. Med hemañ ne blij ket an dra-ze dezañ ha ne chom ket d'eo gedal. Mond a ra gand ar foeltr en o raog. Med o hezeg a ya buannoh evitañ hag e reont dezañ mond etrezo o-daou. Neuze, unan euz ar baotred, d'ar haloup atao, a ra, diwar e varh, eul lamm war benn an taro da baka krog en e gerniel, da rei eun dro d'e houzoag, awalh d'e lakaad da goueza d'an douar war e gostez. An taro e-nez etre pevar ha pemp kant lur bouez.

Toud ar baotred goulskoude a deu a-benn d'e lakaad da goueza. An hini a hounid eo an hini e-nez taolet e hini ar buanna d'an traon.

En eur c'hoari all, eur paotr, war varh, a ya d'an daoulamm-ruz war lerh eun taro a bevar pe bemp miz. E weled a reer o lakaad da drei a-zioh e benn, evid rei lañs dezi, lagadenn eur gordenn hir (anvet "lasso") hag he zaol a bell a-benn kas, en-dro da houzoag al loen. Sacha a ra neuze eun taol seh war ar gordenn hag he staga a ra ouz an dibr. Kerkent, ar marh a chom a-zav, krenn. Hag an taro a zo d'an douar dioustu. Ar paotr a ra eul lamm da vond betek ennañ da huata dezañ e bevar droad.

Toud an dra-ze a rank beza greet buan, buannoh eged ma lakaan d'e gonta. An hini a hounid eo ar buanna.

M'am-eus gwelet mad an taol, ar paotr gwella a vez an hini e-nez dreset ar gwella e varh da chom krenn a-zav ha da zerhel stegn ar gordenn war gouzoug an aneval, tra ma vez e-unan oh ober e lamm hag o huala anezañ.

Ar marh a rank ober eul lodenn vad euz al labour.

En eur c'hoari all, daou baotr o-dez da horo eur vloh gouez ha, me lavar dooh, an dra-ze n'eo ket eun dra êz !

Da genta e rankont he zapoud. Hi a zo skañv he horv, hag e red, hag e lamm, hag e 'fring. Gouzoud a ra en em zivenn. Med, n'eo ket he zapoud eo an diêsa. Ar wasa a deu pa 'z eo paket. Med ar baotred a oar mad o micher. Unan anezo a bak krog en he herniel. Al loen neuze a vez boud eur pennad, rag ar paotr a zo kreñv hag a zalh mort he 'fenn dezi. Lakaad a ra toud e nerz d'he derhel. Gweled a reer e wazied o hweza en e zivreh hag en e houzoug.

Egile a glask goro anezi en desped d'ar c'hoant he-deus da 'fringal, d'an taoliou lost ha d'an taoliou troad.

Meur a hini euz ar baotred ne zaleont ket da leda o hein war an douar, o zreid en êr, aliez zoken arag ma dez bet amzer da houzoud penaoz.

Brao dezo ma n' o-dez ket paket eun taol-korn en o hov pe en o diadreñv.

Toud ar c'hoariou-ze zo c'hoariou dañjeruz. Al loened gouez ne vez ket enno a c'hoant da c'hoari-kostengou, divesker ha divreh a vez torret meur a wech. Toulzovet e vez zoken unan bennag beb an amzer. Meur a baotr a echu e zevez en ospital hag a wel an arhant a hortoze o'vond gand eun all.

Toud an traou-ze a zo deuet da veza c'hoariou, med e gwirionez n'int nemed al labouriou o-dez bemdez ar baotred da ober en tiegeziou emaint o hounid o bara enno, aliez war-dro daou pe dri mil loen-korn.

Med, kaerroh c'hoari a zo c'hoaz eged toud ar re-ze, dañjerusoh ivez, hini ar redadegou kirri braz.

Homañ n'eo ket tennet euz labour pemdezieg ar baotred-saout. Tennet eo euz buhez kaled an dud a en em gave gwechall en Amerik, pa ranked mond pell euz ar mor, da greiz an douar-braz, da glask douar da labourad, e broiou hag a ne gaved den gwenn all ebed enno, el leh ma ne weled nemed Indianed, el leh ma ranked digas kement tra a veze red kaoud evid gelloud chom beo, ostillou, armou, loened, boued hag all...

Karr braz ar poent-se, an hini a veze greet outañ "chuckwagon", a oa eur harr a beder rod, braz awalh da lakaad toud an traou a veze ezommi outo, eur bern ostillou (bouhilli, morzoliou, heskennou hag all...) eur fourno, teltennou ha bevañs (bleud, kig, holen hag all...) awalh evid c'hweh pe zeiz miz. Staga a ranked pevar marh outañ.

E redadeg ar hirri braz-se, ar "chuckwagons", en devez kenta e vez 32 karr hag a red pevar ha pevar. Setu e vez eiz redadeg en devez-se. Peb karr a vez staget outañ, evel gwechall, eur jao a bevar marh ha gantañ e vez daou baotr : unan, warnañ, da gas ar jao ; egile, da garga ar harr arag ma ya kuit ha goude, d'e heulia war varh beteg penn, tosta ma hell dezañ.

Ar paotr-mañ, kerkent ha ma vez greet sin d'ar pevar garr da vond a en em laka da daol er harr ar bern traou a zo dirazañ, eur fourno, ostillou a beb seurt, teltennou hag all...

Kerkent ha ma vez toud an traou er harr, ar paotr all, ar charretour, a ra d'e jao mond gand ar foeltr da ober eiz gwech tro ar blasenn, en eur heulia mad an hent, ar wenodenn, merket dezañ gand diou linenn wenn. Arabad dezañ kuitaad e hent.

Ar paotr kenta, er memez amzer, e-nez greet eul lamm war e varh hag a ya da heul ar harr, buanna ma hell ha tosta ma hell dezañ, rag, evid gounid, e rankont beza o-daou asamblez da genta.

Goude an eiz redadeg kenta, ne chom ket ken da reddeg nemed eiz karr. Ha pa dez greet ar re-mañ o hini ne chom ket ken nemed daou.

Ar jao hag an daou baotr a vez het da genta er redadeg diweza eo a ya ar maout ganto, da lavared eo ar bern arhant a vez kinniget dezo. Int-i eo a zo ar "championed".

Eun dra iskiz eo gweled ar redadegou kirri-ze. Toud e vezont atao dirag daoulagad an oll, hag ar hirri, beza ma vezont pounner kenañ, a ya gand ar foeltr. Pevar marh kreñv, d'an daoulamm ruz, o moue o nijal en avel, o 'fronellou digor braz, kement kigenn a zo en o horv ken stign ha ma hellont beza, pebez gwel evid an dud a zo ken stign o daoulagad war-zu enno ! Da lakaad ar c'hoari da veza kaerroh c'hoaz emañ an drouz spontuz war ar blasenn : hini paoliou ar hezeg o skei war leur ar blasenn, hini ar moellou

hag ar rojou, hini kirri oh en em stoka, gourriziadennoù skiltr ar hezeg leun a dan, youhadennou ar charretourien ha re ar baotred all, strakadennoù o 'foet ha youhadennou an hanter-kant mil den a zo o selled. Toud an traouze a ra euz ar redadegou-ze eur c'hoari dispar ! Redadegou oto en o hichenn n'int netra.

C'hoariou Calgary a zo bet savet c'hweh vloaz ha tri-ugent zo dija, er bloaz 1912. Chomet int heñvel abaoe. Lakaad a reont goulskoude beb bloaz muoh-mui a dud da zond da zelled outo.

Soñjal a heller e padint pell c'hoaz. Derhel a reint zoken da zacha muoh-mui a dud, keit ha ma vo saout ha kezeg er Hanada hag er Stadou-Unanet ha keit ha ma vo paotred yaouank (ha merhed yaouank ; rag komañs a reont ivez da en em ziskouez er c'hoariou) hag a n'o-do ket aon na rag ar boan na rag an dañjer, paotred kreñv ha skañv o membrou, re hag a blij dezo lakaad o buhez e riskl dirag an dud evel ma reont benvez en o labour, pa ne vez den ebed o selled outo.

Evid echui e karfen konta eun dra disheñvel en em gavet ganeom er gêr-ze. Eun dra hao e-neus muoh a dalvoudegez evidom-ni eged toud ar pez on-eus bet da weled er c'hoariou.

E Calgary, ez eus o chom eur houblad tud yaouank deuet di da labourad euz Lyon. Louis, va hamarad, hag e hwreg a anavez anezo pell zo.

An daou-ze eo o-doa lakaet derhel evidom ar gampr er motel ha kemeret on billiji evid ar c'hoariou.

Pa 'z eom d'o hlask, n'emañ ket er gêr. Eet int da bourmen d'ar Stadou-Unanet. Med ni ne hellim ket renta ar pez a dleom dezo, rag kuitaad Calgary a rantom araog ma vint distro. Setu ez eo eun tamm diêz on penn. En em houlenñ a reom : "Penaos en em denna evid paea on dle ?"

Soñjal a reom mond da di eur marhadour fleur da houlenñ digantañ kas dezo eur podad fleur, pa vint distro, ha gantañ an arhant on-eus da restaol dezo.

Ar marhadour, eun den yaouank c'hoaz, pemp bloaz ha tregont marteze, a zo eun den hegarad. Asanti a ra dioustu, beza ma doa lavaret deom ar plah a zo o labourad gantañ ne rafe ket.

Paea a reom dezañ ar podad fleur, rei a reom dezañ adress an dud hag an arhant da renta dezo.

Goulenñ a ran digantañ neuze : "E pe leh, aotrou, e hellim kemered an otobuz evid distrei d'on motel ?". Hemañ a zo ugent kilometr da nebcuta euz ar vagazenn.

"O ! Aotrou, emezañ, e kreiz-kêr ne deu otobuz ebed en deveziou-mañ. Re a dud zo e kêr evid ar goueliou. Kemerit kentoh eun taksi. Ma karit e houlenñ unan evidoh dioustu". Hag heñ da gemered e delefon ha da houlenñ an taksi.

Med, kaer e-neus ober an niverenn war ar hadran, diou, teir, peder gwech, ne deu respont ebed dezañ. Chom a ra mud an telefon. "Gweled a rit, eme an den, ne hellan ket zoken kaoud taksi ebed. Med arabad deoh ober bilou. Me a zo o vond da gas ahanoh d'ho motel. N'ho-peus nemed gortoz eur pennadig".

Pemp munut goude, emaoñ gantañ en e oto.

"Ne dalv ket ar boan deom, emezañ, klask mond dre ar ruiou braz. Re a dud a zo. Klaskon kentoh ruiou bihan. Eun tamm e vo hirroh an hent. Med kalz e vo ãsoh haq ez aïm buannoñ". Hag ez eom dre ar ruiou bihan.

Eun hanter-eur a lakaom da ober an ugent kilometr beteg ar motel, med kaset om beteg dor on hambr.

Pa houlenñ digand an den pegement a dleom dezañ, "O ! Netra ebed, aotrou, emezañ. Plijadur em-eus bet o renta servich deoh". Hag ez a kuit.

Ne anaveze ket ahanom. N'e-noa ket biskoaz gwelet ahanom araog. Ne welo ket ahanom ken. Med unan eo euz an dud-se, leun a volonteze vad, rouez awalh bremañ, prest atao da zikour ar re o-deus ezorñ, memez an estrañjourien, heb gortoz gwenneg ebed.

Ni, ne oam ket gouest da echui on beaj war netra ebed gweloh.

21) Pennad

Evid kloza

Eur wech all on-eus greet eur veaj gaer.

Daou vloaz zo, er Stadou-Unanet on-oa gwelet dija eur bed all. Er

Hanada, ez om bet adarre en eur bed all, med disheñvel ouz hennez.

Er Stadou-Unanet on-oa kavet eur vro kalz tomoh ha kalz sehoh ; gwelet on-oa enni dreist-oll douar zeh ha dezertou braz. N'on-oa bet diraq on daoulagad douar-labour, trevadou druz enno, ha koadou iskiz, gwez uhel spontuz enno, nemed beb an amzer, e-touez ar menezioù, en draoñiennou a vez dour awalh enno.

Er Hanada ne oa ket heñvel an traou, na tost. Eno e vez kalz yennoh an amzer ha kalz e vez muioh a hlao. Er Stadou-Unanet, d'ar bemzeg a viz mae, ne oa koulz lavared tamm erh ebed ken, ha tamm skorn ebed, war gern menezioù a 4.000 metr. Er Hanada on-eus gweled an erh o koueza e-pad eun hanter-devez d'an 18 a viz even ha teo c'hoaz ar gwiskad erh war eur skorn hag a ne deuz ket biskoaz war ar menezioù.

Setu eno, e-leh steriou dizehet, on-eus kavet steriou braz iskiz, ledan ha don an dour enno, milierou a lennou, lod ken ledan ha ma lavarfed ez eo pepini anezo evel eur mor braz.

E-leh kaoud da dreuzi dezertou treud, dizolo hag a ne weled ket ar fin anezo, on-euz bet da vond dre goadou divent, heb fin ebed, med koadou disheñvel, kalz stankoh ha kalz bihannoh ar gwez enno, nemed war bord ar mor Pasifik. Eno, on-eus bet da weled gwez pin ha gwez sapr tost ken teo ha ken uhel hag gwez "sequoia" braz ar Stadou-Unanet.

Med rankoud a reer lavared ez eo ar hoadou braz-se, en o 'feson, eur seurt dezertou, rag n'eus den ebed o chom enno. Ne gaver enno nemed anevaled gouez, ar re a weler e koadou ar Stadou-Unanet : kirvi braz, taroed gouez ("bison", niverusoh marteze), arzed du, deñved ha givri gouez. Eul loen all a gaver ivez aliez awalh, ar hastor.

An iskisa goulskoude eo gweled, er Hanada, evel er Stadou-Unanet, loened gouez hag a n'o-dez aon ebed rag an dud.

Kaved on-eus ivez, war on hent, tud disheñvel ouzom, re hag a n'o-deus ket nag ar memez feson da weled an traou nag ar memez feson da veva. Med toud ar re on-eus bet da gaoud darempred ganto a zo bet en on heñver tud seven hag hegarad.

Evel er Stadou-Unanet, er Hanada, an dud ne en em zalhont ket war ar mêz. En em voda a reont, en em vernia zoken, e tiez uhel, e touriou, er hêriou braz, e bord ar steriou, e bord al lennou, el leh ma vez uzinou da rei labour.

Rag, er Hanada, ez eus ivez uzinou a-leiz. Eur vro binvidig eo, unan zoken euz re binvidika ar bed. Ne vank netra dezi, nag houarn, na glaou-douar, na petrol, nag aour, nag arhant, nag hini ebed euz kement metal a zo ezomm outañ, na dour da ober elektrisite.

Setu an dud a hounid mad o buhez e-barz, ar bevrvasa da vihanna, rag, n'eus forz pegen souezuz eo, en eur vro ken pinvidig ez eus eur bern tud dilabour.

O weled an dra-ze, e oa deuet deom en en houlen : "Daoust hag eürusoh eo an dud eno ha dre awañ ?" E gwirionez ne gav ket din. Re a dud dilabour a zo. Ha ne gredan ket e vije kontant zoken ar re o-deus labour hag a hounid mad. Ne gav ket dezo e hounezfent awalh c'hoaz. Diêz eo karga e gov d'ar paour-kêz den. Dreist-oll pa ne vez ket ken en e benn nemed ar c'hoant da gaoud arhant.

Eur vro gaer eo ar Hanada. On bro deom-ni n'eo ket, sur, na ken braz, na ken pinvidig. N'eo ket zoken marteze ken kaer. Med en desped da ze, ha n'eus forz pegen plijaduruz eo bet on beaj, goude eur niz-hanter tremenet ganeom eno, e oa mall ganeom distrei d'ar gêr.

An dra-mañ, a zoñjan, eo c'hoaz ar gwella tra a denner atao euz eur veaj gaer. Ar barz gall koz hen gouie mad dija pa lavare :

Eüruz an hini e-neus greet eur veaj gaer ...  
Hag a zo goude distroet, leun a 'furnez,  
Da veva e-touez e dud ar rest euz e amzer !

Ar veaj a zesk traou a-leiz d'an den ; digeri a ra dezañ e spered war meur a dra. Med gwelloh a ra c'hoaz : deski dezañ pegen kêr eo e vro ha pegement e vank dezañ pa vez pell outi.

TAOLENN AR SKEUDENNOU

1 - DELIENN ERABL .....	5
2 - KARTENN AR HANADA .....	7
3 - KARTENN AR VEAJ ER ZAV-HEOL .....	9
4 - KARTENN AR VEAJ ER HUZ-HEOL .....	11
5 - FORT HENRY .....	58
6 - EUN OURZ .....	82
7 - FORT-MAC-LEOD .....	86
8 - EUN ORIGINAL .....	89
9 - HENT-HOUARN ER MENEZIOU .....	97
10 - EUR BIZON .....	102
11 - EUN TOTEM .....	114

1 - DA FOETA BRO ER HANADA .....	13
2 - EUR VRO VRAZ .....	14
3 - AR STERIOU BRAZ .....	16
4 - AL LENNOU HAG AL LAMMOU-DOUR .....	21
5 - AR HOAJOU BRAZ .....	28
6 - AN DUD A EN EM ZALH ER HERIOU .....	33
7 - AN OTOBIZIOU DA GAS AR VIIGALE D'AR SKOL .....	38
8 - AN TIEZ .....	40
9 - AR PREJOU .....	45
10 - DIEZAMANT AN ERH HAG AR SKORN .....	50
11 - EN ONTARIO .....	55
12 - E RANN-VRO QUEBEC - ANOIOU AR BOURKOU HAG AR HERIOU .....	62
13 - AR GALLEG E RANN-VRO QUEBEC .....	67
14 - KUDENNOU RANN-VRO QUEBEC .....	72
15 - ON HENT EN ALBERTA HAG ER HOLOMBI BRITANIK .....	83
16 - AR MENEZIOU ROHELLEG - PARK BROADEL BLANFF HAG HINI JASPER .....	90
17 - MENEZIOU AR HOLOMBI BRITANIK .....	95
18 - VANCOUVER .....	100
19 - ENEZENN VANCOUVER .....	108
20 - CALGARY, EN ALBERTA - GOELIOU BRAZ CALGARY .....	117
21 - EVID KLOZA .....	127

© Y. MIOSSEC  
STUDI N° 19 – JUIN 1981

IMPRIME PAR LE C.R.D.P. DE RENNES  
92, rue d'Antrain  
DEPOT LEGAL 2ème TRIMESTRE 1981  
B. 297

F 18.00